

Buhez ar Zent

Bet savet gand an Aotrou Perrot ; kure Sant-Nouga.

Renket a-nevez gand E. ar Moal, Rener “Kroaz ar Vretoned“

Evid Eskopti Sant-Brieg ha Landreger, gand aotreadur an Eskopti.

Skeudennet gand Ar Gwennek.

Bet embannet e Montroulez e 1912.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

E Tregerieg ne vez ket greet ar hennadur D/Z. Gwechou ‘zo e vez greet gand Moal, gwechou all ne vez ket greet.

E tregerieg c’hoaz e vez lavaret –et e leh –it, er verbou (eil gour liez).

Amañ ne vo kavet nemed ar zent a zo euz Breiz pe a zo tremenet dre Vreiz. Evel-se e vo êzetoh gand tud ‘zo kompren ano o farrez.

Lakaet ez eus bet eun nebeud KENTELIOU, pa zoñjom e talvezont ar boan d’en em zoñjal diwar-benn ar pez a zoñjed en amzer-ze diwar o fenn.

Krennlavar (*a-berz Embann an Hirwaz*) : **Pep sant nevez en-deus e viraklou d’ober .**

Taolenn

SENT	KENTELIOU
Konvoion	Labour zul, labour a gul
Gweltas	Ar vad a reas brezelioù ar Groaz
Sant Gwerok pe Gireg	Buhez ar veneh
An den eüruz Robert Arbrissel	Skolioù kristen ha skolioù dizoue
Sant Jaoua	Chateaubriand.
Sant Gwennole	Bretoned om.
Sant Paol Aurelian	Ar re a beh ‘eneb ar feiz.
Sant Koneri	Ar vered hag an Iliz
Sant Visant Ferrier	Talvoudegez an deskadurez
An den eüruz Loeiz-Mari Grignon a Vonfort	Deverioù ar priegoù an eil e-keñver egile
Sant Brieg	An eskumunugenn
Sant Servez	Bremañ n’eus ken a viraklou
Sant Brendan pe Brevalar	
Sant Erwan	
Sant Donasian ha sant Rogasian	PARDONIOU HA PELERINACHOU
Sant Jorand	BRO-DREGER HA BRO-GERNE.
Sant Ronan	e tizoloas skeudenn an Itron Varia
Sant Herve	Pardon ha pelerinaj Itron Varia an Enez
Sant Herbot	Pardon ha pelerinaj Itron Varia ar
Itron Varia Rumengol	Feunteunioù
Sant Mewen	Pardon ha peleinaj Itron Varia ar Goz Yeoded
An Itron Santez Elflez	Pardon ha pelerinaj Itron Varia Gwioded
Sant Yann ar Biz	Pardon ha pelerinaj Itron Varia Sklêrder
Sant Salaun ar Merzer	Pardon ha pelerinaj Itron Varia a Wir Mane
An Itron-Varia Wir-Zikour	Itron Varia Rochefort
Sant “Lunaire“	Pardon Itron Varia Ar Goz-Iliz
Sant Gurthiern	Pardon ha pelerinaj Itron Varia Vulad
Sant Goulven	Pardon ha pelerinaj an Aotrou Sant Matilin
Sant Divi	Monkontour
Sant Thivisiau	Pardon ha pelerinaj Itron Varia Glerin
Sant Judok	Itron Varia ar Vur, en Montroulez

<p>Sant Tenenan Santez Anna Sant Samson Sant Gwillerm Sant Arzel Sant Elouan Sant Jili Sant Dogmael pe Toll Pardon braz ar Follgoad Chapel ar Follgoad, e Pañvrid ar Beskont Sant Levias Sant Korneli Sant Sezni Sant Vaze Sant Suliao, pe Suliak Sant Melar Sant Mauris Charlez Bleiz Sant Gweltas Sant Alor Sant Konogan. Sant Gouenou. Sant Alor. Sant Alan. Sant Magloar. Sant Milio Sant Kado Sant Gwenael Ar plah eüruz Frañseza Amboaz Sant Iltud Sant Eflamm Santez Honora Santez Trifina ha Sant Tremeur Sant Malo Sant Melani Sant Emilion Sant Houardon Sant Tual Sant Alar pe Eler Sant Beuzeg Sant Envel¹ Sant Korantin Sant Yann diarhen Sant Judikael Sant Eler</p>	<p>Pardon ha pelerinaj Itron Varia Kernitron Pardon ha pelerinaj Sant Yann ar Biz Pardon ha pelerinaj Itron Varia Perroz Hamon</p>
---	--

¹ Envel : en oll heriaduriou e vez skrivet “Lok Envel“. Sur a-walh ez eus eur fazi. Ar **c (k)** euz al latin “locus“ = leh, a deu da veza eur **g** dirag eur vogalenn. Marteze n’eo ket “Envel“, mez “**Heñvel**“.

Konvoion : abad Redon (“-871)

Pempved devez a viz Genver

Bremañ zo 2000 bloaz, ar vro gaer ma vevom enni a oa anvet Bro-Arvor. C’hweh vloaz hag hanter-kant a-raog donedigez On Zalver, Jul Sezar a drehas an Arvoriz hag a lakaas o bro dindan galloud ar Romaned. Pemp-kant vloaz goude, poblou gouez an hanternoz, an Alaniz hag ar Zaozon, a zaillas war broiou ar huz-heol ; gouenn an Arvoriz a oe flastret hag an Arvor devet. (460).

P’en em daolas ar Zaozon da ober euz Breiz-Veur ar pez o-devoa greet euz Bro-Arvor, e oent diarbennet e-pad daou-hant vloaz. Mez dre ma kreske o niver, kaer a oa stourm oute, ar Vretoned, a-leiz, a lavaras kenavo da zouar kuñv o havell hag a deuas da zouarañ war aochou an Arvor.

*Ouz o sturiañ e veze meneh hag eskibien,
O devoa kent o bleinet² ouz an enebourien.*

Kentañ tra a rejont, pa daoljont o zreid war ar horn-douar-mañ, e oe e vadezi. E anvañ a rejont Breiz, ano ar vro goz. N’o-devoa degaset gante nag aour, nag arhant ; mez bezañ o-devoa eur yez pinvidig hag eur feiz virvidig, ha pa vez lemm ar spered ha glan ar galon, gand poanial, e teuer bepred a-benn da ‘n em denn.

An nebeud Arvoriz o-devoa gallet tehed ‘raog dir ha tan ar ouezidi, a zegemerar ar vadeziant : meskañ a rejont o gwad gand hini ar Vretoned, hag, euz daou rumm tud ma oant, e rajont eur bobl nevez : hini Bretoned Vreiz-Vihan.

Mez abred e pauejont da ‘n em glevet, ar pez a roas tu da impalaer Bro-Hall da gemer o bro da astenn e rouantelez. Gand ar vez da vezañ gouarnet gand diavêzidi, e teujont adarre da ‘n em glevet. D’an 28 a viz Genver 814, Charlez, an impalaer braz, a varvas. Raktal ar Vretoned a zavas en o zav, a argasas euz ar vro o mistri hall, hag a lakaas en o fenn tud euz o gouenn, euz o gwad.

Brezel a strakas. Morvan Lez-Breiz³ ha Gwiomarc’h, rouaned Vreiz, an eil war-lerh egile, a varvas evid harpañ gloar ar vro ha divenn douar o havell.

Ar Hallaoued a oa treh.

Er bloaz 826, an impalaer Loeiz a anvas Nominoe, kont Gwened, da houarnet Breiz. C’hoant Nominoe ‘oa rei lamm da waskerien e vro, mez, evid dond gwelloh a-benn euz e daol, e kemeras e amzer. Er mare-ze, Breiz n’ee nemed beteg Gwened, ha c’hoaz ar gêr-ze a oa d’ar Hallaoued. Ar vro etre Gwened hag an Naoned a oa eta eun ode, eun nor digor-kaer d’ar Hallaoued da zaillad war ar Vretoned. Keid ma ne vije ket stanket an hent-se hag astennet Breiz beteg ster Redon, Breiz a oa bepred skeudig he doare.

C’hweh beleg, Bretoned o-hweh, Konvoion en o fenn, a ‘n em gargas euz al labour-ze.

Konvoion a oa ganet en Komblesag, fin an degved kantved. Er bloaz 820, e oe beleget, ha Raghemer, eskob Gwened, a roas dezañ unan euz ar hargou kentañ en e eskopti. Mez ar beleg yaouank a roas abred an dilez euz e garg. Gand pemp beleg all, eh eas etrezeg ar zav-heol. O vezañ degouezet en Redon, e kavas al leh-se diouz e zoare, hag e houlennas digand Ratuili Lesfao, perhenn an douar, aotre da ziazezañ eno eur manati. (832). Raktal e oe roet dezañ e houlenn. Ar manati-ze, savet gand *Bretoned a hede bemdez evid silvidigez Breiz*, a oa kenkoulz arru gand Nominoe ha ma oa gwelet fall gand ar Hallaoued.

² bleinet : notenn gand an oberour : Da lavared eo, o renet.

³ Morvan Lez-Breiz : Notenn gand an oberour : Witcar, kannad impalaer Bro-Hall, a deuas eun devez da houlenn digantañ troajou ar Vretoned, ha Lez-Breiz a respontas : « Kerz prim da gaoud da vestr, ha lavar dezañ n’ou ket o chom war e zouar ha ne fell ket din plegañ d’e lezennou. »

Nec sua rura volo, nec sua jura volo.

En amzer-ze (833), an impalaer Loeiz a oe prizoniet gand e vugale. Nominoe a gemeras e du ahane evid ober eur bale beteg manati Redon. Dond a rejont da lavared d'an abad e oa letanant an impalaer o hedal digor en-kichenenn an nor-dal. Kerkent, Konvoion hag e veneh a yeas da benn hent dezañ hag e zegemeras gand lidou kaer. Kalon Nominoe a dride, en deiz-se, gand al levenez. Kernnerzi a reas servicherien an Aotrou Doue ; goulenn a reas sikour o fedennou, ha prometi ober vad deze bemdez, e-pad e vuhez.

Ouspenn lavared a reas, rag kinnig a reas deze, evid leve, an douarou a oa gand an abati hag ar re dostañ tro-war-dro. En em dremen a reas ken brao, zoken, diouz an impalaer, ma stagas hemañ pemp parrouz all bennag ouz ar pezh a oa roet 'benn neuze (d'an 30 a viz Eost 836).

Meneh Konvoion a labouras an douarou-ze. Tiegeziou Bretoned a zavas warneze a-gleiz hag a-zehou ; an hent a roe digor d'ar Hallaoued da zaillad war Vreiz a oa stanket. Meneh Redon o-devoa greet an taol.

D'an 20 a Vezeven 840, Loeiz, impalaer ar Hallaoued, a varve. Nominoe, raktal, a zispakas banniel Breiz sonn hag uhel. Mab Loeiz, ar roue Charlez ar Moal, a hoantaas ober dezañ e blegañ, mez trehet e oe en Ballon⁴, en miz Mezeven 845. Breiz a oe astennet, da vad, beteg ster Redon.

Nominoe a gasas neuze e vignon Konvoion da Rom, gand eur gurunenn aour ha perlez, da ginnig, en e ano, da Leon IV, a oa neuze war Gador Sant Per.

Eskibien a oa d'ar houlz-se, en Breiz, re Wened, Kemper, Kastell-Paol ha Dol, hag, ouspenn ne oant ket Bretoned, e oa meur a dra all c'hoaz da damall deze. Nominoe a houlenne digand ar pab o barn hag o zorri.

Goulenn a ree c'hoaz relegou unan euz ar baped santel a oa bet kurunet o buhez dre ar verzerenti.

Goulenn a ree, dreist-oll, aotre da zougen kurunenn ha da vezañ kurunet gand an Iliz evel mestr en Breiz.

Ar pab a roas da Nominoe kement a houlenne.

Beteg neuze, arheskob Tour en-devoa galloud war eskibien Vreiz ; eskopti Dol a oe greet eun arheskopti anezañ. Ar pevar eskob gall a oe barnet ha torret, hag eskibien vreizad lakaet en o leh. Eskibien Zant-Brieg ha Landreger, eskibien heb eskopti, koulz lavared, a oe savet peb a eskopti deze, 'n eur grennañ diwar ar re all tro-war-dro. Evel-se e oe krouet *seiz eskopti Breiz*, ha Breiz distaget a-grenn diouz Bro-Hall, evid treo⁵ ar relijion koulz hag evdi an treo all.

Nebeud goude, (848), oll bennou braz ar vro a 'n em vodas e Dol, hag eno, dirag e bobl, Nominoe a oe kurunet roue *war Vreiz a-bez*. An deiz-se, heb mar ebed, kalon Konvoion a dridas gand al levenez, rag den, muioh evitañ, n'en-devoa roet dorn da Nominoe da zigabestrañ ar vro.

Nominoe a varvas tri bloaz goude-ze. War e varo, e houlenas bezañ sebeliet en Redon (851).

Konvoion a veskas e relegou gand e re, ugent vloaz bennag goude. Ar maro n'hallas ket lakaad diparti etreze, ken unanet 'vel m'oant bet en o buhez.

Notenn gand Embann an Hirwaz : Konta a ra Moal an istor evel ma veze kontet en e amzer gand nasionalisted Vreiz. Bremañ ez eus bet diskoachet traou disheñvel-braz.

War Wikipedia ez eus kaoz euz emgann Ballon.

⁴ Ballon : N'anavez an emagnn-ze nemed gand Joinville, a veve 500 vloaz da houde. Ne ouezer ket peleh ema just Ballon, pe er Sarthe, pe er Morbihan.

⁵ treo : tregerieg : traou.

Sant Gweltas

(C'hwehved devez a viz C'hwevrer)
Abad (493-570)

Gweltas, ar yaouankañ a hweh a vugale, a hanas en Arcluyd, er bloaz 493. Mab e oa da Gaunus, roue Bretoned ar Strad-Cluyd. E dad a oa kristen hag a gasas anezañ abred da Vro-Geumri, d'ar skol gnd sant Ildud.

Pevar euz ar re a reas anaoudegez gante eno a deuas da veza eskibien diwezatoh : Divi, Leonor, Paol ha Samson.

En Lanildud, Gweltas a 'n em daolas d'ar studi a dro vad. E hoant a oa deski ha rannañ e zeskadurez en-dro dezañ. Da bemzeg vloaz, e kimiadas diouz e vestr karet hag e vignoned vad hag eh eas da skoliou vrasañ Bro-Hall, evid parfetaad e studi gand mestrou ha gand doktored euz ar re gentañ. Evel ar gwenan e ree. Mond a ree du-mañ, du-ze, da gutuill pezh a vad a gave war e hent, evdi ober gante eun teñzor a zedskadurez hag a furnez.

Sdeiz vloaz e chomas en Bro-Hall. Neuze e tistroas d'e vro, ha kerkent, e teredas e-leiz a dud yaouank d'ar skol davetañ.

Beleget e oe da bemp bloaz warn-ugent. En e brezegennou leun a dan, e reas neuze eur brezel didruez d'an oll siou fall a wele en-dro dezañ ; lakaad a ree, zoken, ar rouaned da grenañ.

Er Strad-Cluyd, kristennaet gand sant Finian, 'oa bet greet droug d'ar relijion gand ar Zaozon digristen. Gweltas a zavas a-nevez ar pezh a oa dismantret, hag a hwezas⁶ zoken, e-leiz a baganed da Jezuz Krist. War galv santez Berhed, abadez Kildare, e treuzas ar mor da vond d'an Iwerzon. Eno ivez, abaoe m'oa maro sant Patrik, ar relijion a yee fall an treo ganti. Gweltas, kentañ tra a reas, a oe sevel eur skol-veur en Armagh, hag ahane e zeskibien a yeas dre ar vro, hag a lakaas e gelennadurez kristen da vleuniañ ha da zougen frouez evid ar baradoz.

War-dro ar bloaz 530, e tizroas da Vreiz-Veur da brezeg. Eno neuze e skrivas lodenn gentañ euz e levr brudet "De excidio Britanniaë" : Dismantr Breiz. Anez al levr-ze, eur hantved penn-da-benn euz buhez on gouenn, ar bempved, ne vije deut netra ebed anezañ beteg dim, kemend-all a zarvoudou braz ha skrijuz a hoarvezas en e gerz.

*

War-dro ar bloavezh 840, e kuitas Bro-Zaoz, evid mad, dre urz an Aotrou Roue. Treuzi a reas ar mor ha dond en Breiz-Izel. En enezenn Houad, er Morbihan, eh eas da chom. Tremen a ree e amzer eno, pell diouz trouz ar bed, er studi hag er binijenn. Ne ree nemed tri bred ar zun ; war an douar e kouske, eur mên dindan e benn. An enezenn-ze ne oa ket a dud o chom enni nemed eun nebeud pesketaerien. Gweltaz a lakae bemdez lod pe lod euz e zevez d'ober skol deze ha da zeski deze o relijion. Ar re-mañ, pa'h eent da besketa, a gonte d'ar besketaerien all pesort den e oa Gweltas ha pesort madezou a ree d'an dud. War gement-se, e oe anavezet abred e-barz ar vro. Dond a reas kalz a dud da houlen bezañ desket ha gouarnet gantañ.

Kement a oa neuze ken ma rankas kuitaad e enezenn ha mond war douar braz da glask eul leh da zavel eur manati d'o lojañ. Kaved a reas ar pezh a glaske en eur horn-douar tost d'ar mor, a veze greet Rhuys anezañ. Eur skol ivez a zavas eno hag a oa barr-leun a vugale en berr-amzer.

⁶ hag a hwezas : ? "ouezas" ? a zegasas.

Bezañ 'oa dija en Breiz manatiou savet tro-war-dro dezi, 'vel touriou-tan d'he sklêrijenni. En Bro-Leon e oa manati Kastell hag hini Baz ; en Bro-Gerne, hini Landevenneg, hag hini Loktudi ; en Bro-Dreger, hini Landreger ; en Domnone, hini Sant-Brieg. Ne felle ken, evid peurober an dro, nemed unan en Bro-Wened.

Pa welas e helle e abati nevez mond en-dro heptañ, e fellas da Weltas tehel a-raog ar vrud hag en em dennas en eur peniti distro, en koajou Kistrebeh. Eno e skrivas an eil lodenn euz e levr *De Excidio Britanniae*, e-leh ma sko dizamant war ar pehejou a gase Breiz-Veur da goll, re ar bobl, re ar veleien ha re ar pennou kurunet.

Goude-ze, Gweltas a labouras en Bro-Gerne, hag a zavas meur a vanati, war skwer hini Rhuys. Beteg en Pennmarh hag en Beg-ar-Raz, e chom c'hoaz, en on amzer, ar roudou aneze.

Mar deo sant Paol, sant Tual ha sant Brieg ebestel Vreiz-Izel en tu an hanternoz, Gweltas eo heh abostol en tu ar hreisteiz.

Mervel a reas en enezenn Houad, d'an 29 a viz Genver 570.

En eskopti Sant-Brieg, e kaver eun deg parrouz bennag, euz a Laniskad da Garnoed ha da Gintin, hag o-deus miret stank ivez roudou an abad santel.

Notenn gand an oberour :

En Laniskad, emañ an iliz war e ano ; e vuhez a zo livet war he mogeriou. Diskouez a reer eno c'hoaz eur chapel hag eur grotenn⁷, gand ar gwele mên e-leh ma lavarer e tremene an noz, en kerz e visionou er vro-ze.

En Sant-Nikolaz (en Lokeltaz) e kaver eur chapel savet en e enor. En Kanuel, en-kichenn stank ha kastell ar Pelineg, ez eus bet ivez eur chapel ; en Laruen, en Kergiliou, ez eus bet eun all ; en Sant-Jil-Plijo, Sant Gweltaz ar Prad ha Sant Gweltaz a Gerginere ; en kichenn Senven, Sant Gweltaz ar Stivell ; en Mael, Sant Gweltaz a zo euz e chapelioù koz brudet gwechall.

En Karnoed, e-leh e savas, moarvad, eur manati, e kaver, en eur chapel gaer gouestlet dezañ, eur pikol mên toullet evel eun arched hag a anver *Bez sant Gweltaz*. Er bez-se, war a greder, 'zo bet miret gwechall lod euz e relegou.

En Magor, leh eo patron an iliz, ez eus eur pardon kaer, deiz gouel ar Zakramant, darempredet gand e-leiz a belerined a ya d'e bedi 'vid o hezeg.

KENTEL

Buhez eur bobl

Ar poblou a vev hag a varv evel an dud. Ar poblou a vev ar hosañ eo ar re a oar diazezañ o amzer da zond war o amzer dremenet ; ar re, hag e-leh nah o re varo, a gendalh o labour ; ar re, hag o vezañ n'int ket taget gand kleñved an nevezentiou, a zastum gand doujañs madou ene, madou spered, ha madou korv ar re goz ; a zo kempenn ha piz warneze, hag o lak da vond war gresk, evid ar re a dle dond war o lerh.

Pobl Vreiz, krouet gand ar zent koz evid bezañ hader ar wirionez dre ar bed, a zalhas, e-pad mil bloaz, e renk e-touez poblou kaerrañ an douar. Sioulig, n'eus mui anezi nemed ar skeud euz ar pezh m'eo bet gwechall : an diegi, an diouiziegezh hag an dizunvaniezh he stlej war-eeun d'ar bez.

Gwella 'zo, n'haller ket barn eun den keid ma vo buhez ennañ. Eur bobl ivez, keid ma ne nah ket he Doue, ha keid ma vir he mez, a zalh en he daouarn an alhwez a lakaio he chadenn da gouezañ, abred pe ziwehad ; hag ar Vretoned, evid c'hoaz, n'o-deus ket nahet nag ar Hrist, Doue o zadou, nag o yez, ar brezoneg. Setu ma haller c'hoaz kaoud eun elfenn fiziañs en o amzer da zond. Ar pezh a zo bet deh, daoust n'emañ ket hirie, a hall bezañ warhoaz !

(Notenn gand "Embann an Hirwaz" : Se oa bet skrivet kant vloaz 'zo. Cheñchet braz ema an traou hirie).

⁷ eur grotenn : galleg : eur heo.

Evid an oberour e vez gourel ar ger “pobl“. Lakaet eo bet gwregel er skrid-mañ.

KENTEL

Al latin en Iliz

Perag ne vez ket lavaret ofisou an Iliz en yez ar vro .

-Abalamaour a dra-ze a dorrfe diou unvaniez kaer an eil hag eben, *unvaniez ar gredenn* hag *unvaniez ar bedenn*.

I

Ma vije lakaet yez peb bro da zervijoud evid ofisou an Iliz, e savje buan a-walh kemm etre kelennadurez en eskopti, en eun amzer, hag ar gelennadurez-se en eun amzer all ; rag ar geriou, darn aneze, a zo diêz anavezoud o zalvoudegez ; hag eur ger, hag a lavaro kement-mañ d’eun den, a lavaro muioh pe nebeutoh d’eun all. Eur ger hag a lavar kement-mañ bremañ, a-benn kant vloaz amañ, hag a-raog marteze, e vezo kresket pe verraet e halloud. Evel-se e c’hoarvez gand kement yez veo a zo, gand kement yez hag a vez komzet e-touez an dud ; mez kement-se ne hoarvez ket gand eur yez varo, evel al latin. Ar yez-se, pobl ebed ken war an douar ne gomz anezi ; he geriou eta o-deus eun dalvoudegez ha n’o-deus nemed unan. Dre al latin, kelennadurez an Iliz, o vond a-dreuz ar hantvedou hag a-dreuz ar broiou, ne deuo cheñchamant ebed enni : ar pezh a greded deh hag a greder hirie hag a vo kredet warhoaz. Gand al latin, unvaniez ar gredenn n’eus dañjer ebed eviti.

II

Ma vije kanet ofisou an Iliz en kement yez disheñvel a zo war an douar, ar gristenien a vije diêz deze heuill an ofisou ma’h afent en diavêz-bro ; e-leh bremañ, e haller ober tro ar bed, kleved an overenn en mil eskopti disheñvel, ha kana enne gand al levr a zervij da bep hini en e barrouz. N’eus forz pegen pell e vezer diouz ar gêr, p’en em gaver en iliz, e kreder bezañ er gêr. Al latin a lak unvaniez ar bedenn hag ar gredenn, etre kristenien ar bed oll.

Sant Gwerok pe Gireg

Abad (VI^{ved} kantved)

Gwerok a deuas e Breiz-Izel war-lerh sant Tual hag a zavas eur manati hag eun iliz en beg gourenezenn Landreger, el leh a anver bremañ c'hoaz euz e ano, Lokireg.

E-leiz a dud a zerede di d'e gaoud, hag eñ, o vezañ ne gare nemed ar vuhez didrouz, e teuas kement-se buan d'e skuizañ. Mond a reas eta da Vro-Leon, hag eno eh eas pellañ m'hallas, er *hoad donnañ*, a holoe, en amzer goz, ar vro 'zo bremañ dindan Plouvian, Plabenneg ha Plouzeniel.

Chom a reas en eun draonienn deñval ha gouez, el leh a anver bremañ Traoñ Gwerok, hag eno, gand barrou, e savas eun tammig peniti hag eun ti-bedi en kichenn.

E zoñj 'oa tremen eno, sioulig, ar rest euz e vuhez, o 'n em rei, beb eil, gwalh e galon, d'ar bedenn ha d'ar binijenn. Mez ar vrud anezañ a dehas, kaer en-devoe en em guzad, rag n'eo ket mad e chomfe goloet ar goulou a zo barreg da daol sklêrijenn gaer.

Sant Paol a deuas beteg dezañ hag hen pedas da vond d'e heul, da rei dorn dezañ da astenn, dre Vro-Leon, rouantelez Jezuz-Krist. Gwerok, da gentañ, ne oe ket nemeur en pennad da ze. Paol a reas dezañ neuze ar gourhemenn mond gantañ, ha gand aon da zizenti ouz Doue, an abad santel a heuillas e eskob kerkent.

Goude bezañ hadet komzou Doue a bep tu, brevet e gorr gand e labouriou tenn hag e binijennou garo, gonezet gantañ e gurunenn, e varvas en karantez ar Hrist, en Landerne, war-dro hanter ar c'hwehved kantved.

E zeski bien, gand aotre eskob Leon, a zebelias gand doujañs e gorr en Lokireg, el leh m'eo karet ha pedet c'hoaz e ano benniget.

War a lavar ar re goz, sant Gwerok a gavas eun devez, en Kastell, da-geñver unan euz goueliou ar Werhez, eur gemenez o wriad war dreujou he dor. Gourdrouz a reas anezi, hag hi ha respont kerkent dezañ n'he-devoa micher all ebed da hounid he bara, hag e ranke debri d'an deziou gouel koulz ha d'an deziou labour. 'Dal ma oa kouezet ar gomz-se euz he genou, e teuas nodet heh izili, ha ne oe ket evid fiñval, hiviziken, nag he divreh nag he zreid.

Anzañ a reas neuze he fehed.

Yun ha pedi a reas e-pad eiz deiz dioustu ; goulenn a reas gand sant Gwerok dond d'he gweled. Hemañ,, o weled he glahar, a bareas anezi gand sin ar groaz.

Evid diskouez heh anaoudegez vad, ar gemenez a roas he zi d'ar zant, a reas anezañ eur chapel d'ar Werhez, a oe lesanvet chapel Itron-Varia-Kreisker.

Yann Montfort, duk Breiz (1345-1399) a reas sevel eur chapel nevez el leh-se, ha warnezi emañ kaerrañ tour dantelezet a zo er bed oll.

KENTEL

Labour zul, labour a gul

Red eo debri bemdez evid chom beo, mez n'eo ket red bezañ bemdez stag ouz al labour, a-drugarez Doue, evid kaoud bara da zebri. N'eus den ebed, ha goude labourad c'hweh devez, ne hounezfe ket a vara evid seiz.

Hag a-hend-all, al labour zul, e-leh pinvidikaad an den, e barourraad ne ra ken. Ar horv n'eo na dir hag houarn ; ezomm en-deus da baouez, beb an amzer, ha goude diuskuizañ, eh a kalz gweloh en-dro. N'eo ket an neb a zo aketusañ war e labour eo a labour ar muiañ. Diskuiz ar zul a zo greet evid brasañ mad ar horv.

Mez an den, n'eo ket eur horv hepken anezañ. An den a zo kalon, an den a zo spered, an den a zo ene : spered hag ene an den o-deus ezomm euz ar zul.

Daoust hag eur vuhez eo bezañ daoubeleget bemdez war an ero, heb galloud diskuizañ gwech ebed, da zoñjal, da gared ha da zével an daoulagad 'trezeg en neñv ?

D'ar zul, dreist-oll, eo e vev an den e vuhez den. D'ar zul, dreist-oll, eo e vev an den e vuhez kristen ; d'ar zul eo e weler ar gerent ; d'ar zul eo e lenner hag e kemerer el levriou magadurez ar spered ; d'ar zul eo e taouliner war beziou ar re varo, e-tal an aoter vraz hag e-tal an daol zakr ; d'ar zul, pa vez peurhreet an dever en-keñver Doue,

Eo en em roer d'ar c'hoariou

A reas, en on raog, on zadou.

Karom ar zul ! Ar broiou ma virer enne ar gwellañ ar zul eo ar broiou pinvidig. Daou hent a zo da vond da baour, a lavare person Ars : laerez ha labourad d'ar zul. Hen gweler a reer sklêr a-walh.

Labour an den n'eo ntra en-kichenn labour Doue. Kaer ho-peus hadañ, ma ne lak ket Doue an had da zevel, n'ho-pezo netra.

Ya ! soñjit, ma breudeur, red eo bennoz Doue

Warnom, war on loened, war on madou ive' !

Bep sul, gand devosion, deom 'ta d'an Iliz,

Hag on-bezo heol skeduz, glao pinvidig ha gliz.

An den eüruz Robert Arbrissel

Prezeger *Brezel ar Groaz en Breiz*
Diazeour Urz Fontevrault (1047-1117)

Robert, eur Breizad hag a reas enor d'e ano, a hanas en Arbrissel, seiz leo diouz Roazon, er bloaz 1047. E dad hag e vamm hen savas en karantez ar Werhez hag en doujañs Doue.

Ober a reas e studi en Breiz, da gentañ, hag en skol-veur Bariz, goude-ze, ha dond a reas da vezañ beleg ha doktor. Sylvestr de la Guerche, a oa neuze eskob Roazon, o klevet ar vrud vad anezañ, a fellas dezañ e gaoud en e lez, evid e zikour da gas e eskopti en-dro.

Ar beleg yaouank a lakaas e oll galon d'ober evid ar gwellañ al labour a oa fiziet ennañ. Da varo e aotrou, pevar bloaz goude, ar re o-devoa bet da gemm dioutañ a 'n em zavas en e eneb. Robert, e-leh derhel penn deze, a yeas da Angers, da ren skoliou-meur ar gêr-ze, en plas Marbod anvet da eskob en Roazon. Eun nebeud bloaveziou goude-ze, en em dennas en koad Kraoñ, en-kreiz etre an Añjou ha Breiz.

Eno e renas eur vuhez euz ar re strisañ, ha daoust da ze, e-leiz a dud a deuas da vevañ dindannañ, da zeski gantañ an doare d'en em zantellaad.

Hogen, er bloaz 1076, Jeruzalem a oa kouezet dindan galloud ar Vahometaned. Gand se, kristenien an Douar Santel a oa mantruz o doare, ha re ar huz-heol, evuruz o vond da bardonañ d'ar vro m'en-devoa bevet ha ma oa marvet enni On Zalver, n'hellent mui ober o zro, heb bezañ gwasket en tu pe du. Ar pab Urban II, goude bezañ klevet ano euz ar reuziou a skoe pe a venne skei e vugale, a halvas ar bed kristen da gemer an armou 'eneb deskibien Vahomed.

An embann braz a oe greet en Klermont, er bloaz 1095, dirag eur bobl diniver, en em gavet eno euz pevar horn ar Frañs.

« Soudarded Doue, eme Urban, kemerit ho klezeier, ha skoit didruez enebrien Jeruzalem !
Doue hen goulenn ! Diex lo vol⁸l ! »

Kerkent, euz kalonou an oll, ar youhadenn skiltruz "*Diex le voll*" a darzas hag a lakaas da dregerni hekleoioù ar meneziou tro-war-dro.

Adhemar de Monteil, eskob ar Puy, a reas le da vond d'ar brezel, hag an darn vrasañ euz ar re a oa eno a reas eveltañ.

Urban a hourhemennas d'ar re a dlee mond dindan an armou, stagañ ar groaz mezer ruz war o skoaz. Abalamour da ze, int bet lesanvet "Kroazourien", hag o brezelioù, "brezelioù ar Groaz". Evid kreski niver ar vrezelourien, ar pab a gargas Per an Ermit da brezeg, en e ano, en Frañs, ha Robert Arbrissel, en Breiz ha war-dro.

Komzou an daou gannad a zougas frouez. Duk Breiz, Alan Fergan, Herve, mab Gwiyomarc'h, kont Leon, Konan Penteur, mab Jafre, e-leiz a dudjentil all hag eur mor a Vretoned, war o lerh, a yeas d'ar brezel. Pemp bloaz a lakjont d'ober o zro ; a-unan gand ar Zaozon, ar Hallaoued hag an Italianed, e tiffammjont bez On Zalver Jezuz-Krist euz a zindan galloud ar Vahometaned. Pemp kant mil bennag aneze a varvas. Ar re aneze a hellas dizrei, a zegasas gante tammou euz ar wir groaz, a oe degemeret en Breiz gand lidou kaer. Robert Arbrissel a gemere perz er gouelioù-ze.

Er bloaz 1099, e savas eun Urz nevez a veneh hag a leanezed, en Fontevrault, en Anjou ; an Urz-se a oe brudet-braz hag a zo c'hoaz en e zav, en on amzer. En miz C'hwevrer 1117, e kouezas gwall-glañv en Orsan, Leodegarius, arheesbob Bourges, eur mignon dezañ, a zegasas dezañ e Zoue hag a roas dezañ an nouenn.

En noz war-lerh, e houlennas relegou ar wir groaz. Nerz a-walh a gavas da zaoulinañ dirake. Neuze e lavaras e Gredo hag e houlennas pardon ouz Doue euz oll behejou e vuhez, ha, dreist-oll, emezañ, da vezañ chomet heb ober implij mad a-walh gand donezonou Doue.

⁸ Diex lo voll : notenn gand an oberour : galleg koz, bremañ e vije lavaret Dieu le veut.

Roet e eo dezañ eun absolvenn diwezañ, ha prest goude e tremenas, d'ar 25 a viz Gouere 1117.

KENTEL

Ar vad a reas brezelioù ar Groaz

On zud-koz ; an dir war o zal, ar groaz war o halon, ar hleze en o dorn, a gerze da ziframmañ ar vro venniget a vevas enni On Zalver, euz a-dre daouarn bugale Mahomed.

Kristenien an Douar-Santel, ar Vahometaned a ree gwall reuz warne. Ar bardonerien a veze o pedi war bez On Zalver a veze lazetañ an hanter aneze. Euz ar zav-heol, ar baganed-se a oa o zoñj en em ledañ war ar huz-heol, ha d'o heul, eur mor a grizder hag a hudurnez a dlee dond da veuzi ar broioù kristen.

Brezelioù ar Groaz a viras ouz an darvoud skrijuz-se da hoarvezoud. Ar gêr zantel a gouezas etre daouarn ar Groazourien, da-geñver Gwener ar Groaz 1099. Godefroid de Bouillon a oe anvet da roue en Jeruzalem, mez ne fellas ket dezañ dougen eur gurunenn aour, e leh ma tougas Mab Doue eur gurunenn spern.

E-leiz a varvas en hent, mez evel ma lavar ar re goz :

*Pa varver evel ma'z eo dleet,
Morse ne varver re abred.*

Ar rouantelez-se, siwaz, a gouezas adarre, nebeud bloavezioù goude, dindan kraban an Durked. Ar gristenien n'en em glevet ket ; kement-se a gollas aneze.

Daoust da ze, koulskoude, brezelioù ar Groaz a reas vad, rag deskibien Mahomed, m'o-devoa trehet ar gristenien, a oa dinerzet, hag abaoe n'o-deus greet nemed mond en traoñ a-nebeudou. Digeri 'rejont sperejou an dud ; lakaad a rejont ar hoñvers etre ar zav-heol hag ar huz-heol da vond gwelloc'h en-dro ; deski a rejont d'an Europeaned labourad gwelloc'h ar mezer, ar gwer, ar metal, ar paper, ar vein ; degas a rejont hadou euz ar zav-heol ; ar hiz euz ar milinou-avel. En amzer-ze eo e oe savet an ilizou kaerrañ a weler c'hoaz en o zav. Ar hiz da gaoud anoiou-famill a deuas neuze ivez ;rag ar re a oa bet er brezel a hoantaas rei o anoiou d'o bugale, hag ar re-mañ, diouz o zu, a oa lorh enne ouz o dougen.

*

En amzer-mañ, evel en drizegved kantved, ar pezh a goll ar gristenien eo ar breujoù a zav etreze diwar bep tra ha diwar netra. Maz karfe ar gristenien en em glevet evid ar vad, evel m'en em glev o enebourien evid an droug, netra ne harzfe oute !

Sant Jaoua

Eskob Bro-Leon

Eil devez a viz Meurz

Jaoua a oa genidig euz an Iwerzon. Ober a reas e studi gand sant Paol, en Breiz-Veur, ha diskenn a reas gantañ en Breiz-Izel. Douarañ 'rejont en bro Dalmeze. Bezañ e oa gante beleien ha meneh. Er vro-ze, e oa neuze eur hoad braz ; sant Paol hag e zeskibien a zavas ennañ pep hini e vanati.

Jaoua en-devoa savet e hini e-tal eur feunteun, dour-sklêr ar garreg o redeg anezi. Gwasañ 'oa, an eneienn-ze he-devoa eur perhenn all, eur hole gouez, anvet amboubal er skridou koz, hag al loen-ze ne oa ket chalet da rannañ gand den e beadra. Peniti Jaoua a lakaas anezañ da bennfolli. E-pad ma oa eet ar manah da bedi gand e vreudeur, eñ, gand e gerniel, a ziskaras mogeriou mouded e amezeg, hag a zismantras e doenn brankou. Ar manah, en dizro, a adsavas e di ; an amboubal, kounnaret gwasoh-gwaz, hen diskaras eun eil gwech.

Daou Vreton 'oant o-daou, pennou kaled eta ; hini ebed anezo ne houlenne plegañ.

Peder gwech 'oa bet savet ar peniti, ha peder gwech 'oa bet freuzet. Jaoua, skuiz, a reas e glemmou da zant Paol :

« Ro din da lochenn, eme hemañ, ha kemer ma-hini. »

Diouz an abardaez, an amboubal, pa welas an den santel war bennou e zaoulin dirag al lochenn, a hourvezas mezeg e-harz e dreid. Paol a reas sin ar groaz warnañ : tehel a reas en donder ar hoad, hag abaoe, ne oa gwelet doare ebed dezañ ken.

Goude bezañ tremenet eur pennad er vro-ze, a anver abaoe Lambaol-Witalmeze, Jaoua, da heul e vestr hag e genvreudeur, a dreuzas an Aber-Benniget hag an Aber-Wrah, hag a zegouezas en Kastell.

Eno, sant Paol a oe greet eskob Leon, ha Jaoua a roas an dorn dezañ da astenn dre ar vro rouantelez Jezuz-Krist. Anvet e oe da abad en manati Ak, ha goude-ze, en manati Baz.

Evel m'oa bet mad ha karantezuz evel Jezuz-Krist, e-touez an dud m'oa bet o kelenn, e oe habask hag izel a galon e-touez ar veneh, e vreudeur, en-devoa da ren.

Sant Paol, deut da vezañ dinerz, a hoantaas rei an dilez euz e garg, hag a zibabas Jaoua da bignad en e gador. Mez a-veh ma oa bloaz abaoe ma oa azezet warni, ma nijas da gemer e ziskuiz en baradoz an Aotrou Doue, o lezel, en-kreiz ar hañv hag ar gouelvan, sant Paol a gare anezañ evel e vab, hag ar bobl m'oa bet evitañ, abaoe e yaouankiz, eur skwer da weled hag eun dudi da gleved.

Korv sant Jaoua a oe sebeliet en Plouvihan, da diwezatoh e oe savet eur chapel war e vez.

Sant Gwennole

Kentañ Abad Landevenneg (461 – 532)

En amzer-ze, e oa eun den brudet, e ano Fregan, kenderv ar roue breizad Kataoui...

Gand e zaou oanig, da lavared eo, e zaou vab, Gwezenog ha Jakud, hag o mamm Gwenn, hag eun nebeudig tud all, e treuzas mor Breiz, oh ober hent war-zu bro-Arvor, a oa disheoliet mad d'ar houlz-se gand ar hoajou braz a holoe anezi euz an eil penn d'egile.

Douarañ 'reas e porz Brehak, war-dro pemp eur diouz an abardaez. En em lakaad a reas raktal d'ober eur bale en douarou tostañ. Dizoloi a reas ar mêziou, braz a-walh da halloud sevel enno eur ploue, gwaskedet gand ar hoajou, klozet tro-dro gand ar strouez ha douret gand dour ster ar Gwad. Sevel a reas eno e lojeiz.

Hebdale, niver ar re a oa gantañ a greskas. E-leiz a zanvez o-devoa : Ploufregan, ar gentañ parrouz pe ar hentañ *Ploue* a zo ano anezañ en Breiz, a oa savet (460).

Eno eo e lakaas Gwenn eun trede bugel er bed. Anvet e oe Gwennole gand e dad. Dleoud a ree bezañ unan euz an dud a lezas donnañ o roudou en douarou Breiz.

Da zeiz vloaz, Gwennole a oe kaset d'ar skol gand sant Budok, da enezenn Laure. Gwech an amzer, ar paotr a deue, koulskoude, da weled e gerent, hag eun dro bennag da vihannañ, e c'hoarvezas eun nevezenti, e-pad ma oa er gêr, hag a roas da anavezoud ar galloud en-devoa dirag Doue.

Eul leo diouz Ploufragan, en park an dervenn, e oa deut da chom eur Breizad all, e ano Rhigall. Na Fregan, na Rhigall ne oant gwell droet gand al labour-douar ; troetoh kalz e oant gand ar hezeg. Hogen, en amzer-ze, e oa kezeg gouez, a-vandennou, o redeg en donder ar hoajou : gand dreven ha lien e veze tapet ha kabestret ar re yaouankañ ha stummet kaerrañ, ha, dre forz preder e teued a-benn d'o doñvaad.

Fregan ha Rhigall a deuas evel-se da gaoud peb a varchosiad kezeg kaer ; mez dalhmad e save tabut etreze da houzoud da biou 'oa ar re vihannañ. Setu m'en em glevjont eta, eun devez, d'ober eur redadeg gand ar re wellañ a bep tu. Kement-se a oa greet, da gredi eo, war an trêz ; reier an tornaod 'oa ar pal. Paotred yaouank skañv a bign war ar hezeg, mez ar re-mañ, o vezañ ne oa ket barreg kaer ar re a oa gante, e-leh mond war eeun gand o hent, a yee a-gleiz hag a-zehou. Eur marh hepken, war e gein Mael, mab yaouank Konomael, gwestennet ha reizet gwelloc'h gnd e varheg, a gerz eeun tenn etrezeg al leh a oa da dizoud.

Tud Fregan, o weled kement-se, o vezañ ma oa Mael diouz o zu, a oa lorh enne hag a lakaas an hekleoioù tro-war-dro da dregerni gand o youhadennou laouen.

Mez siwaz, ar marh, o tostaad ouz ar pal, a zirollas hag a yeas, a-benn-kaer, d'en em strinkañ war ar reier e-leh m'en em lazas. Ar marheg, stlapet d'an traoñ ha torret e izili, a gollas e anaoudegez, ha darn a gredas e oa maro. Neuze, al levnez a droas en gouelvan.

Gwennole a oa eno, deut da weled ar gouel. Pedi rejod anezañ da gemer truez ouz Mael.

Deskibl yaouank sant Budok a deuas a-benn, dre e bedennou, da zivadañ ha da bareañ, en eun taol, e vignon reuzeudig.

Gwennole en-devoa neuze ugent vloaz. Daou vloaz goude, e kimiadas diouz e vestr karet hag e teuas, gand unneg euz e zeskibien, da ziazezañ ar hentañ *lan* pe ar hentañ manati a zo ano anezañ war douar Breiz-Izel : hini Landevenneg.

Savet eo en eul leh klouar ha brao. Ar hentañ a wel er vro ar bleuniou o tigeri, an diwezañ a wel an deliou o kouezañ, eul liorz gwaskedet ouz peb avel ha marellet gand bleuniou a beb liou.

Eno, Gwennole hag e vreudeur a ziskaras gwez, a zavas eun iliz ha peb a beniti en-dro dezi, a droas an douar hag a hadas anezañ.

Ar re gentañ 'oant o tond da chom er horn-douar-ze ; kemer a rejont ar pezh a blije deze. Ar vrud euz Landevenneg hag euz e abad a yeas beteg Kemper e-leh ma oa ar roue Grallon o chom.

Grallon ha Gwennole a deuas da vezañ mignoned vraz, ha labourad a rejont o-daou da gristenañ Bro-Gerne ha da ziazezañ eur gador-eskob en Kemper, gand Korantin warnezi, da gentañ.

Daoust ma oa treh, hag a-bell, d'e veneh, dre e halloud hag e ouiziegez, Gwennole a oa bepred izel a galon, evel eur bugel, ha troet gand ar binijenn. Bara heiz 'oa e vagadurez ; eur holhedad krehin gwez e wele ; e-pad ar hoareiz, ne gemere nemed daou bred er zun.

Mez daoust ma oa striz en e geñver e-unan, ne oa ket rog en-keñver ar re all ; ne oa ket uheloh an eil ger dezañ evid egile. Bepred e veze laouen ha netra n'helle strafuillañ e ene.

Gwennole a varvas er bloaz 532. O houzoud⁹ e oa tost d'e dremenvan, daoust ne oa ket klañv c'hoaz, e vodas e veneh hag e kimiadas dioute. Goude-ze, e lavaras an overenn hag e komunias dindan doareou ar bara hag ar gwin. Neuze, en e zav en-kreiz an aoter, harpet war daou euz e veneh, e tremenas hep poan, d'an 3 a viz Meurz.

⁹ O houzoud : fazi boaz, diouz ar galleg. Pa ouie...

Sant Paol Aurelian

Kenta eskob Bro-Leon

Paol Aurelian a hanas en Breiz-Veur, war-dro ar bloaz 480, en eur harter hag a anved Penn-ejen. E dad, eun den a renk uhel, a gasas anezañ abred d'ar skol gand Sant Ildud. Eno e trehas ar vugale a oa gantañ, dre e ouiziegez hag e furnez.

Da hwezeg vloaz, en em dennas en eul leh distro hag e kendalhas eno, e-unan, e vuhez a studi hag a bedenn. Da dregont vloaz, e oe beleget, hag e savas neuze eur manati, daouzeg beleg ennañ, hag eñ ar penn aneze. Prest goude, war houlenn ar roue Mark Konomor, e prezegas ar feiz en e rouantelez, ha pa hoantaas hemañ gweled ober eun eskob anezañ, e treuzas ar mor don (512).

Bezañ e oa gantañ, ouspenn e zaouzeg beleg, daouzeg dijentil, nizien ha kendirvi dezañ, gand o gwraez, o bugale hag o zervijerien ; eur hant bennag e hallent bezañ o tivroañ.

Ober a rejont eun diskenn en enez Eusa, hag ahane e pignjont en douar braz. Goude eun nebeud miziou diskuizañ en bro Talmeze¹⁰, e treuzjont an Aber Benniget hag an Aber Wrah, da glask mestr ar vro, evid en em glevet gantañ. En Grouaneg e klevjont gand e vesaer e oa en Baz o chom.

Goude eur veaj pell hag hir, en em gavjont gand eur gêr goz, a-tal ar mor, mogeriou mouded uhelder brao deze, en-dro dezi, hag en he hreiz, eur hastell koz savet gand ar Romaned. Kêr ha kastell a oa goullo. An tan a oa bet enne ; ne oa dre oll nemed dismantr, den ebed, netra, nemed eur wiz gand he hloadad moh bihan, eun taol gwenan en eur wezenn dann, eun amboubal, eun ours hag eul loen gouez all bennag c'hoaz...

Trei a rejont, o lezel ar hastell koz-se war o dorn dehou, hag en em gavjont en Baz. Eno e oa Wizar, aotrou ar vro, eur Breizad divroet ivez, deut gand e dud en Bro-Arvor, nevezig 'oa, o tehel a-raog ar Zaozon.

Wizur a reas degemer laouen da Bol, ha seul laouennoh ma teujont da anaoud e oant kerent.

E-pad ma oant o komz, e tegouezas eur pesketaer a oa gantañ en e zorn eun eog, eur hloh en e henou.

Paol, o weled ar hloh-se, ar reas eur mousc'hoarz.

« Lakit anezañ da zon », emezañ ; hag o klevet e zon, e galon a hoarze en e greiz.

« Perag e c'hoarzit ? », eme Wizur.

« C'hoarzin a ran, eme Bol, o weled madelez divent an Aotrou Doue em heñver. Ar roue Mark ne oa ket bet falvezet gantañ, pa gimiadis dioutañ, rei din unan euz ar seiz kloh en-devoa en e lez. Setu ma teu din bremañ en genou eur pesk. »

Ar gwel euz ar pesk-se, a lakae levenez evel-se, a reas da Wizur soñjal en eul loen all a oa en enezenn, a daole ar spont dre ar vro, eun dragon euzuz, gouest den ebed da zond a-benn anezañ.

Komz a reas anezañ d'ar zant.

Hemañ a bedas hag a houlennas unan bennag da vond d'e heul. Eun den yaouank hepken, e ano Nuz, a 'n em ginnigas.

Paol a ziskennas beteg toull ar serpent ; stoliañ 'reas an aneval, ha rei a reas anezañ da Nuz, da deuler er mor. War-lerh an taol kaer-ze, Nuz, an den yaouank dispont, a oe lesanvet Gournadeh.

Wizur, o weled madoberez ha galloud sant Paol, ne ouie penaoz e drugarekaad tra-walh. Rei a reas dezañ e gloh, ar pevar aviell e oa o paouez skrivañ eñ e-unan, enezenn Vaz ha kastell koz ar Romaned. An den-Doue a zavas eur manati en Baz hag eun all er hastell koz, a

¹⁰ Talmeze : El leh m'emañ bremañ Lambaol-Witalmeze.

oe lesanvet hiviziken Kastell-Paol, hag en em roas a galon da brezeg en-dro dezañ anaoudegez ha karantez Jeuz-Krist. Labour denn, evid gwir, rag e Bro-Leon e oa neuze diou ouenn dud disheñvel an eil diouz eben ; ar Vretoned diskennet euz Breiz-Veur hag a oa kristenien oll, koulz lavared ; an Arvoriz, da lavared eo an dud a oa a-viskoaz ar ouenn aneze er vro, hag a oa paganed oll, evid c'hoaz, ha stag mad, zoken, ouz o hredennou gaouiad.

Ar Vretoned, Wizur er penn kentañ, a 'n em glevas gand ar roue Childebert evid ma vije anvet Paol da eskob Leon, ha setu ar pezh a hoarvezas (530), kaer en-devoe harz ouz an enor hag ouz ar garg-se da gouezañ warnañ.

Evel-se e oe savet eskopti Leon, a yee euz Kastell-Paol beteg beg Lomaze Penn-ar-Bed, hag a oe diskaret, d'an Dispah, ha staget ouz eskopti Kerne (1802), da hortoz ma teurvezo gand Doue ha gand an dud e weled o sevel adarre en e zav hag o kemer, e-touez eskoptiou Breiz, e reñk a enor, skedusoh evid biskoaz.

Goude bezañ roet ar pep gwellañ euz e galon da groui e eskopti, sant Paol a varvas en Baz, en fin ar c'hwehved kantved. E gorr a oe sebeliet en e iliz-veur, en Kastell-Paol, e leh ma virer c'hoaz e benn ha darn euz e relegou, en eur relegouer euz ar re gaerrañ. Ar hloh a deuas dezañ dre vor, en genou eun eog, an Hirglaz, a virer ivez e-tal e aoter.

Sant Koneri

(Trede devez a viz Ebrel)
Ermit (VI^{ved} kantved)

Koneri, genidig euz Breiz-Veur, a ziskennas en Bro-Arvor en heveleb koulzou gand Tual, mar ne oa ket, zoken, diskennet el lestr gantañ. Douarañ a reas war aochou an hanternoz, mez ne bozas ket eno. Kerzed a reas, a-dreuz d'an Argoad goloet neuze a goajou don, ahann ma tegouezas, etrezeg ar hreisteiz, en eul leh gouez anvet Brengili. Eno e savas e beniti hag en em lakaas da ren eur vuhez a bedenn, a labour hag a binijenn.

*E gorr santel a gastize,
War an douar noaz e kouske,
N'oa nemed bara ha dour yen,
Kement ha bevañ, netra ken¹¹.*

E-unan a grede dezañ bezañ eno, ha ne oa ket. Ar horn douar-ze a oa pleustret gand eur bagad paganed o-devoa kuitaet an aod evid tehel a-raog ar ouezidi laeron-vor. O mestr, eun den taer ha didruez, e ano Alvandus, a 'n em gavas, eun deiz, da dremen dirag peniti Koneri. Hemañ a oa neuze gand e bedennou ha ne daolas evez ebed ouz an dremenidi. Ar pagan ah eas kemend a zroug ennañ ma reas da daou euz e dud bahata ar zant.

Doue ne zaleas ket skei, d'e dro, ar re o-devoa greet dismegañs d'e zervijer.

*Kerkent, pebez tra vurzuduz !
Stad an daou den a oa spontuz,
O fenn war o chouk kildroet,
Hag i o-daou mezevennet.*

Red e oe deze, koulz ha d'o mestr Alvandus, stoui dirag ar zant hag hen pedi d'o faerañ.

Pareañs ar horv a dennas, da heul, hini an ene. Alvandus hag e dud a gredas d'ar feiz kristen, hag an dijentil a oe gonezet ken mad ma kinnigas da Goneri e vadou hag e di. Mez ar zant a respontas :

*It d'ho ti, me a chomo amañ ;
Laosket am-eus ma oll vado'
'Vid bezañ paour er-mêz ma bro.*

Diwar an eur-ze ne vije ken klevet tro-dro, ha gand pep hini, nemed kelou a Goneri : pareañ a ree kleñvejou ar horv, sklêrijenni an ene gand e brezegennou, karantez Doue hag an nesañ o vervi enne.

An droug-spered ne hoarze ket ouz e labour. Eun devez ma oa Koneri o lavared eun overenn-bred war eun aoter-vên, en eul lanneg, an aoter a faoutas, dre ijin fall an diaoul, mez vertu ar zant hen harzas da didammañ ha da gouezañ.

Badezet an darn-vuiañ euz ar baganed ha dispennet gantañ, war-bouez e zivreh, eul lodenn vad a goajou, e kuitaas e beniti, en abeg d'ar re a stad a vije greet anezañ gand an dud. E ano a chomas eno hag a zo hirio ano eur barrouz.

Dizrei a reas war e giz, etrezeg an aod, hag en em gavas gand e vamm, Eliboubana, he-devoa greet he chomaj en enezennig Loaven. Sevel a reas eur peniti damdost dezi, hag eno e tremenas ar peurrset euz e vuhez, o santellaad, dre e oberou, an douar a dlee bezañ, diwezatoh, parrouz Plouvouskan.

Kemend a vurzudou a hoarvezas war e vez ma oe savet dezañ eur chapel ha greet, en e enor, eun ofis hag eur gouel a zo bet staget outañ, gand daou bab, iñduljañsou kaer.

Ar chapel, hag a zo c'hoaz en he sav, he-deus gwelet aliez sant Erwan o pedi. Enni zo beziet ivez, en eur bez kaer, unan euz eskibien goz Landreger, an A. Gwillerm a Halegoed, devod meurbed da zant Koneri, hag a roas leveou evid overennou da lavared enni bemdez. Ar

¹¹ netra ken : Gwerz koz sant Koneri.

chapel he-devoe, beteg ar Revolution, eun teñzor talvouduz braz a listri zakr hag a bep seutr treou presiu. Laeret e oent neuze ha gwentet d'ar pevar avel. Relegou ar zant, e benn ha daou askorn breh ha garr, a oe klenket 'han d'ar peuh, hag a zo miret beteg-henn, koulz hag an devosion a dougas a-viskoaz Tregeriz d'o enori.

Sant Koneri en-deus daou bardon ar bloaz, unan da Veurz Pask, ar pardon bihan, egile, ar pevare sul a viz Gouere, galvet¹² ar pardon braz.

An deiz-se, niver a belerined a dered da Blouvouskan, darn evid o loened, darn all evid goulenn ar yehed. "Dour sant Koneri", benniget gand ar veleien, hag ivez an douar a-ziwar-dro e chapel, a zo brudet evid para an derzienn.

Karantez Trezgeriz en-keñver o zant a 'n em ziskouez c'hoaz en liez a stumm : en peb ezomm en em droont etrezeg dezañ, labourerien ha martoloded, ha plijoud a ra deze rei e ano d'o bugale evid ma vint diwallet gantañ a beb droug, ha, dreist-oll, a goll ar feiz :

*N'houlom ket e kollfent ar feiz,
Well eo de¹³ mervel, sant benniget !
Diwallet¹⁴ 'ta, en an' Doue,
Ar vugale a zo dah gouestlet.*

En tu-hont da Blouvouskan, parrouziou Lanvelleg ha Plougraz o-deus ivez peb a chapel gouestlet da zant Koneri. Parrouz Sant-Konneg he-deus e gemeret da batron.

¹² galvet : galleg : Bet greet anezañ ar pardon braz.

¹³ de : deze.

¹⁴ Diwallet : Diwallit.

Sant Visant Ferrier

Pempved devez a viz Ebrel Euz a Urz sant Dominik (1357 – 1419)

Visant, gloar an Iliz, prezegeer braz ar varn diwezañ ha kaerrañ sklêrijenn a welas ar Vretoned o parañ ‘uz deze, a hanas e Valans, er Spagn, d’an 23 a viz Genver 1357.

Gwillerm Ferrier, e dad, ha Konstansa Miquel, e vamm, a oa troet war ar bedenn ha war an aluzenn.

Eñ, a-vihanig, a vode en-dro dezañ bugale e oad hag o tezrevel ar brezegeerien en-deveze klevet, e komze deze euz an Aotrou Doue hag euz ar Werhez. Da zeiteg vloaz, gand bennoz e dad hag e vamm, e wiskas sae sant Dominik. Da fin e studiou en Barselon hag en Lerida, e teuas gantañ kurunenn lore an doktored.

I. Sant Visant o prezeg dre ar bed

Eur wech beleget, en em lakaas da hadañ dre ar bed komzou Doue. Ar Spagn, ar Frañs, an Itali, an Alamagn, Bro-Zaoz, an Iwerzon, a glevas anezañ. E-pad tost da zaou-ugent vloaz, e prezegeas bemdez, goude bezañ bet o kovs e-unan ha goude bezañ kanet an overenn-bred. E brezegenn a bade war-dro teir eur¹⁵. Ne gomze nemed spagnoleg, ha koulskoude, pep hini a gomprens anezañ, evel m’en-dije komzet en yez ar vro ma tremene drezi ; kement hini a gleve kenkoulz hag ar re a vije an tostañ. Miraklou all a deue c’hoaz da harpañ e gomzou, hag a ree d’an oll pleal gantañ.

Ouz e heul, a gêr da gêr, hag a rouantelez da rouantelez, e veze bepred eur mil den, da nebeutañ, da rei an dorn dezañ, tud a bep reñk hag a beb oad : peninanted, eun daou pe drihant, a ‘n em skourjeze dirag an oll, a ree katekiz, a zave manatiou, ilizou, ospitaliou, pontchou ; beleien hag a govesae an dud ; kanerien ha sonerien a gaerrae an ofisou ; notered d’ober aktou a emgleo etre enebourien. E brezegennou a ranke bezañ greet war ar mêz, an ilizou o vezañ re vihan diouz an dud a zerede, a bep tu, da zelaou e gomzou.

II. Sant Visant e Breiz (8 a viz C’hwevrer 1418 – 5 a viz Ebrel 1419)

Er bloaz 1417, Visant a brezege dre ar Frañs. Yann V, duk Breiz, a skrivas tri lizer dezañ d’e bedi da zond da brezeg en e zukaj ; ar hentañ, skrivet en miz Genver, a oa roet d’ar prezegeer braz en Puy en Velay ; an eil, skrivet en miz Du, a ‘n em gavas gantañ en Bourges ; an trede, skrivet en fin ar bloaz, a ‘n em gavas gantañ en Tours.

Goude bezañ prezeget en Angers, e-pad miz Genver 1418, ar zant a ‘n em gavas en Naoned, da Veurz al Lard, a oa d’an 8 a viz C’hwevrer er bloavez-se. Deg devez hag eun dra bennag e chomas eno ; prezeg a reas, gwech en bered Sant Nicolas, gwech war blasenn iliz-veur Sant-Per.

Ahane eh eas da Wened, e leh m’en em gavas d’ar 5 a viz Meurz, d’ar zadorn a-raog pevare sul ar c’hoareiz. An duk Yann V, an dukez Janned Frañs, hag a oa er mare-ze o chom en Gwened, Gwenediz, gand o eskob, Amaury de la Motte, a yeas d’arbenn hent dezañ eun hanter-leo diouz kêr hag e teuas d’o heul pignet war e azenez. E-leh ober e ziskenn en kastell ar Voudenn, kempennet evitañ gand an duk, eh eas da lojañ da di Robin ar Skarb. An deiz war-lerh, en em lakaas d’ober e labour, war al leur-gêr, el leh ma oa savet eur chapel goad. Eno e kanas an overenn, ha goude e prezegeas dirag eur mor a dud, duk ha dukez Breiz an

¹⁵ teir eur : teir eurvez.

tostañ dezañ ; evel-se e reas bemdez, e-pad ar pevar devez warn-ugent a dremenas en Gwened.

Da Veurz-Fask, 20 a viz Meurz 1418 ; Visant a yeas da Dheix hag a valeas war-zu Redon. D'an 20, 21, 22 a viz Ebrel, ha d'an 2, 3 ha 4 a viz Mae 1418, her havom en Roazon. Ahane eh eas beteg Caen, pedet gand Herri V, roue Bro-Zaoz, da vond da brezeg en Normandi. Ober a reas buan e dro, rag, en Mezeven, her havom en Dol, en Sant-Mlao hag en Dinan.

Ahane e teu, hed-a-hed ar mor, war-zu Lok-Maze penn-ar-bed ; perpprezeg a ra en Jugon, Lambal, Moncontour, Sant Brieg , Kintin, Kastelaodren, Gwengamp, ar Roh-Derrien, Landreger, Lannuon, en Joselin hag en Ploermel.

Goude-ze eh ouzer e prezegas en Rostren hag en Karaez ; en Kemper, en Pont-'n-Abad, en Konk-Kerne, en Kemperle, en Henbont, er Gemene, en Pontivi, er Chèz, en Dreinded Porhoet, en Joselin hag en Ploermel.

Euz Ploermel e valeas war-zu an Naoned. E dud o weled e tehe e nerz digantañ, a grogas aon enne na varvje a-bell bro hag a alias anezañ da zizrei d'ar Spagn. Ar zant a bignas d'abardaez war e azenez, a valeas e-pad an noz gand e zervijerien ; mez da houlou-deiz en em gavas el leh en-devoa kuitaet gante. O weled kement-se, e lavaras d'e dud ne bellaje ket ken diouz Breiz. Dizrei a reas da Wened ; eno e krogas eun derzienn vraz ennañ ; dukez Vreiz, e-pad e gleñved, a reas war e dro gand kemend a breder ha ma vije bet ar hlañvour roue Frañs, he zad, pe duk Breiz, he fried.

Tremen a reas d'ar merher, 5 a viz Ebrel 1419, en e eil bloaz ha tri-ugent. Pa roas kleier Gwened e varo da anaoud d'ar bobl, Breiz a-bez a zougas e gañvou.

Sebeliet e oe en iliz-veur, d'ar zadorn war-lerh.

III Sant Visant lakaet e-touez ar Zent

Prest goude maro an abostol braz, an duk Yann V a bedas ar pab Martin V da rei urz da zstum testenniou e zantelez. An duk Frañsez I a reas ivez pedenn e dad ; an duk Per II a oe selaouet erfin gand Nikolaz V, a anvas, dre lizer skrivet an 18 a viz Here 1451, tri gardinal d'ober eun enklask war "vuhez ha miraklou" an aotrou Visant. En Breiz hepken, e oe dastumet testenniou ouspenn tri-hant den. D'an 20 a Vezeven 1488, deiz gouel Per ha Paol, ar pab Kalixt III a embannas e zantelez d'ar bed oll. D'ar 5 a viz Ebrel 1456, e oe greet en Gwened ar gouel kentañ en enor da zant Visant. Evid herzel urz an dispignou a oe gantañ, pep tiegez breizad a roas laouen pemp diner.

Ne oa ket gwelet biskoaz, ha n'eus ket bet gwelet abaoe, netra ken kaer en on bro. Arheskob Avignon, ar hardinal Alan a Goadivi¹⁶, eur Breizad genidig euz Bro-Leon, a deuas d'ober ar gouel, en ano ar pab. Pemzeg eskob, eiz euz Breiz ha seiz a-ziavêz bro, a oa en-dro dezañ. Goude bezañ kanet an overenn, e reas tro kêr en prosesion. Duk ha dukez Breiz a deue d'e heul gand oll briñsed hag aotrounez vraz an dukaj, hag ouspenn kant hanter-kant mil den.

¹⁶ Alan a Goadivi : ganet Plouneventer.

An den eüruz Loeiz-Mari Grignon a Vonfort

Beleg (1673 – 1716)

Eizved devez a viz Ebrel

Loeiz-Mari Grignon a hanas e Montfort, eur gêrig vihan euz eskopti Sant-Malo, d'an 31 a viz Genver 1673. E dad, daoust ma n'o-devoa ket kalz a beadra, a hellas e gas da Roazon d'ar skol gand Tadou Kompagnunez Jezuz, hag ahane, o vezañ m'en-devoa c'hoant braz da vond da veleg, eh eas da gloerdi Sant-Sulpis, da Bariz, da genderhel e studi.

D'ar 5 a Vezeven 1700, e oe beleget. Tremen a reas abardaez an deiz-se ha darn euz an noz, dirag ar zakramant, o hortoz, gand mall ha gand doujañs, an eur da lavared e overenn gentañ.

A-raog bezañ beleg, en-devoa diskouezet, meur a wech, kaoud c'hoant da vond da brezeg ar feiz d'ar broiou pell : « Petra 'reom-ni amañ, a lavare aliez d'e gamaraded, e-keid m'emañ an eneu o vond da goll, a-vilierou, en Indez hag er Japon ? »

Mez Doue e vire evid e vro, rag, siwaz, n'eo ket hepken er broiou pagan 'zo eneu o vond da goll, er broiou kristen 'zo ivez.

En em lakaad a reas da rei *misionou* war bevennou Breiz, er Vañde, hag er Poatou. E gomzou, e oberou hag e zantelez a reas eun vad dreist-muzul.

En kement leh ma tremene, e save skoliou gand mistri ha mestrezed mad enne. « Rag, emezañ, dre ar skoliou mad e leunier an ilizou, ha dre ar re fall o goullonderer. »

En kement leh ma roe eur mision, e lakae sevel eur groaz evid derhel soñj ; en Pont-Château, war hent Gwened, e lakaas sevel eur halvar gand an dud diwar-dro, a labouras warnañ e-pad pemzeg miz, goude bezañ pemp pe c'hweh-kant bemdez. Gwelet e veze euz a zaouzeg leo tro-war-dro.

D'ar 14 a viz Gwengolo 1710, e tleed e vennigañ ; eur mor a dud a dlee dond da ganañ meuleudiou ar groaz ; mez enebourien an den santel o-devoa c'hoariet dre zindan ; d'an trizeg, d'abardaez, e teuas divenn digand aotrou 'n eskob an Naoned da vennigañ ar halvar nevez ; nebeud goude, e teuas urz euz Pariz, a-berz ar roue, d'e freuzañ.

Montfort a houzañvas ar brezel-ze a galon vad : « An Aotrou Doue 'zo bet falvezet gantañ ma gweled o lakaad sevel ar halvar-ze : bremañ e lez e ziskar ; ra vezo benniget e ano santel ! Ma vije greet diouzin-me, e padje keit hag ar bed ! »

Bet en-devoa koulskoude ar misioner e vennad, rag ar halvar a oe adsavet er bloaz 1747. Diskaret gand an dispaherien, er bloaz 1793, eo bet adsavet adarre, e-kerz an naontegved kantved, ha bremañ eo deut da vezañ kaerrañ ha pinvidikañ kalvar a zo war douar Breiz.

Montfort a zavas "Kompagnuez Mari", a oa enni beleien a dlee rei o buhez o kelenn ar beorien. Pevar-hant bennag a oa aneze er bloaz 1906.

Sevel a reas ivez Urz ar "C'hoarezed griz" a oa 5.000 aneze er bloaz 1906, hag a dremen o buhez oh ober skol d'ar beorien, pe oh ober war-dro ar re glañv en ospitaliou.

Daoust ma ne glaske nemed ober vad dre ma'h ee, biskoaz den, marteze, ne gavas war e hent kemend a dud da enebi outañ, evel ma kavas Montfort. Bezañ 'n-devoe da houzañv en peb leh ma tremene hag euz perz pep seurt tud ; netra n'hellas e lakaad da vond droug ennañ, na da gaoud kas ouz ar re a glaske trabas outañ ; netra n'hellas e lakaad, kennebeud, da fallgaloni, rag harpañ a ree e galon ouz Kalon Jezuz, ha nerz an eil a dremene en egile.

A-greiz rei eur mision en Sant Loarañs, e varvas, d'an 28 a viz Ebrel 1716 ; n'en-devoa ken nemed tri bloaz ha daou-ugent.

Sant Brieg

Eskob (417 – 810)

Kentañ patron eskopti Sant Brieg

Brieg a deuas er bed, en Breiz-Veur, war-dro ar bloaz 417. Pa'h eas sant Jermen da brezeg di, evid ar wech kentañ, e oe roet dezañ da gelenn gand e dad.

C'hwezeg vloaz goude, pa zizroas (447), e velegas hag e kasas anezañ d'e vro. Brieg a gonvertisas neuze e dud hag e anaoudegez. Sevel a reas manati al Lann-Vraz, hag e ren a reas e-pad daou-ugent vloaz.

Er bloaz 485, e tiskennas en Bro-Arvor hag e touaras gand e eiz hag eiz-ugent manah en aber ar Goued. En kichenn, en park an dervenn, e oa eur Breizad all o chom gand e dud, e ano Rhigal. Eur pennad a oa ne oa ket yah ; Brieg, gand daouzeg euz e veneh, a yeas d'e gaoud. Rhigal hen anavezras raktal evid bezañ e genderv.

« Sell 'ta, emezañ, hemañ eo Brieg, ma henderv, doktor braz ar gristenien, ken brudet e-touez Bretoned Tramor : Doue hen degas, heb mar ebed, d'am fareañ ! »

En em vriata a rejont gand teneridigez. Brieg a lakaas Rhigal da eva dour fresk benniget evitañ, ha gand an evaj-se e boan a dehas. Rhigal, dre anaoudegez vad, hag evid mired Brieg en e gichenn, a roas dezañ ar maner en-devoa savet en park an dervenn hag an douarou a oa stag outañ, hag en em dennas en eur rann all euz e leve, en Plouhelion, a oe lesanvet diwar neuze Lez-Helion.

Brieg a lakaas e veneh da brezeg ar relijion tro-war-dro d'e vanati, hag eñ e-unan a daole ple, gwellañ m'halle, ouz o labouriou.

Deg vloaz ha pevar-ugent a welas, ha d'an oad-ze, pa n'helle mui ober hent war droad, e valee en eur harr.

Eun devez, o tizrei euz eun dachenn 'oa bet o weled a-bell, e kane psalmou, azezet en e garr, hag ar veneh, en e raog, a ziskane.

An noz a deue ; en eun taol, ar veneh a dav hag a deh, hag en o leh, an abad santel a wel eur renkennad bleidi, lemm o skilfou, lemm o lagad, oh ober an dro dezañ hag o klask saillad war an ejenned a oa sternet ouz e garr. Ar zant a zav e zorn, hag ar bleidi, kerkent, a gouez d'an daoulin dirakañ, evel evid goulenn o fardon. Mez pa fellas d'ar veneh aonig tostaad ouz o abad, ar bleidi ne felle ket deze o lezel.

An treo¹⁷ a badas evel-se e-pad an noz. An deiz war-lerh eun neventi a zegouzas. Eur Breizad, e ano Konan, o tond euz Breiz-Veur, a oa o paouez douarañ gand e zoudarded. Paganed 'oant ha kenvroiz da Vrieg.

Konan, o weled an abad santel gand e varo gwenn hag hir, azezet war e garr evel war eun tron, ar bleidi gouez daoulinet dirakañ o vired ouz ar veneh da dostaad, a lavaras d'e dud :

« Sellet 'ta ! sellet 'ta ! »

« Gweled a reom ! » eme ar re-mañ, ken sebezet hag eñ.

Konan hag a oa deut da houzoud e oa an den koz-se eur manah, eur beleg kristen, marteze e genvroad, a lavaras dezañ : « Tad, tad, ni ne fell ket dim kaoud Doue all ebed nemed da hini ! Red eo dit on badezi oll amañ ! »

Evel pa ne vije bet o hedall netra nemed ar ger-ze, evid digeri dor e brizon, Brieg a hourhemennas kerkent d'ar bleidi en em denn, hag a gomzas neuze laouen ouz Konan. Gourhemenn a reas dezañ ha d'e dud yun e-pad seiz devez ; e-pad ar seiz devez-se, e kelennas anezo, ha d'an eizved, e roas deze ar vadiziant.

¹⁷ treo : tregerieg : traou.

Koulskoude, an abad santel a dostae e dermen. Ar c’hwehved kantved a oa digor (501). Eur hannad a deuas da bark an dervenn da zegemenn da Vrieg mond da weled Rhigal a oa klañv.

En em gavet e Lez-Hilion, ar manah a roas d’e genderv bara ar vuhez a bado da viken hag a lavaras dezañ kenavo er baradoz. Dizro d’e vanati, ne zaleas ket da dremen e-unan.

Kentel

Buhez ar veneh

Ar Vretoned, pa zouarjont en Arvor, a oa dija kristenien ; n'o-devoa ken beleien nemed beleien-veneh. Ar veleien-ze eo a brezegas ar feiz d'an Arvoriz hag a roas dorn d'ar Vretoned da zevel eur Vreiz nevez war zouar Arvor. O buhez a oa rannet etre tri dra : al labour spered, al labour korv hag ar bedenn.

Kerkent hag eiz eur eh eent d'o devez ; darn a yee da labourad koad ; darn da labourad houarn. Pep hini a ree ar vicher a ouie ar wellañ ; nikun ne chome heb gonid e vara diouz c'hwezenn e dal. Ar veneh speredekañ a ranke labourad gand o horv, kenkoulz hag ar re all. Da deg eur, e teued d'ar manati hag e kroged el labour spered ; darn a studie, darn a skrive ha darn a ree skol, rag ouz peb manati e oa eur skol, ha ne oa nemed ar veneh o skolia ar vugale, en amzer-ze. Da hweh eur, e kaned ar gousperou hag e veze koan : bara, lêz, pesked, uou ha mel, setu ar bevañs pemdezieg ; tamm kig ebed, nemed a-wechou d'ar zul. Gouder ar pred e veze greet ar pedennou diouz an noz, ha pep hini a 'n em denne en e beniti, d'ober eur gourvez ; eur holhedad foenn, heb liñsel na pallenn, setu ar gwele ; gourvez ennañ 'veze greet, heb diwiskañ an dillad.

Da hanternoz, e vezer dihunet hag eh eer d'an iliz da ganañ an ofis ; dizrei a reer goude d'ober eun hun all ; kerkent ha goulou-deiz, e oa an eil sao, hag eh eer da bedi, beteg ma teue an eur da stagañ gand al labour korv.

Setu aze ar vuhez kaled a renas ar zent hag a grouas ar vro-mañ. En deiz a hirie, tud berrwel ha fallagr a glask, gwasa m'hellont, diskar ar pezh o-deus savet, en eur lakaad ar Vretoned da dehel diouz al labour, diouz ar vro ha diouz Doue¹⁸.

Med daoust d'an dud-se ha d'an amzer, Breiz-Izel ne varvo ket : ni 'chomo ar pezh m'om bet lakaet gand Doue.

Micher on zadou a vo on micher ; yez on zadou a vo on yez ; Doue on zadou a vo on Doue¹⁹.

Euz ar pezh o-deus anzavet, ne nahom netra ; euz ar pezh o-deus krouet, a-unan gand eskibien vrazz hag ar veneh wenn, n'ez ay netra e traoñ ; kempenn, nevezaad ha kaerraad ar pezh o-deus greet eo a fell dim, dre On Zalver Jezuz-Krist.

¹⁸ da dehel diouz al labour, diouz ar vro ha diouz Doue :ne oa ket gwir, tamm ebed.

¹⁹ yez on zadou a vo on yez ; Doue on zadou a vo on Doue : Bremañ (2014) n'eo ket gwir ken.

Sant Servez

Eskob (? – 384)

Ober a reer hirie ivez gouel sant Servez.

Servez a oe ganet er Blejik, war a greder, war-dro ar bloaz 300.

Beteg ma oe anvet eskob, ne anavezer ket nemeur e vuhez. Adaleg, avad, m'emañ etre e zaouarn eskopti Tongr, e teu e ano da vezañ brudet dre ar bed oll.

Gweled a reer anezañ o stourm 'eneb an Arianed, o tiskuill o fals-kredennou en tri goñsil : hini Sardik (344), hini Kologn (346), hag hini Rumini (359).

War-dro ar bloavez 380, e tiruill war ar vro bagadou gouezidi, an Huned o ano, renet gand Attila, eur roue draster. Ar re-mañ a lak en tan hag en gwad ar broiou dre ma tremenont.

Servez a bed Doue da espern, da vihannañ, e eskopti, hag a ya da Rom da bedi evid e zeñved, e-tal beziou an Ebestel.

Mez sant Per a zisklêrias dezañ e vije flastret kêr Tong gand an Huned : « C'hwi, emezañ, dizroit da Dongr ; lakit urz en hoh aferou hag it goude da Vaestrik da hortoz ar maro. »

Servez a zistroas da Dongr hag a zisklêrias d'ar bobl halharet ar pez a oa gourhemennet dezañ gand ar Mestr.

Prest goude ma oa degouezet en Maestrik, e kouezas klañv hag e varvas, an 13 a viz Mae 384.

War e vez e c'hoarvezas eun dra zouezuz : e-pad ar goañv, pa veze erh el lehiou all, a-droatajou, bez sant Servez a veze espernet.

Ar burzud-se a lakaas eskob Maestrik, sant Monulphus, da zevel eun iliz dispar e leh ma oa degaset relegou ar zant.

E-leiz a viraklou a hoarvezas eno.

Eur zoudard, skoet gand ar maro trumm, a zavas a varo da veo, hag a gonats e oa o vond da vezañ stlejet d'an ivern, pa deuas sant Servez da houlenñ seiz vloaz buhez c'hoaz evitañ. Bevañ a reas, en gwirionez, seiz vloaz ouspenn.

Mez ar haerrañ burzud a reas sant Servez evid an Iliz hag evid ar vro, a oe rei an treh da Charlez-Martel war ar Zarizaned en emgann braz Poitiers.

Sant Servez en-deus chapelioù en Breiz-Izel abaoe an amzeriou pellañ. Diou en-deus, dreist-oll, unan en Leon, hag unan all en Kerne-Izel. Homañ, gwechall "trev" ouz Duod hag hirie eur gaer a iliz parrouz, eo ar vrudetañ.

Eur pardon braz a vez greet eno bep bloaz, hag a oa brudet gwechall kement hag ar re gaerrañ a Vreiz, koulz ha Bulad, Landreger ha Gwengamp. A Dreger, a Gerne don, ha zoken a Wened, e veze gwelet eno pelerined dre vil, deut da bedi ar zant da ziwall o zrevajou diouz ar reo hag ar skorn.

Notenn gand an oberour

Penaos e teuas sant Servez da vezañ anavezet en Bro-Gerne ? Diouz ma lavar an Aotrou Joncour, bet person e Sant-Servez, marvet person en Plistin, e oe degaszet e relegou da Vro-Gerne gand soudarded an Impalaer Loeiz, mab Charlemagn, deut d'ober brezel d'ar hont Gwiomarc'h, ha savet o hamp gante e koajou Duod. En kichenn, e oa eur chapel da zant Laorañs, hag e lakjont enni relegou sant Servez a oa gante ; evel-se e teuas da vezañ anavezet hag enoret dre ar vro. Eur chapel all a oe savet ha kresket a damm-ha-tamm, adaleg ar bloaz 1540.

Ar pardon ne veze greet anezañ gwechall nemed *pardon ar bahadou*.

Gwechall-goz, sant Servez en Breiz a oa brudet :

Pardon ar bahadou n'eo ket c'hoaz ankouaet.

E-pad ar gousperou, deiz 'raog ar pardon braz,

Evid hijañ ar reo 'strake ar pennou braz.

*Ha goude 'vije beh, 'tre Kerne ha Gwened,
'Vid goud piou a dougje ar zant 'mêz ar vered.*

(Kanaouennou en yez Treger, gand Y.M.G. p. 45).

Kentel

Skoliou kristen ha skoliou dizoue²⁰

Abaoe ar bloaz 1882, oll skoliou ar gouarnamant en Frañs a zo dizoue dre lezenn : setu gwasañ ha skrijusañ darvoud a helle skei on bro. Eskibien Frañs o-deus komzet **oll a-unan**, frêsañ m'hellont, hag ouspenn eur wech, euz an dañjer braz m'eo ar skoliou dizoue evid ar vro, hag euz an *dever striz* o-deus ar gerent da gas o bugale d'ar skoliou kristen.

Ha ne oa ket re abred.

Eun ti ha n'eus kroaz ebed ennañ, n'eo ket eur pezh kaer, mar kirit, mez eun ti hag eo berzet kaoud kroaz On Zalver ennañ a zo eun dra euzuz.

Eun ti na vez ket sae du ar beleg e-barz, n'eo ket eur pezh kaer, mar kirit, mez eun ti hag eo divennet da zae du ar beleg mond e-barz, a zo eun dra euzuz.

Eun ti ha n'eus pedenn ebed e-barz n'eo ket eur pezh kaer, mar kirit, mez eun ti hag eo berzet ober eur bedenn ennañ a zo eun dra euzuz.

Skoliou ar goarnamant a zo **oll** bremañ, siwaz, tier en doare-ze, tier digritennet, da lavared eo, tier milliget, tier dizoue.

Daosut hag ar gristenien a hell kas o bugale d'ar skoliou dizoue ?

Unan a zaou. Pe 'z eus skol gristen ar barrouz, pe n'eus ket. ma'z eus skol gristen er barrouz, e tleont kas dezi o bugale, nemed koll braz o-defe ouz hen ober. ma n'eus ket a skol gristen er barrouz, ha ma'z eus a-dost, ar gerent a dle kas o bugale d'ar skol-ze²¹.

Ma n'eus ket skol gristen ebed a-dost, ar gerent a hello kas o bugale d'ar skol dizoue, gand ne vezo ket dañjeruz evid eneo ar vugale ; ha gand ma vezo kemeret preder d'o skolia ervad war ar relijion, er gêr pe en iliz.

Mez mar deo ar skol dizoue dañjeruz evid eneo ar vugale, abalamour d'al levriou fall a zo enni ha da gomzou difeiz he mistri, neuze, eme Bi IX, **goude ma kollfent o feadra hag o buhez zoken, ar gerent a rank chom hep kas o bugale d'eun heveleb skol.**

Notenn gand Embannan Hirwaz : A-du e oa Moal gand peurrenerez e feiz kristen. Arabad d'ar re na oa ket kristenien penn-kil-troad diouto, klask menegi o zoñjou.

²⁰ Skoliou kristen ha skoliou dizoue : Notenn gand "Embann an Hirwaz" : Gouennelourien a oa euz ar Gristenein.

²¹ kas o bugale d'ar skol-ze : notenn gand an oberour : Kemennadurez roet gand ar pab Pi IX da eskibien an Amerik !(24 a viz Du 1874)

Sant Brendan pe Brevalar

Abad (VI^{ved} kantvel)

Hirie e reer ivez gouel sant Brendan, unan euz ar zent a zo brudet, koulz e-touez on brudeur Tramor evel en on bro-ni.

Ganet e oe en Iwerzon. Pa oe arru en oad, e treuzas ar mor hag e teuas da vanati Lankarvan, en Bro-Geumri, e leh ma oe anvet abad, abalamour d'e skiant ha d'e furnez. Eñ eo a vadezas hag a gelennas sant Malo, en e skol, brudet dre-oll, koulz hag e oe bet en he raog hini sant Ildud.

Sant Malo o vezañ kuitaet Breiz-Veur, sant Brendan a deuas d'e heul beteg beteg aochou Breiz-Izel. Goude bezañ tremenet eun nebeud miziou, e tizroas war e giz d'Iwerzon. Tremene a reas dre enezenn Jersey, 'leh ma zo c'hoaz eur porz-mor hag eun iliz war e ano.

Degouezet en e vro, e varvas, da 93 vloaz, en eur manati anvet Clueinfurt, hag a oa bet savet gantañ.

Sant Brendan a zo patron meur a barrouz euz on bro, en o zouez Lanvelleg ha Tregrom.

Sant Erwan

D'an naontegved a viz Maer

Alvokad, barnier ha beleg, patron Breiz (1253 – 1303)

*Nan eus ket en Breiz, nan eus ket unan
Nan eus ket eur zant koulz ha sant Erwan.*

Erwan Helouri, meleour ar veleien, burzud e amzer, alvokad ha tad ar beorien, an intañvezed, an emzivadeg, patron Breiz, e oe ganet en maner Kervarzin, e-tal kêr Landreger ; d'ar 17 a viz Here 1253, er houlz ma oa Inosant III war Gador sant Per ha Yann ar Rouz war dron duked Vreiz.

Tanguy Helouri, e dad, a oa bet en brezelioù ar Groaz, gand sant Loeiz, hag en dizro 'oa dimezet da Azou ar Genkiz, euz a Beurid.

Erwan a oa an eil euz a bemp. E vamm a lavare dezañ : « O ! ma mabig, bez fur, ma vezi eur zant, eun deiz ! », hag ar hrouadur a responte : « N'am-eus ken c'hoant, ma mamm. »

Goude bezañ bet eur pennad er skol en presbital Pleuvihan hag en manati Porz-Vrao, eh eas da skol-veur Bariz, a oa pemp mil warn-ugent den yaouank o heuill anezi hag a oa en he fenn mistri vrudet dre ar bed oll, evel Albert ar Braz, sant Bonavañtur ha sant Thomas Akin.

Erwan en-doa pevarzeg vloaz (1267). Derhel a reas ken mad d'ar hentelioù roet dezañ gand e vamm a-raog mond euz ar gêr, ma tremenas deg vloaz en-kreiz trouz ha dizurz ar gêr vraz, heb ma vije bet gouest ar skwerioù fall a gave a bep tu dezañ d'e lakaad da goll e zantelez.

Tehel a ree diouz an dud yaouank skañv-benn ha goulenn a reas bezañ degemeret en Trede-Urz sant Frañsez.

Eun dra hag a weled o vond war gresk ennañ, dre ma kosae, 'oa e garantez evid ar beorien. Biskoaz n'eo bet gwelet o chom heb rei an aluzenn pe deued da houlenn outañ. Daou vil skoed leve bennag en-devoa diouz e dud, mez n'en-devoa netra evitañ e-unan ; e daol a oa digor da gement hini a gare azezañ outi ; rei a ree lojeiz d'an dremenidi hag e-unan eh aoze deze o gweleou, hag evel ma oa re enk e di, devezioù a veze, e reas sevel eun ospital en e gichenn.

Eun devez e kavas, war dreuz e zor, eur paour-kêz den goloet e gorv gand al lognez ; degemer a reas anezañ gand laouenedigez ; rei a reas dezañ peadra d'en em walhi hag e lakaas anezañ da azezañ ouz taol en e gichenn. An den lor, goude bezañ greet seblant da zebri eun dra bennag, a zavas en e zav, hag a lavaras en brezoneg : « *Doue vo ganeoh !* » Kerkent e teuas da vezañ skeduz evel an heol hag e pignas en neñv. Erwan a zaoulinas d'an douar, hag e-pad meur a zevez ne gredas ket azezañ ouz eun daol hag a oa bet Jeuz-Krist azezet outi.

Adaleg ar bloaz 1289, e kreskas e binijennou. Yun a reas tri devez er zun diwar bara ha dour, da verher, da wener ha da zadorn. Pa ne yune ket, ne zebre nemed eur pred bemdez, bara segal, heiz pe gerh, kammed bara gwiniz ; soubenn ar haol, an irvin pe ar fao, gand hollen ; dibaot 'oa dezañ lakad enni bleud pe amann.

Gand an dra-ze, Erwan a oa izeleg evel eur bugel ; daoust ma oa speredekañ den a oa en e vro, ne glaskas nag an enorioù nag ar meuleudioù.

Bale 'ree bepred ; koulz lavared, war e droad, diou lerenn, ha netra ken, ouz e dreid ; eur gouriz reun kaled, hag eur roched stoup a pa war e grohenn, hag eur zae a izel briz war horre.

Pa deuas an dud da houzañ e oa ar prezeger helavar-ze, al lezenner gouizieg-se, brasoh den c'hoaz dre e binijenn hag e vadelez, eged dre e ouiziegezh hag e zoare da brezeg, neuze, nobl ha dinobl, paour ha pinvidig, a deuas da gared an aotrou Erwan evel o zad, ha dalv m'hen gwelent, e savent en o zav dre zoujañs evitañ.

Erwan, en e vugaleaj, a gare kanañ ha kleved kanañ gwerziou ar zent koz a ziazezas ar vro. Ar hiz a oa neuze c'hoari ar *Basion* (a bade eiz deiz) ha peziou all war *vuhezioù zent*, o sevel diwarne skwer vad ha kelennadurez kristen evid ar Vretoned. Erwan, ùa ne zavas ket a hoariou evel-se, eñ e-unan, a bourchasas, da vihannañ, d'ra re hen gree. Skrivañ a reas *Buhez sent Breiz* en brezoneg. Al levr-ze, greet gand eur zant, diwar-benn sent e ouenn hag on hini, a zo bet kollet ! Pebez koll evidom !

Erwan a dremenas da houlou-deiz, d'ar zul war-lerh ar Yaou-Bask, d'an 19 a viz Mae 1303. E varo a lakaas Breiz a-bez e kañv. Pevar bloaz ha daou-ugent goude-ze e oe lakaet war roll ar zent, d'an 19 a viz Mae 1347, gand ar pab Klemant VI.

En iliz-veur Landreger, e leh ma oe sebeliet, e virer c'hoaz e benn en deiz a hirio.

Unan euz brasañ pardonioù Breiz eo an hini a vez lidet eno, en enor da Zant Erwan, an 19 a viz Mae. N'eus ket kaerroh prosesion eged an hini a ya, en deiz-se, euz Landreger d'ar Minihi, ennañ oll barroziou ar hanton hag eun niver a belerined, a-ziavêz Breiz koulz hag euz ar Vro. Red eo kleved mouez ar bobl o kanañ kantikou ha gweled, en skeud ar bodennou lann alaouret, penn sakr ar zant o tremen, douget war diskoaz ar veleien, hag a lavarfed, kentoh, e vez douget war eur mor a gan hag a bedenn.

Deiz ar pardon bihan, pardon ar relegou, savet gand ar pab, er bloa 1347, ar penn santel a ra adarre tro an iliz-veur, ar gristenien ouz e heul gand gouleier.

'Pad ar bloaz, dreist-oll e-pad miz Mae, e tered pelerined da Landreger da bedi sant Erwan. Er Minihi, e vezint gwelet ivez oh ober, war o daoulin noaz, tro e chapel hag o tremen daoubleget dindan bolz e vez. Al labourer a lak e dokad ed 'barz an arh, hag a dastum eun toullad bili bihan diwar ar vered, unan evid pep hini euz e barkou.

N'eus netra en kêr Landreger seurt gand iliz sant Erwan ; n'eus netra en iliz seurt gand e vez, abaoe m'eo bet adgreet a nevez-flamm. An aotrou 'n eskob Boucher, "eskob sant Erwan", a reas sevel anezañ. En e gichenn e kavas e gurunenn, rag en Landreger e oe skoet gand ar maro, an 21 a viz Mae 1888. Gand se, gouel ar bez nevez ne oe gallet lidañ anezañ nemed pa oe bet anvet da eskob an aotrou Fallières. Ar gouel-ze a badas tri deiz, 7, 8 ha 9 a viz Gwengolo 1800. Arheskob Roazon, oll eskibien Breiz, an aotrou 'n eskob Freppel, a deuas da bardonañ da Landreger ; kêr a oa beuzet gand ar belerined.

Sant Erwan e-neus bet a-viskoaz, evid e Vretoned, eur galon dener ; ar Vretoned o-deus ives e garet a beb amzer ; e zantelez dreist-muzul hag e vadelez dispar o-deus da viken gonezet o halon.

Aotrou sant Erwan, pedit evid ho Pretoned ; pedit evid ho Pro !

Sant Donasian ha sant Rogasian

Trede devez warn-ugent a viz Mae
Bugale an Naoned, merzerien (“-288)

Ar vro gaer om enni o chom, bremañ zo daou vil bloaz, e vije greet an Arvor anezi. He zud a heulie relijion an drouized, o beleien goz, pe hini ar Romaned, o mistri nevez. Sklêijenn ar feiz ne baras war an Arvor nemed daou-hant hanter-kant vloaz bennag goude ma pignas Jezuz-Krist en neñv, ha Rogasian ha Donasian, eo an daou Arvoriad kentañ ‘zo ano aneze war rollou an Iliz.

Daou vreur ‘oant, a ouenn uhel, genidig ezu an Naoned. N’o-devoa na tad na mamm, na den ebed ; kelennet ‘oant war ar relijion gristen gand eun eskob o tremen dre ar vro. Donasian, ar yaouankañ, a oa badezet hag a gatekize e vreur a-benn e vadeziant.

En miz Mae 288, gouarner braz Bro-Hall a deuas d’ober eun dro d’An Naoned. Kement hini en-devoa c’hoant da vezañ arru mad gand an impalaer, e reas dezañ degemer braz. Evel ma houlenne kelou euz stad kêr, eur pagan a lavaras :

« En em gavet mad oh da zond amañ, rag marteze c’hwi, da vihannañ, a hello tennañ euz pennou tud a zo en on zouez, ar froudou fall a ra deze mond da goll, war-lerh an den o-deus ar Judevien staget ouz ar groaz. Unan aneze, Donasian e ano, ho-peus ezomm da skei warnañ da gentañ, rag n’eo ket bet a-walh dezañ chom hep kinnig ezañs d’an doueou, deut eo, dre e hevier, a-benn da douelli e vreur. N’ho-peus nemed ober deze dond d’ho kaoud hag e welfet. »

Ar gouarner a oe estlammet o kleved an neventi-ze. Lakaad a reas degas an daou gristen dirag e gador-varn. War Donasian, e-unan, e oe greet an enklask kentañ.

Ar Gouarner : « Donasian, ar vrud a zo deut beteg ennon az-teus nahet a-grenn adori Jupiter hag Apollon, doueou braz an impalaered, hag ez out o klask rei da gredi d’ar bobl e vezo salvet, dre varo eur reuzeudig ‘zo bet staget ouz ar groaz. »

Donasian : « Lavaret az-teus ar wirionez hep soñjal. Ya ! kared a rafen degas an dud dianket da adori an hini a rank bezañ servijet gand an oll. »

Ar Gouarner : « Didrouz gand da demziou divalo, pe me a lako lazañ ahanout hebdale. »

Donasian : « Teñvalijenn an droug a zo gwell ganah eged sklêrijenn ar Hrist ; mad, mervel a rafet en ho teñvalijenn. »

Ar gouarner en-devoa klevet a-walh gand Donasian. Lakaad a reas degas Rogasian, hag o vezañ ne oa ket badezet c’hoaz, e krede bezañ gouest da honid anezañ dre gomzou flour.

Mez Rogasian a respontas heb marhata :

« N’eus nemed fallagriez en ho spered hag en ho komzou. N’ouzoh ket, zoken, pe an doueou pe an impalaered da lakaad da gentañ. Ho toueou n’eus buhez ebed enne, hag ennoh, kennebeud, n’eus ket a skiant, rag ar re a ador ar vein n’int ket disheñvel diouz ar pez a adoront. »

Ar gouarner a youhas kerkent evel eur bleiz :

« Kasit ar foll-ze da gaoud ken foll hag eñ ! Stlapit anezañ er prizon gand e vreur ! Warhoaz, dirag ar bobl, e vefont dibennet ! An dra-ze a zesko deze ober goap euz an doueou hag euz ar briñsed ! »

An daou vreur a dremenas an noz o pedi hag oh ober o himiadou an eil d’egile.

Rogasian, doaniet abalamour ne oa ket c’hoaz badezet, a houlenas ouz e vreur bihan rei dezañ, da vihannañ, pok ar peuh, ha Donasian, en eur bedenn hwek, a houlenas ouz Doue rei d’e vreur henañ, dre vadeziant ar gwad, an oll hrasou en-dije bet dre vadeziant an dour.

An deiz war-lerh, karget a chadennou, e oent kaset adarre dirag ar gouarner :

« Hiviziken, emezañ, e rankan bezañ striz en ho keñver. »

An daou vreur a respontas laouen :

« Ne gollfom ket ar vuhez o rei anezi evid an hini en-deus he roet dim, hag a ouezo he renti dim adarre er baardoz. »

Dallet gand ar gounnar, ar gouarner a reas stagañ an daou vugel kaloneg war eur marh koad. Goude bruzuna o izili, ar bourreo a doullas deze o goug hag o dibennas.

Den, a lavar dim ar skridou sakr, ne gemeras truez ouz ar verzerien yaouank, ar pezh a ziskouez ne oa c'hoaz kristen all ebed nemed o teuler o zreid benniget war douar an Arvor.

Sant Jorand

Ermit (XIV^{ved} kantved)

An 28 a viz Mae, e reer ivez gouel sant Jorand, en-deus en parrouz Ploueg, eur pelerinaj brudet hag eun iliz anvet an Iliz-Kaer.

En Gouanac'h e oe ganet. Goude maro e dad, e teuas gand e vamm da chom da Gergrist, en Ploueg, hag e kavas eno eur mestr mad d'hen kelenn. Pa gollas e vamm, e savas eur peniti en-kichenn chapel an Drinded. E amezeien, tud fallagr, a reas dezañ kuitaad al leh-se ha mond da glask degemer gand meneh Sant-Jubeg, e Peder neg. Eno ar zant a oe beleget hag a renas eur vuhez leun a skwer vad. Koulskoude, Plouegiz n'o-devoa ken nemed gwall-chañs abaoe m'o-devoa e argaset ; Dond a rejont en prosesion da gerhad anezañ :

*Dirag Jorand, er manati,
'Deus daoulinet, 'n eur hirvoudi,
Evid goulenn, a galon vad,
Gand an den santel, o mennad.*

Ar zant a dizroas gante hag a zavas eur manati en Drinded. Goulenn a reas, 'raog mervel, ma vije beziet en tu dehou da aoter e iliz ; ahane e skuill bepred war e genvroiz madelezou a bep seurt.

Sant Jorand a zo pedet 'vid al loened korn, en zoñj euz ar burzud a lavarar e reas, pa oa c'hoaz krennard, o renti ar vuhez da vuoh e vamm bet laeret ha lazet gand eur vandenn zoudarded.

Daou bardon ar bloaz a vez greet en e enor : unan, deiz sul kentañ an Azvent, egile, deiz sul an Drinded. Ar pelerinaj-mañ a bad eiz deiz hag a zo darempredet gand pelerined a bellbro.

Sant Ronan

An aotrou Ronan benniget a oa ganet en Iwerzon ; unan 'oa euz an tri-hant hanter-kant eskob konsakret gand sant Patrig.

Ar c'hoant en-devoa da vevañ pell diouz an dud ha tost da Zoue a reas dezañ treuzi ar mor evid dond da Vreiz-Izel. Douarañ a reas en Aber-Ildud ; ahane eh eas hed-ha-hed an draonienn beteg al leh m'emañ bremañ ar gêr a zoug e ano, Lokronan²². Eno e chomas eur pennad, mez pa welas eh ee brud e zantelez dre ar vro, e kemeras an teh hag eh eas d'en em guzañ en koad Neved, e Bro-Gerne.

Sevel a reas e beniti en penn an neh ar hoad-se, ha diwar dreuz e zor e wele Kemper, Menez Hom hag ar mor glaz. E amezeien a ree o gonidegez diouz o loened ; Ronan a zeskas deze en em zizober diouz ar bleidi a ree kalz a haou oute. En doare-ze e teujont da lakaad o fiziañs ennañ. Paganed e oant ; Ronan a lakaas sklêrijenn ar feiz da zevel warneze.

Eun den a oa hag a deue aliesoh eged ar re all war e dro, da glevet gantañ komzou Doue. Mez Keban, e wreg, a gave dezi e kolle e amzer, ha ne oa ket evid gouzañv an darempred-se. Ne oa ket a-walh dezi gourdrouz he gwaz ; mond a reas eun devez da gaoud ar zant d'ober trouz dezañ. Kas 'reas, zoken, dre ar vro, ar vrud en-devoa Ronan ar galloud da drei en bleiz, beb loar nevez, hag e tebre ken buan, er hiz-se, an dud hag al loened : « Red eo e lazañ, emezi, pe lakaad oll chas ar harter war e lerh. »

Goude bezañ savet ar gont-se, e kuzas he merh vihan en eun arh hag eh eas da Gemper da gaoud ar roue Gralon, da damall Ronan da vezañ debret he hrouadur.

Ar roue, ouz he hlevet, a gredas e oa gwir ar pez a lavare, hag a roas urz da lakaad degas an den santel d'e lez. Pa zegouezas, e reas e stagañ ouz eur wezenn ha laosked warnezañ daou bez ki, naon du deze. Ronan a reas eur groaz war e galon hag a lavaras a vouez uhel : « Sentit ouz Doue ! »

Raktal an daou aneval a dehas en eur harzal. Gralon, sebezet, a lavaras d'ar zant :

« Servijer galloudeg an Aotrou Doue, arabad dah kaoud kas ouzom, ni ho ped ; greet on-deus dah 'n em skuizañ o tond beteg amañ ; stlapet on-deus ahanoh d'ar chas da zraillañ ; dallet 'oam gand gevier ar pez fall-ze. Ha bremañ, na petra vad a refom dah, p'emañ Doue a-du ganah ? »

Ar zant a respontas :

*« Netra vad me ne houlenan,
Nemed truez d'ar wreg Keban ;
He bugelig n'eo ket maro,
Ganti en arh 'oe klozet beo. »*

Pa'h ejod da weled, e oe anavezet ne oa nemed re wir ar pez a lavare. Neuze :

*An Aotrou Gralon hag e dud,
Souezet braz gand ar burzud,
N em strinkas dirag sant Ronan
Da houlen pardon digantañ.*

Evid tehel adarre a-raog ar vrud, ar zant a 'n em dennas en Hillion, en kostez Sant-Brieg, e leh ma varvas.

E gorv, lakaet en eur harr, daou ejenn gouez stag warnañ, a oe degaset da zebeliañ da beniti koad Neved, a vezo anvet hiviziken Lokroan.

Keban, pa welas ar harr o tond, a grogas ar gounnar enni ; gand he golvaz e torras korn unan euz an ejenned hag e laoskas pep seurt malloziou war heh enebour maro :

*N'oa ket he genou peursorret,
Pa oe gand an douar lonket,*

²² Lokronan : Notenn gand an oberour : Lavaret Lokronan.

*E-touez maged ha flammou tan,
El leh a halver Bez Keban.*

Korv sant Ronan a oe sebeliet gand lid braz er peniti santellaet gand e bedennou hag e binijennou ; diwezatoh, war-dro ar bloaz 1500, e oe savet eno eun iliz vraz, unan euz ar gaerrañ a weler en eskopti Kerne.

Bep c'hweh vloaz, en Lokronan, ar prosesion anvet *an Tromeni*, en-dro da goad Neved ; teir leor hent a zo d'ober ; dre bemp parrouz e tremener ; eun hanter-devez bale evid ar pemzeg hag ugent mil den a vez ouz e heul. Er bloaz 1905 eo bet greet kentañ Tromeni an XX^{ved} kantved.

Sant Herve

Seitegved devez a Vezeven (521 – 566)

War-dro ar bloaz 515, eur Breizad, e ano Hervian, e-leh diskenn gand e genvroiz en Bro-Arvor, a ziskennas e Bro-Hall.

O vezañ ma oa telenner, kaner ha barz, e kavas degemer laouen en lez Childebert, roue Pariz.

Goude bezañ tremenet pevar pe bemp bloaz e-touez ar Hallaoued, e houlennas dizrei d'e vro ; koulskoude, a-raog pignad el lestr a dlee e dreiziañ, e c'hoantaas gweled ar Vreiz nevez, e oad o sevel war dismantrou an Arvor.

Er mare ma oa oh ober hent etrezeg ar huz-heol, en-devoe eun huñvre, hag e wele ennañ eur verh yaouank leun a furnez hag a gened ; ar gwel-ze hen strafuillas meurbed, rag greet en-devoa le da chom dizemez. Mez eur vouez a lavaras dezañ : « Demdost amañ 'zo eur verh, troet war ar han ha war ar bedenn, heh ano Riwanon ; evelдох he-devoa lakaet ivez en he spered mired he gwerhded ; mez c'hoant Doue eo eh afeh an eil gand egile ; he haoud a rafeh e-tal eur feunteun, war lez an hent braz a heullit. Eur mab ho-pezo, a vezo eur zant braz hag a zalvo e-leiz a dud. »

An deiz war-lerh, war-dro Landouzan²³, Herve a gavas Riwanon ; he zud a oa maro ; he breur Rigour 'oa he hurator. Hemañ a roas e asant evid an eured, a oe lidet prest goude.

An dimezi-ze a roas d'on bro unan euz he brudetañ bugale, unan euz ar re a verkas an donnañ e roudou en douar Breiz, a oe, war eun dro, kelenner, manah ha sant, a oa anvet Houarne, en amzer goz, hag a zo anavezetoh bremañ dindan an ano a Herve.

Ar garantez he-devoa Riwanon evid ar werhded, hag ar grizder a deue dezi diouz he zud hag o-devoa silet enni gand o gwad, a reas dezi goulenn ouz Doue ma vije dall he hrouadur. Herve a hanas dall hag a chomas dall 'hed e vuhez.

E vamm hen dilezas ha koll a reas abred e dad.

Adaleg e zeiz vloaz beteg e bevarzeg, e oe skolaet war reou ar bed-mañ hag war-dro ar bed all gand eur manah e ano Arzian.

Eur wech greet gantañ e studi, eh eas da weled e genderv Urfol²⁴ a oa o vevañ en eur horn euz ar hoad Donnañ.

Riwanon, en draonienn dostañ, a rene en he zi he-unan eur vuhez euz ar re strisañ. Urfol a houlennas outi ha c'hoant he-dije da weled he mab ; Ar garantez a vamm, dihunet erfin en he halon, a reas dezi degemer Herve gand teneridigez.

Eun nebeud deziou goude e termenas.

Urfol, ha ne gare nemed ar vuhez didrouz, a dehas en goueled ar hoad hag a roas d'e genderv e beniti, e di-bedi, e skol hag e skolaerien.

Herve a chomas eno tri bloaz. Krennlavariou deut beteg ennom, a rumm da rumm, a zo bet savet gantañ ; setu amañ darn anezo :

*An neb ne zent ket ouz ar stur
Ouz ar garreg a ray sur ;*

*Gwell eo deski mabig bihan
Eged dastum madou dezañ.*

²³ Landouzan : Notenn gand an oberour : Chapel Sant-Uriol a zo er Vourh-Wenn (Bro-Leon). E-kreiz ar chapel, eur volz demheñvelouz eur bez a vir e relegou, war a leverer.

²⁴ Urfol : Notenn gand an oberoru : Chapel Sant Urfol a zo er Vourh-Wenn (Bro-Leon), E-kreiz ar chapel, eur volz demheñvelouz eur bez a vir e relegou, war a leverer.

*An den yaouank en diegi
A zastum poan 'benn e gozni.*

Pa glevas 'oa maro Urfol, eh eas da bedi war e relegou hag e lakaas e zeskebien hag ar vesaerien o-devoa o hentchet da zavel dezañ eur bez braz ha kaer.

Goude-ze e chomas eur pennad en Koadhouarne²⁵ e-leh ma weler c'hoaz e di hidiv hag e feunteun. Ahane e valeas war-zu gorre-Leon. En Lanhouarne, war douar Innok, e savas eur manati ; en Sant Noug, en Gwitevede hag en Keran, 'z eus lehiou hag a zoug c'hoaz e ano benniget.

En amzer-ze, e oa o chom en kostez Kerhaez, eur roue bihan, e ano Konomor ; sevel a reas c'hoant gantañ da vezañ roue war Vreiz a-bez. E vennad ne oa ket fall ; fall e oe, avad, an doare a gemeras d'e gas da benn, rag klask a reas lazañ Judual, roue an Domnone ; lazañ 'reas e bried Trifina, merh Gwerok, kont Gwened. Sant Gweltaz a brezege dre ar vro en e eneb, hag er bloaz 548, dirag eun niver braz a dud, labourerien, tudjentil ha meneh, bodet war gein ar Menez-Bre, eskibien Breiz a stlapas Konomor euz a reñk ar gristenien.

Herve ne oa ket 'n em gavet kerkent hag ar re all, mez ne oa greet netra a-raog ma tegouezas ; gedet e oe eun devez penn-da-benn, ar pezh a ziskouez an istim a oa evitañ er vro.

E tro ar bloaz 566, e varvas e Lanhouarne, e-leh ma virer c'hoaz darn euz e relegou.

²⁵ Koadhouarne : Notenn gand an oberour : Hanter-hent etre Lanriouare ha Plougin (Bro-Leon).

Sant Herbot

VIII^{ved} kantved

Hirie eh enorer c'hoaz en on bro sant Herbot, a oa mab da dudjentil euz Breiz-Veur, hag a deuas abred en Arvor. Dibab a reas e chomaj en-kreiz ar hoajou, 'vid galloud ober gwelloh a ze anaoudegez gand Doue, o vezañ pell diouz an dud. Al loened gouez a douje dezañ, hag ar baganed kelennet gantañ a degemere ar vadiziant. War douar parrouz Berrien e vevas pell amzer hag eno e varvas. E vez hag e chapel a zo en Plonvez-ar-Faou.

Sant Herbot a zo unan euz ar vruiñ brudet e-touez ar zent vreton. Dre-oll en-deus chapeliou ha skeudennou. Plouared ; Kawan, Ploulec'h, Plounevez-Kintin o-deus beb a chapel gouestlet dezañ.

Itron Varia Rumengol

O ! Rumengol, pell amzer 'zo
C'hwi eo boked kaerrañ on bro ;
En Leon, Treger ha Kerne,
Ganeh e klever c'hwez an neñv.

En eskopti Kerne, e-leh m'emañ bremañ mor Douarnenez, e oa gwechall eur gêr vraz,, anvet Iz. Eur voger ledan hag uhel, gand skluziou houarn, a zivenne anezi diouz ar mor. Er gêr-ze, ne veze gwelet, e-touez an dud pinvidig, nemed dizurz, gwall skwer ha fallagriez.

Gralon, roue Bro-Gerne, a oa neuze o chom eno, ha glaharet braz e oa o weled dizurziou ha buhez diroll e verh, ar briñsez Ahez, gand noblañs yaouank ar vro.

En amzer-ze, e oa ivez en Breiz-Izel, daou abostol santel, o-daou mignoned da Zoue, sant Kaourantin, kentañ eskob Kemper, ha sant Gwennole, kentañ abad Landevenneg.

Prezeget o-devoa aliez en Iz ha gourdroutet ar roue Gralon, abalamour d'an droug a veze greet bemdez en palez e verh yaouank.

Mez ar roue, dinerzet gand an oad, n'en-devoa mui a halloud a-walh evid trehi dizurziou ken braz.

Doue a skuizas erfin o weled Iziz kaledet en o fehejou, hag a roas da anaoud d'e vignon Gwennole e vije beuzet hebdale ar gêr-ze gand ar mor.

Kerkent Gwennole a bignas war e varh hag a redas d'ar gêr villiget da weled hag-eñ e hallje c'hoaz distrei diwarni breh an Aotrou Doue.

Siwaz ! tremenet 'oa an druez. Pan arruas an abad santel, war-dro hanternoz, skluziou Iz a oa digor, hag ar mor a groze spontuz, en eur veuzi an tiez, an dud hag al loened. Gwennole n'hallas saovetaad nemed Gralon hepken. Ha kêr Iz, evel Sodom, Gomor ha Babilon, a zo eet da netra ; hirie ar mor a ruill dreisti.

Da zav-heol, Gralon a bignas gand Gwennole war lein Menez-Hom ; ahane e taolas eur zell truezuz en-dro dezañ, hag el leh ma oa ar gêr a Iz, ne welas nemed mor Douarnenez. Kouezañ a reas d'an daoulin evid trugarekaad Doue hag ar Werhez da vezañ saovetaet e vuhez.

Pa zavas diwar e zaoulin, e welas o lugerni dindan an heol tosenn Rumengol, a veze lazet warni tud en enor d'an doueou. Hag ar roue, beuzet en e zaerou, hag e zaoulagad savet war-zu an neñv, a lavaras d'e vignon santel : « War an dosenn-hont, gouestlet d'eun doue didruez, me a raio sevel eun iliz kaer d'ar Werhez ; hag el leh ma skuiller ar gwad da Deutatez, e skuillo Mamm Doue he grasou war Vreiz-Izel. »

Kared a ree mond di, gand e vignon ker, da bedi Mamm Doue evid e bobl ; ha pa varvas en Landevenneg (505), etre divreh sant Gwennole, e kinnigas e ene da Zoue, en eur lavared :

*Itron Varia Rumengoll,
Mirit ouzin na'z in da goll !
Pedit ivez ho Mab Jezuz,
Ma vezin gantañ eüruz.*

Pevarzeg-kant vloaz a zo ma'z eo maro Gralon ; hag ar Vretoned, bepred tud a feiz hag a galon, o-deus c'hoaz soñj euz o roue koz hag euz e vignon sant Gwennole. Pa'h eont, da Zul an Drinded, da bardon braz Rumengol, ha pa welont mor Douarnenez, Menez-Hom, Landevenneg ha tour uhel iliz kaer an Itron Varia Remed-oll, e lavaront c'hoaz, an daerou en o daoulagad, en eur gerzed gand doujañs war douar ar zent hag ar rouaned :

*Brasañ burzudou a zo bet
Amañ, en amzer dremenet ! (Notenn)*

Sant Mewen

En on bro, e reer hirie ivez gouel sant Mewen, a hanas en Bro-Geumri, war-dro ar bloaz 520, hag a ziskennas en Bro-Arvor, da heul Sant Samson, er bloaz 550.

Sevel a reas manati Gael, en-kreiz koad Bresilien ; eno e varvas, en e gant vloaz, hag eno ivez e oe sebeliet.

Miraklou braz a hoarvezas e-tal e vez, hag a ziskouezas brazder e halloud dirag Doue.

Sant-Neven, en eskopti Leon, Tremeven, Ploeven ha Gwillogomarc'h, en eskopti Kerne, o-deus e gemeret da batron.

An Itron Santez Elflez

Trede devez warn-ugent a Vezeven

Rouanez ha Gwerhez, Patronez Treflez (-679).

Elflez²⁶ a hanas en Breiz-Veur, en penn kentañ ar seizved kantved. He herent, Soazon vraz, brudet ha pinvidig, zavas anezi en doujañs Doue.

Evid ober diouz he zud, e timezas d'ar priñs Tonbercht ; mez o vezañ ma oa en he halon ar c'hoant da chom bepred gwerhez, en em glevas gantañ evid bevañ o-daou evel breur ha c'hoar.

Tri bloaz goude, da varo he fried, e oe greet kement warnezi, ma'h asantas addimezi, hag e roas he dorn da Egfrid, roue an Northumberland. Daouzeg vloaz e vevjont an eil gand egile, ha mired a reas bleuniou he gwerhded, kenkoulz goude he eil eured ha m'he-devoa greet goude he hentañ.

Koulskoude, ar c'hoant da ren eur vuhez santelloh c'hoaz eged an hini a rene el lez, a reas dezi goulenn ouz he fried aotre da vond da leanez. Egfrid, daoust pegement a garantez a oa etreze, a roas dezi he goulenn.

En em denn a reas neuze en manati Koldhingam, ha ken skweriuz 'oa he buhez, ma oe anvet, bloaz goude, da abadez en manati enez Ili (672).

Eno, nemed eur gouel braz bennag a vije, pe dihet en em gave, ne gemere nemed eur pred bemdez ; adaleg hanternoz, e chome da bedi beteg an deiz ; kaoud poan ha mez 'oa he dudi.

C'hweh vloaz a oa ma rene he c'hoarezed war hent ar baradoz, pa oe taget an darn vrasañ aneze gand ar vosenn. Elflez a reas oute, evel eur vamm ouz he bugale, hag en doare-ze e tapas he-unan ar hleñved.

Leskadurez he-devoa gand eur gor braz a oa en he goug, hag e lavare d'ar medisin a doulle anezañ dezi :

« Mad a zo greet din ; em yaouankiz e tougen war ma goug seizennou perlezennet ; Doue, en e drugarez, e-leh gortoz ar bed all evid kastizañ ma ficherez, am sko dioustu er bed-mañ ; mil meuleudi dezañ ! »

Mervel a reas d'an 23 a vezeven 679, ha sebeliet e oe, war he goulenn, e-touez he c'hoarezed.

Unneg vloaz goude, e savjod he relegou evid o lakaad en eur mên nevez. Daoust ne oa ket balzamet he horv, e oa kavet fresk-beo ; al lienachou a oa en-dro dezañ n'o-devoa bet droug ebed ; eur glezienn²⁷, ha netra ken, a verke ar gouli braz a oa en he goug pa dremenas. E-leiz a viraklou a hoarvezas e-tal he bez. Beda a skrivas he buhez. Kosañ iliz katolik a zo en Londrez a zoug c'hoaz he ano, en deiz a hirie.

Notenn gand an oberour : Beda (673 – 735) a oa e ano war roll ar zent. Leon XIII en-deus roet dezañ al lesano a zoktor euz an Iliz ha gourhemennet ober e ouel dre ar bed all, d'ar 27 a viz Mae.

²⁶ Elflez : anvet ivez : Hethelflez, Etheldrez, Ethelrez, Editrud, Elidru, Audry ventrok.

²⁷ eur glezienn : ? Brondudur.

Sant Yann ar Biz

Sant Yann a zo unan euz ar zent savet uhellañ en baradoz an Aotrou Doue, ha brudet ar muiañ e-touez an dud ; en Breiz-Izel, an tantadou a zigor e ouel hag a zoug e ano benniget, euz an eil traonienn d'eben hag euz an eil menez d'egile.

E bardoniou a zo stank ha laouen : kaerrañ a oufed gweled, koulskoude, eo hini sant Yann ar Biz.

En amzer ma oa Jann d'Arc hag Arzur Richemont o kas ar Zaozon euz Bro-Hall, eur biz da da zant Yann Vadezour, an hini ma tiskouezas gantañ Salver ar bed, pa lavare d'e zeskibien : « Setu aze Oan Doue », goude bezañ bet miret e-pad meur a gant vloaz en Normandi, a oe douget, en eun doare burzuduz, da Draoñ-Meriadeg, gand eun den yaouank genidig euz a Blougasnou.

Ar biz santel, eur wech 'n em gavet e-touez ar Vretoned, a reas kemend a viraklou, ma reas an duk Yann V sevel eun iliz en e enor, a zo c'hoaz, en deiz a hirie, unan euz ar re gaerrañ a zo en on beg douar. Diazezet d'an deiz kentañ a viz Eost 1440, ne oe peurhreet nemed er bloaz 1513, gand aluzennou pinvidig Anna Breiz.

Aotrou sant Yann benniget, grit dim heuill Jezuz-Krist war an douar-mañ, ouz sklêrijenn ar feiz, ma hellfom e weled diwezatoh er baradoz, ouz sklêrijenn ar gloar.

Notenn gand an oberour : er bloaz 1513 : Konsakret e oe d'an 18 a viz Du 1513, gand an Aotrou A ; de Gringaulx, eskob Landreger.

Notenn gand Embann an Hirwaz : ar biz : marteze n'eo ket biz sant Yann, mez al leh m'ema ar barrez e-kichenn eur gêr vraz.

Sant Salaun ar Merzer

Roue Breiz (857 – 874)

Pemved devez warn-ugent a Vezeven

Salaun a zastumas kurunenn Vreiz en gwad e genderv Erispoe, en miziou du 857.

Ar Vretoned, sebezet o weled an doare displeal en-devoa kemeret evid pignad war an tron , a oe nehet o klask gouzoud pe e oa dleet deze senti outañ, pe ne oa ket.

Charlez ar Moal, roue ar Hallaoued, o weled nehamant Breiz, a gemeras tro ahane evid kerzed warni. Lamm en-devoa bet c’hoaz diouz an tu-ze, hag e krede dezañ e oa deut ar mare evitañ da gas an dorz d’ar gêr. Mez an aon da gouezañ dindan galloud o enebourien a reas d’ar Vretoned en em vodañ en-dro d’o roue nevez, hag on bro n’eo ket bet biskoaz kaerroh, brasoh, na kreñvoh evid en amzer Salaun. Mond a ree adaleg an Naoned beteg Angers, hag ahane da ster ar Vire (867).

Er bloaz 871, e c’hoantaas mond da Rom da gaoud an Tad Santel ar Pab, da varn ar breujou a oa savet etre arheskopti Dol hag arheskopti Tours, hag ivez, moarvad, da anzañ e behed ouz vikel Jezuz-Krist, evid kaoud digantañ pinijenn hag absolvenn.

Mez pennou braz e rouantelez a gavas e oa an Normaned re dost da aotzhou Breiz, evid ma hallje en em lakaad en hent. Eskob Gwened, Jeremias, a yeas neuze en e blas da gaoud Adrian II, a oa en amzer-ze war Gador sant Per, da ginnig dezañ e brofou, dreist-oll eur skeudenn aour euz e vent, hag eul lizer skrivet gantañ da houlenñ ouz ar pab relegou santel evid eur manati e oa o sevel. Adrian a roas da gannad Salaun unan euz divreh sant Leon III.

En amzer-ze, eta, an Normaned, eur ouenn dud gouez euz broiou an hanternoz, a glasse ober o diskenn en broiou tostoh d’an heol, hag a zaille war an diou Vreiz ha war Vro-Hall.

War o bagou skañv, e oant pignet gand al Loar beteg Angers. Bretoned ha Gallaoued a ‘n em glevas da gerzed oute, ha dre ijin roue Breiz e oent trehet.

Prest goude ar viktor-ze, Salaun a glaskas rei an dilez euz e garg : pell a oa e kave re bounner e gurunenn a roue ; kabluz ‘oa euz a varo Erispoe, hag e ene a oa krignet gand ar morhed ; pinijennou kaled a ree evid kaoud e bardon ; aluzennou braz a roe d’ar manatiou “evid silvidigez e ene, hini e gerent hag e vugale, hag evid padusted rouantelez Vreiz a-bez“ ; ha koulskoude, en-devoa aon rag barnedigez an Aotrou Doue.

En em dennañ a reas e manati Plelan, en-devoa lakaet sevel ; e vab-kaer, Paskueten, ha Gouroand, mab-kaer Erispoe, a valeas neuze warnezañ, heb ma hallfed lavared, mad a-walh, an digarez a ree deze en em zevel outañ.

Salun a dehas a-raog e enebourien ; a-dreuz-dreuz dre goad Bresilien, beteg ar Merzer, e-tal Landerne. Eno e oe tizet gante, derhent gouel Yann.

Dinerzet gand e gleñved, poaniet o weled e wellañ mignoned o ‘n zevel en e eneb, glaharet gand e behed, c’hoant dezañ da baeañ e hle da justis Doue, en em lakaas e-unan, goude bezañ bet o koves hag o komuniañ, etre daouarn Gouroand ha Paskueten.

Ar re-mañ hen gwerzas d’ar Hallaoued, a doullas dezañ e zaoulagad, a-raog e lazañ war diri aoter-veur iliz ar Merzer, d’ar 25 a Vezeven 874.

Korv Salaun ar merzer a oe sebeliet e-tal hini e bried Gwenbrid, en manati Plelan. E benn a virer c’hoaz en iliz Pithiviers, en eskopti Orléans ; darn all euz e relegoui a zo en iliz ar Merzer, hag en iliz-veur Sant Per, en Gwened.

An Itron-Varia Wir-Zikour

Kentañ devez a viz Gouere

Gwechall e oa en Gwengamp eur vreuriezh anvet *Ar Vreuriezh wenn*, evid stagañ, dre ar garantez, an dud a beb renk, da lavared eo, an dud a iliz, an noblañs hag ar bobl.

Eur banniel o-devoa, ha warni eur fun a deir neudenn, gand ar geriou-mañ dindan : “*Fun tri neud a zo diêz da derri*”.

Ar Vreuriezh wenn he-devoa ivez eur batronez hag a oa ar Werhez, hag eur gouel braz d’an eil devez a viz Gouere. An devez-se, e veze iñduljañsou da honid evid kement hini a bede en iliz ar Vreuriezh, ar pezh a zegase eno e-leiz a dud diwar-dro.

Gand an amzer, e kreskas niver ar belerined, ha bremañ, dre ze, ar pardon, a ‘n em gav d’ar zadorn a-raog ar zul kentañ a viz Gouere, e reer bep bloaz, en noz, eur prosesion hag a weler ennañ ouspenn deg mil pardoner, peb a houlou gante, o vond dre ruiou kêr, en eur ganañ meuleudiou an Itron Varia Wir Zikour.

*

Er bloaz 1857, on Tad Santel ar Pab Pi IX, evid kreski an devosion en-keñver *Patronez ar Vreuriezh wenn*, a gasas diou gurunenn aour da berson Gwengamp : unan evid ar Werhez, eben evid he Mabig, ha d’an 8 a viz Gwengolo, e memez bloavez, an aotrou Le Mée, eskob Sant-Brieg, en ano ar pab, a gurunas an Itron Varia Wir-Zikour.

An devez-se a oe eun devez kaer evid Gwengampiz. War lein an iliz, e ruiou, ouz an tier, ne veze gwelet nemed drapoioù, glazvez ar garlanteziou ; ar belerined, daoust d’ar gwall-amzer, a zerede a bep tu a-vandennadou hag ar parroziou a ziwar-dro a deue, an eil war-lerh eben, gand o hroaziou hag o bannielou, en eur ganañ meuleudiou ar Werhez Vari.

An overenn-bred a oe kanet gand eun eskob, hag an iliz ne oe ket braz a-walh evid an dud.

Goude ar gousperou, e oe greet eur prosesion en kêr, hag an Itron Varia Wir-Zikour, douget gand eiz beleg, a yeas er-mêz euz he iliz.

En he raog eh ee, daou ha daou, ar re a oa en eur vreuriezh bennag, ha leanezed a beb Urz hag a bep bro ; en-dro dezi, ouspenn c’hweh-kant beleg he pemp eskob ; war o lerh, eur bobl a belerined hag a ‘n em zastumas war blasenn vraz ar Vali.

Eno e oe diazezet ar Werhez war eun aoter uhel, hag an eskibien a zavas da lakaad ar gurunenn war he fenn. Kerkent e oe tennet ar hanol ; ar hleier a zonas. An heol, goloet beteg neuze gand ar houmoul, a zispakas e vanneou skeduz, hag an Itron Varia Wir-Zikour, gand he mantell arhant hag he hurunenn aour, a ‘n em ziskouezas d’he bugale, kaer evel eur rouanez.

Goude ze e oe kaset en-dro d’an iliz, en eur ganañ an *Te Deum*. Mêr Gwengamp, a-berz Kêriz, a zegasas eur houlaouenn ar haerra d’ar Werhez kurunet.

*

D’an 8 a viz Gwengolo 1910, eo bet greet e Gwengamp gouel an hanter-kantved bloaz abaoe m’oa bet kurunet an Itron Varia Wir-Zikour, hag anad eo bet eno d’an oll eh a devosion ar Vretoned d’o Mamm vad, war gresk a-dreuz ar hantvedou. Daouzeg eskob, tregont prosesion, seiz-kant beleg, tregont mil den a oa deredet d’ar pardon braz-se. An overenn-bred a oe kanet en-kreiz ar vali, ha goude an Aviel, an aotrou Dubourg, arheskob Roazon, a reas en brezoneg meuleudi an Itron Varia ha hini he servijer Charlez Bleiz, a enored ivez en deiz-se : « Bremañ tri bloaz hag hanter-kant, emezañ, Breiz-Izel a oa deut da bardonañ da Wengamp evid kurunedigez ar Werhez. E-leiz euz ar re a oa deut en deiz-se a zo eet da weled o Mamm d’ar baradoz : mez ar feiz a verve en o halon he-deus degaset hirie o bugale da lidañ ar memez

gouel. Tregont mil kalon, bodet, strollet, stardet evel mellou eur chadenn, setu ar prof hag ar gurunenn a ginniger hirie d'an Itron Varia Wir-Zikour, Notre Dame de *Vrai-Secours*, n'eo ket *Bon-Secours*, evel ma lavar ar galleg.

« En tu-hont d'an Itron Varia Wir-Zikour, deut oh ivez da enori Charlez Bleiz, duk Breiz ha kont Gwengamp. En Blois e oa ganet, mez e galon a zo chomet en on zouez, hag a drid hirie, dre vertu al lidou-mañ greet evid an Itron Varia hag evitañ. Charlez Bleiz en-deus poaniet e-pad e vuhez, hag en-kreiz pep seurt trubuilhou, evid divenn e wir. Mervel a reas dindan ar beh. Stourmom garo eveltañ, oll a-unan, evid divenn on gwiriou a Vretoned hag a gristenien.

Dalhet d'ho fe, Bretoned an Argoad !

Dalhet d'ho fe, Bretoned an Arvor !

Bezit *Bleizi* en-kreiz an emgann, ha mirit dinamm hoh enor, hervez ger koz on tadou : « Kentoh mervel eged en em gaillari ! »

An itron Varia Wir-Zikour a zo enoret ivez en parrouz Plounez, e-leh m'he-deus eur pardon, an eil sul a viz Gouere. N'eus ket en Goelo eur pardon ken brudet nag eur prosesion ken kaer. Milierou a belerined a 'n em gav en Plounez, d'ar zadorn a-raog, 'benn ar gousperou kentañ. D'ar zul, ar Werhez, gwisket evel eur rouanez, a ra tro ar prosesion douget war diskoaz martoloded Plounez.

Pardon Gwir-Zikour en-deus miret c'hoaz en e bleun kened kristen ar pardonioù gwechall.

Notenn gand an oberour : E-pad ar Revolusion, pardon Gwir-Zikour a oe greet, bep bloaz, en Plounez. Er bloaz 1791, m'êr Plounez, e ano Maignou, a zegemenne da v'êr Pempoull dond gand e goñseilli d'ar prosesion, ha d'an ofiserien ha d'ar zoudarded a oa en kêr degas gante o fuzulioù. « Breudeur, 'oe respontet dezañ, arru vefom oll en koulz. »

Sant “Lunaire“

Hirie²⁸ e reer c’hoaz gouel sant Lanneuk, anvet ivez Leonor, Lunaire, Lormel, genidig euz Bro-Geumru, ha a deuas da chom en Breiz-Izel, e-kerz ar VI^{ved} kantved, demdost d’ar mor ha da ster ar Rañs. Goude bezañ prezeget d’ar baganed, e oe anvet eskob en Aleth, eur gêr hag a oa leh ma ‘mañ bremañ Sant-Servan.

Sant Launneuk a roas skoazell da Judual, mab Iona, priñs an Domnone, da dehel a-raog muntre e dad, ar priñs Konomor.

²⁸ Hirie : Kentañ devez a viz Gouere.

Sant Gurthiern

Trede devez a viz Gouere

Manah, VI^{ved} kantved

Gurthiern a oa mab d'eur roue euz Breiz-Veur uhellañ. En eur brezel, daoust ma ne glaske tamm ebed hen ober, e lazas eun niz dezañ, mab d'e hoar, hag a gare kalz.

Neuze, evid en em gastizañ da vezañ bet ken dievez, e lakaas en e benn mond d'ober pinijenn ar rest euz e vuhez.

En em denn a reas, da gentañ, en eun draonienn ouez, a dreuze eur ster yen-skorn. Bemdez ha beb noz en em daole en dour ar ster-ze, hag e chome goude azezet war eur garreg, da lavared e litanious, da hortoz e izili da zehañ.

Eur brezelour euz e vro a 'n em gavas eun devez da gouezañ warnañ hag a glaskas e zegas en-dro da di e dad. Gurthiern a dreuzas neuze Breiz-Veur ezu an eil penn d'egile ; degouezet en Bro-Gerne²⁹, e-tal ar ster Tamer, e chomas eno eur pennad.

O weled eur vag oh ober hent etrezeg Breiz-Izel, e houlenas pignad e-barz, hag en doareze e oe douget beteg enez Groe. Eno e reas e ziskernn.

Koulskoude, Gwenediz a deuas buan da anaoud e zantelez, hag a vrudas anezi e-touez ar Gerneviz, o amezeien.

Gralon 'oa neuze roue en Kemper. Aaboe ma oa bet kelennet gand e vignon sant Gwennole, ne glaske nemed an tu da rei d'anaoud, muia m'hallje, ar relijion gristen en e rouantelez.

Dond a reas a-benn da lakaad Gurthiern da zond da chom etre an Izol hag an Elle, e leh m'emañ bremañ kêr goant Kemperle, anvet an aour aod, er mare-ze. Eno, an den santel a 'n em roas d'an oberou a drugarez ; e bedennou o-devoa ar galloud da bareañ ar hleñvejou. E di a deuas da vezañ minihi oll dud reuzeudig ar vro ; d'an disterrañ ma vezed nehet, e tereded d'en em erbedi ouz ar zant.

Eur bloavez, Gwenediz a oa ar gernez o vond da gouezañ warne, kement a breñved a oa o tagañ an ed ; Gwerok, roue ar vro, pa welas ar pez a hoarveze, a gasas tri gannad, Goudoual, Katuoz ha Kadour, da houlenn skoazell ouz Gurthiern. Hemañ a gemeras truez ouz e genvroiz ; teuler e reas dour benniget war o douarou ; kerkent, ar preñved a varvas hag an eost a oe mad.

Gwerok, evid e drugarekaad euz ar vad en-devoa greet d'e rouantelez, a roas dezañ eur hornad douar, en tu kleiz d'ar Blancoez, en parrouz Kervignag, el leh a anver c'hoaz, en deiz a hirie, Lok-Gourhien.

Eno e varvas an den santel, en bloaveziou kentañ ar VI^{ved} kantved, hag eno e oe sebeliet.

Pa deuas an Normaned d'ober freuz en Breiz-Izel, e oe douget e relegou da enez Groe, e leh ma oent kavet en XI^{ved} kantved.

Sant Gurthiern eo patron parrouz Langolen, en eskopti Kerne. Er plas m'eo bet o chom en Kemperle, eo bet savet, a-houde, abati brudet "ar Groaz Santel".

²⁹ Bro-Gerne Bro-Gerne e Breiz-Veur.

Sant Goulven

Naved devez a viz Gouere

Eskob, Vived kantved

Daou Vreizad, daou bried, Glaoda ha Kologwenn, o tehel a-raog ar Zaozon euz bro goz o zadou, a zouaras eun abardaez war aod Odena, en Leon. Dindan goad e oa neuze ar vro tro-war-dro ; ti ebed war an tevenn, nemed eun tamm lochenn, en Brenguruz. Eun den gouez ha kriz a oa o chom enni, a refuzas lojeiz d'an daou zivroad ; a refuzas deze, zoken, eur banne dour, daoust ma oa ar wreg yaouank o paouez lakaad er bed ar bugel bihan a dlee bezañ diwezatoh sant Goulven.

An deiz war-lerh, koulskoude, e tiskouezas d'an ozah hent ar feunteun, hag e roas dezañ eur pod da gerhad dour. Glaoda a gemeras ar wenojenn a oa lavaret dezañ, mez eet eur pennad er hoad, ar roudou ne oant mui anad hag e chomas da redeg e-pad an deiz, hep kaoud ar pez a glaske.

Pa zizroas diouz an noz, en em daolas d'an daoulin, an daerou en e zaoulagad, e-tal e bried hag e vugel hanter-varo, hag e pedas kaloneg. An Aotro Doue a gemeras truez outañ hag a lakaas da darzañ, en e gichenn, eun eienenn a anver feunteun sant Goulven.

Eun nebeud bloaveziou goude, eun den pinvidig ha disher, e ano Gouzian, a gavas Goulvenig ken karantezuz ma lakaas e vezur, e zevel hag e skolia, evel pa vije bet e grouadur. C'hoantaad a ree, zoken, lezel gantañ e beadra, mez ar bugel, troetoh war madou an neñv eged war madou an douar, a drugarekaas e vadoberour hag a 'n em dennas e-tal ar mor, en-kreiz ar ouezeri, e leh ma savas e beniti.

Eno e tremene e amzer etre ar bedenn, ar binijenn hag al labour ; ober a ree bemdez eur bale en-dro d'e vinihi, gand ti boz e-tal teir groaz en-devoa savet : kroaz Prad ar Wern, kroaz an Traoñ, ha kroaz ar Gouerven. Eun den santel, e ano Maden, a deuas da vevañ gantañ, hag o-daou e stagjont da zigoadañ eun dachenn tro-war-dro d'o hêr ; trevajou ken seder a zavas enni ma teuas Bretoned all da chom en o hichenn hag a reas evelte. Hebdale, adaleg menezioù Penn-ar-Havr beteg ar mor, e leh koad ne oa mui nemed douar-labour euz ar hentañ.

Goulven, ne weler ket en-deve bet greet, koulskoude, kalz a anaoudegez gand hini ebed euz e amezeien, nemed gand ar Joncour, euz a Blouneour.

Eun devez, ar zant a lavaras d'e vignon Maden :

« Kee da gaoud ar Joncour, on mignon, ha lavar dezañ : Setu amañ petra 'lavar dit Goulven : « Evid diskouez da vignonaj, degas din en prof ar pez az-pezo dindan da zorn, pa 'n em gavo ma hannad ganit. »

« Ha n'eus forz petra a vezo roet dit gand ar Joncour, e trugarekai anezañ hag e tizroi heb selled da brof a-raog bezañ dizro d'az peniti. »

Maden a gavas ar Joncour oh arad, ha braz e oe nehamant hemañ pa glevas ar goulenn a reed outañ, rag ne gave netra a-zoare da gas da Houlven. A-greiz-oll, e kemeras teir bozad douar, en ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel, hag e lakaas aneze en bruched Maden en eur lavared dezañ o has d'e vestr.

Maden a zizroas d'ar red, mez hebdale e oe red dezañ mond goustadikoh, rag kaoud a ree e pounnerrae e zamm hag e zae a venne rogañ dindan ar pouez. Ha setu-eñ ober eur zell war ar pez a zouge ha gweled 'oa troet an teir bozad douar en tri damm aour.

Eur skeudenn goant eo honnez, savet gand on tad koz, evid lakaad da vond don en on spered ar vad a reas da Vreiz-Izel meneh ha Bretoned Tramor. O teuler ar hoajou hag ar brouskoajou d'an traoñ, o tistrouezañ hag o trei an douar, o-deus tennet teñzorioù anezañ : dindan soh o alar, douar Breiz a zo bet troet en aour.

War a leverer, Goulven a oe greet dezañ, war e gozni, azezañ war gador eskob Leon ; mez ne gave ket ar garg-se diouz e zoare, e tehas hag eh eas d'en em goach en eul leh dizro euz

eskopti Roazon. Eno e varvas hag eno e oe sebeliet. Brud e zantelez a yeas abred dre Vreiz-Uhel ha Breiz-Izel.

Chapeliou en e enor a zo, pe a zo bet, en Edern, en Kaorel, en Lanvelleg hag en Lokmaria Plouzane. Diou barrouz, Goulhen, en eskopti Leon, ha Gouliern, en eskopti Kerne, o-deus e gemered da batron.

Er bloaz 1503, an aotrou Mahyeuc, eskob Roazon, a roas da iliz Goulhen eun askorn euz breh he sant patron ; an aotrou de Visdelou, eskob Leon, a houlennas hag en-devoe, evid Kastell-Pol, eul lodenn euz relegou sant Goulven : parrouzianiz Taole, Pleiber, Sant Tegonneg, Gwiklan, Gwikourvest, Gwitevede, Sant-Nouga, Plouenan, Plougoulm, Kleder, Trelaouenañ, Plouvorn, Sibiril ha Ploueskad a gemeras perz, d'an 10 a Vezeven 1668, er prosesion braz a oe greet en minihi Sant-Pol evid kas relegou sant Goulven, euz iliz Sant Per, d'an iliz veur.

Sant Goulven, en amzer goz, a roas skoazell d'e genvroiz 'eneb ar ouezidi a ziskenne war an aotchou ; abalamour da ze, en em erbeder outañ evid ma talho da bellaad gwalenn ar brezel diouz on bro gaer Breiz-Izel.

Sant Divi

Arheskob ha patron Bro-Geumri

(Degved devez a viz Gouere)

Ober a reer hirie ivez, en Breiz-Izel, gouel sant Divi, eskob Kêr-Leon, war-lerh sant Dubrik ; sevel a reas manatiou niveruz, a roas e-leiz a zent da Vreiz-Veur ha d'an Iwerzon.

Kas a reas e gador eskob euz a Gêr-Leon da Veneria.

Bezañ e oe, war eun dro, kened ha skwer oll bastored e amzer, hag unan euz kaerrañ sperejou a sklêrijennas Iliz Breiz.

Bretoned Keumri o-deus e gemeret da batron o bro, hag ober a reont e ouel gand lid braz, d'an deiz kentañ a viz Meurz.

Sant Divi a zo patron Logivi, hag en-deus meur a chapel en Bro-Dreger, 'vel en Goudelin hag en Tonkedeg.

Pedet eo evid ar vugale glañv.

Sant Thivisiau

Eskob Dol, VII^{ved} kantved

(Unnegved devez a viz Gouere)

Thivisiau a hanas en Bro-Roazon. Lelian, e dad, ha Majen, e vamm, a oa Bretoned diskennet euz Breiz-Veur hag en em dennet en koad Bresilian ; bevañ reent eno diouz o loened ; a-viskoaz o bugel a oe troetoh war draou ar spered eged war draou an douar.

Eun devez m'oa eet war ar mêz da ziwall ar chatal, êl an Aotrou a lavaras dezañ : « Thivisiau, e-leh chom da vesaad al loened-ze, gwell e vefe dit mond da vanati Balon d'ober da studi. »

Pa zizroas d'ar gêr, ar paotr bihan a lavaras d'e dad ar pez en-devoa klevet, hag e dad a respontas : « Meuleudi da Zoue, ma mab, emezañ, c'hoant an êl eo ivez ma hini-me ! »

Ar hrouadur eta a oe kaset da vanati Balon. Eno en em roas oll raktal d'al labour spered, hag an hini a skrivas da gentañ e vuhez, evid diskouez dim pegen braz 'oa e aket d'ar studi, a lavar ne zistagas penn diouz e hramadeg ken na oa o peurevet gentañ.

Eur vouez en-devoa euz ar re flourrañ hag euz ar re sklêrrañ, hag eun dudi 'oa e gleved o kanañ.

Tiermael, abad hag eskob Dol, pa deue da Valon, ne skuize ket ouz e zelaou : dond a reas, zoken, d'hen kared kement m'hen kasas gentañ da Zol, hag eno, goude bezañ lakaet e gelenn en e vanati, o weled e oa ennañ danvez euz ar hentañ, hen belegas.

Thivisiau a roas neuze an dorn d'e vadoberour da gas e abati hag e eskopti en-dro, ha pa deuas Tiermael da goazañ gand ar gozni, e kemeras e garg.

Thivisiau a oa eun eskob hervez kalon an Aotrou Doue. Eur bloavez, derhent ar Yaou-Bask, e-pad ma oa o prezeg war al leur-gêr, dirag e iliz-veur, e welas Jezuz-Krist en neñv azezet en tu dehou d'an Tad, hag an êlez, en prosesion, o tougen Arh an Testamant. Ar bobl, ouz e gleved o tisklêria dezi petra 'wele, a gouezas d'an daoulin. Ar zant a reas sevel el leh-se eur groaz mein-benerez, hag abalamour d'ar burzud a welas, e veze douget gwechall, en Breiz-Izel, relegou ar zent en prosesion, da zeiziou ar Rogasionou.

Thivisiau a oa eun den sioul hag habask ; koulskoude, pa veze red, e ouie diskouez e skourjez.

Eun aotrou braz deuz ar vro, Riwallon e ano, a reas eun devez ar riñs en manati Maok, eur manati hag a oa peder leo diouz Dol ; stlepel a reas ar veneh euz o zi ; lakaad a reas an tan en iliz ; laerez a reas al listri sakr ha kement a gavas, hag e tizroas d'e vaner.

Thivisiau, pa glevas an nevezernti, a yeas, daouzeg manah gentañ, war e droad, da glask al laer ; en em gaoud a reas gentañ war-dro Lann-Kammfroud.

Riwallon, 'dal ma welas an eskob hag e veneh, a gollas e hardiegez.

« Perag 'ta, emezañ, aotrou 'n eskob, e kemerit ar boan da zond beteg amañ war ho troad ? »

« Abalamour dit-te eo e teuan, eme ar zant, hag abalamour d'az sakrilaj euzuz. Lavar din perag az-peus lakaet an tan en manati Sant-Maok ? Ar pehed az-peus greet a zo ken braz hag an hini az-pije greet o vruzunañ breh sant Samson. »

Riwallon a oa strafuillet ; aon a grogas ennañ na raje an eskob e glemmou en e eneb d'ar roue Judikael, hag e lavaras :

« Aotrou 'n eskob, na gemerit ket a zroug ouzin. Sevel a rin iliz Sant Maok, ha seiz all ganti c'hoaz, en hoh eskopti ; rei a rin deoh, en dizro, seiz gwech muioh eged ar pez am-eus laeret. »

« Ha levr an Aviel, eul levr ken kaer all, a oa war aoter Sant Maok, hag a zo bet kavet el liorz, hanter-zevet ? »

« Seiz all, heñvel outañ, a roin deoh ivez ! », eme Riwallon.

An eskob a bardonas an torfetour, mez kemend a nerz-kalon en-devoa lakaet da zivenn e wir, ma ne oe ket kredet ken mond d'ober gaou ouz madou sant Samson.

Thivisiau, deut da vezañ koz, a roas an dilez euz e garg hag a 'n em dennas en e vanati ; eno e varvas, war-dro hanter ar seived kantved.

E gorr a oe sebeliet en Dol ; diwezatoh, pa deuas an Normaned d'ober o freuz en Breiz, e oe kaset e relegou da Bariz.

Sant Thivisiau eo patron Landivizio, en eskopti Leon, ha patron Plogonneg, en eskopti Kerne.

Sant Judok

(Ermit – VII^{ved} kantved)
(Unnegved devez a viz Gouere)

An deiz-mañ en em gav ivez gouel sant Judok, breur da zant Judikael, roue Breiz

Savet e oe en abati Lan-Maelmon. Yaouank 'oa c'hoaz, pa deuas e vreur, skuiz gand ar garg a roue, d'he hinnig dezañ. E-leh he degemer, Judok a yeas da heul unneg pelerin o vond da Rom. N'eo ket da Rom eh eas, avad, mes da Chartes, da Bariz, hag erfin da di Haymon, duk ar Ponthieu, a viras anezañ en e lez, hag a reas dezañ degemer ar velegiez. Mez ar zant, hag a glaske bevañ pell diouz an trouz, a houlennas en em denn er hoajou. Teir gwech e cheñchas leh evid tehel a-raog ar vrud ; an deirved gwech, eh eas da Rom da gerhad relegou da lakaad en iliz savet demdost d'e beniti nevez, gand an duk Haymon, en enor da zant Martin.

En-kichenn an iliz-se e varvas. E gorv, melezour a hlanded e-pad e vuhez, a 'n em viras fresk-beo, pell amzer goude e varo.

Sant Judok a zo patron ilizou Lohueg hag Henvias³⁰. E relegou emañ al lodenn vraz aneze en eskopti Arras ; koulskoude, iliz Henvias he-deus eun tamm askorn euz e vreh, bet kaset dezi er bloaz 1835.

Sant Judok a zo pedet gand al labourerien evid o loened-korn.

³⁰ Henvias : Iviaz (e-kichenn Pempoull) ?

Sant Tenenan

Kentañ devez warn-ugent a viz Gouere

Eskob VII^{ved} kantved

Tenenan a oe ganet en Breiz-Veur, a dud a renk uhel ; danvez e-leiz en-devoa, spered ha kened.

*Azveuker 'oa gand ar bed oll,
En dañjer, siwaz, d'en em goll,*

Abalamour da ze, e tehas yaouank euz bro guñv e gavell, hag e teuas en Breiz-Izel.

Treuzi 'reas mulgul Brest, ha diskenn a reas ster an Elorn beteg m'en em gavas en kreiz koad Beuzid. Eno e savas e vanati, hag e vevas eur pennad didrouz a-walh.

Mez Leoniz a deuas abred da gaoud penn an hent da vond davetañ hag a zeredas niveruz da houlenn e aliou hag e bedennou.

Ar zant a reas ar muiañ vad a hallas d'o horvou ha d'o eneou ; prezeg a reas deze komzou Doue ; sevel a reas evite diou iliz, hini ar Forest, ha pelloh, er hoad don, hini Blabenneg.

En kreiz etreze o-diou, e savas eur hastell kreñv, evid degemer an dud paour, ma rankjent tehel a-raog al laeron-vor a ziskenne gand an aberiou d'ober ar skrab en douar braz.

Eno e savas eur chapel, gand eul lez da varn ha da gelenn, ha setu perag e oe anvet Lez Kelenn.

Pa varvas eskob Kastell-Pol, pobl ha beleien Leon, oll a-unan, a lakaas Tenenan en penn an eskopti. En e amzer eo e c'hoarvezas ar burzud-mañ, a zo deut ano anezañ beteg ennom, dre lavariou on tud koz.

Eur beleg euz a Blabenneg a oa eun devez o vond da gas an Aotrou Doue da unan klañv ; an hentchou en devoa da dreuzi a oa euz ar re fallañ ; degemeroud a reas gantañ koll an osti zantel en eur wenojenn, ha kaer en-devoe he hlask, daou zevez dioustu, n'hellas ket dond a-benn da gouezañ warnezi.

Braz e oe e anken, hag eh eas da Gastell-Pol da anzav ouz sant Tenenan e zieveded ha da houlenn ar pardon anezi. An eskob mad, glaharet o kleved ano euz an darvoud-se, a 'n em daolas d'an daoulin hag a houlennas ouz Doue rei da anaoud dezañ petra 'oa deut da vezañ an osti zantel. Selaouet e oe e bedenn.

E-pad ma oa en ofis, en e iliz-veur, e oe gwelet o tiskenn er heur eur goulmig wenn, skeduz evel an heol, en he beg eur skourr dero glaz hag, ouz he skourr, eun taol gwenan. Hen lakaad a reas goustadig war eur skabell. Kerkent, ar gwenan a oa outañ a nijas kuit, o lezel a-wel d'an oll eur glozenn goar, alaouret ha flouret a-zoare : en he hreiz e oa an osti wenn ; an eskob santel he hemeras gand doujañs, a lakaas anezi en tabernakl, hag a drugarekas Doue euz ar burzud dispar-ze greet en-keñver e zakramant meulet ra vezo.

Sant Tenenan a varvas war-dro hanter ar VII^{ved} kantved. An Aotrou a wiskas dezañ sae ar hloar hag a gurunas anezañ war dreujou ar baradoz.

Santez Anna

Patronez Vreiz

C'hwehved devez warn-ugent a viz Gouere

Neb ne gav ket mamm ar Werhez,
Euz Breiz-Izel n'eo ket hennez.

Pried Joachim, mamm ar Werhez, mamm-goz Jezuz, eo santez muiañ-karet ar Vretoned.

He ano a deuas en Breiz e-kerz kantvejou kentañ an Iliz, ha Gwenediz a zavas en park ar Bosenneu, en Keranna, eur chapel en he enor.

Er bloaz 700, ar chapel-ze, deut da vezañ koz, a gouezas en he foull ; koulskoude, tud ar vro a anaveze al leh m'oa bet, evid bezañ eul leh santel ; hag al loened he douje kenkoulz hag an dud, rag beb gwech ma tostaed an alar outañ, an ejenned a deue aon deze hag a dehe war o hiz.

Er bloaz 1623, e oa e Keranna eun tieg heb deskadurez, daou-ugent vloaz dezañ, eun den euz ar re wellañ, e ano Yvon Nikolazig. Pep tra, adaleg e vugaleaj, en-devoa e lakaet d'ober anaoudegez gand santez Anna : ano e gêriadenn, koñchou ar re goz, miret gante ar zoñj euz chapel ar Bosenneu an treo³¹ souezuz en-devoa gwelet o tegouezoud er park-se. Deut 'oa da gared kement mamm ar Werhez, ma n'he galve³² mui nemed *e vestrez vad*.

Adaleg miz Gwengolo 1623, beteg ma oe dizoloet skeudenn goz santez Anna, Nikolazig ne reas nemed mond euz an eil burzud d'egile : gwech e kleve trouz eur bobl o vale, gwech e kleve kanerien, eun dudi o zelaou, gwech e wele eur houlaouenn goar, gwech eur wreg skeduz gwisket en gwenn a 'n em ziskoueze dirakañ, douget war eur gougoulenn.

D'ar 25 a viz Gouere 1624, war-dro unneg eur noz, Nikolazig a oa gourvezet en e garrdi war eur feuskenn blouz ; en eun taol, en-kreiz eur sklêrijenn vraz, e wel eun itron gaer : « Yvon Nikolazig, emezi, n'ho-pezet aon ebed ; me eo Anna, mamm Mari. Lavarit d'ho person e oa gwechall, a-raog m'eo bet savet ar gêriadenn-mañ, er park anvet park ar Bosenneu, eur chapel, savet em enor. Nao-hant pevar bloaz warn-ugent ha c'hweh miz a zo m'eo kouezet en he foull ; c'hoant am-eus e vefe savet a-nevez ; c'hwi a gemero preder gand an dra-ze ; Doue a fell dezañ e vefen enoret adarre el lesh-se. »

Nikolazig a yeas da gaoud person Plunered, an aotrou Roduez ; hemañ hen hemeras evid eun den troet e spered, hag ar paour-kêz ozah a deuas d'ar gêr nehet braz.

Santez Anna a deuas adarre da gaoud he servijer, hag evid diskouez d'an oll n'eo ket huñvreou 'oa e lavariou, e reas eur burzud nevez en e geñver.

En noz etre ar 7 hag an 8 a viz Meurz 1625, e-pad ma oa Nikolazig en e wele, eur houlaouenn goar a sklêrijennas e di, ha santez Anna a lavaras dezañ goustadig : « Yvon Nikolazig, galvit hoh amezeien hag heullit ar houlaouenn-mañ. Kaoud a refet ar skeudenn en douar, hag en doare-ze, ar re a ra goap ahanoh a welo ar wirionez. »

Nikolazig a zihunas Yann ar Rouz, e vreur-kaer, ha pevar gwaz all euz Keranna. Ar houlaouenn a gerze en o raog, tri droatad diouz an douar ; kas a reas aneze d'ar Bosenneu. En em gavet eno en-kreiz ar park, e chomas a-zav, e savas e kreh a-benn teir gwech, hag en em guzas en douar.

Yvon a reas neuze d'e vreur-kaer toullañ eno ; hemañ, gand eur bigell, a 'n em lakaas da zével an douar, hag hebdale e kavas ar skeudenn venniget.

Dudi gwalh o halon, e stoujont raktal da bedi an Itron santez Anna. Ar vrud euz an nevezenti-ze a yeas dre ar vro, evel eul luhedenn. An aotrou Rosmadeg, eskob Gwened, a lakaas ober eun enklask. Pardonerien a zeredas ; miraklou a hoarvezas ; hag eun iliz a oa savet, a deuas da vezañ darempredet gand tud a beb bro.

³¹ treo : traou.

³² galve : galleg.anve.

Eskibien, priñsed ha priñsezed a zo bet eno o pedi an Itron santez Anna, ha ne vezer ket evid lavared an treo burzuduz he-deus greet ar vamm vad-se en-keñver he bugale.

Ar roue Loeiz XIII, er bloaz 1630, a roas da iliz Santez Anna eun tamm bennag euz relegou he fatronez. Er bloaz 1792, an dispaherien a werzas an iliz, a dorras hag a zevas skeudenn ar zantez ; he fenn hepken a oe gallet lemel euz an tan ; hen mired a reer en-kichenn ar skeudenn nevez.

Er bloaz 1815, iliz Santez Anna a oe prenet ; ha dre m'oa deut da vezañ kalz re vihan, diouz an dud a zaremprede anezi, 'z eus bet savet unan nevez kalz brasoh ha kalz kaerroh.

Houmañ a zo bet konsakret, d'an 8 a viz Eost 1877, gand ar hardinal Brossais-Saint-Marc, arheskob Roazon.

An Tad Santel ar Pab Pi IX en-deus degaset ivez diou gurunenn aour, unan evid santez Anna, eben evid ar Werhez a zo ganti.

An aotrou Becel, eskob Gwened, en-deus benniget an diou gurunnen-ze, d'an 30 a viz Gwengolo 1968.

*

Santez Anna he-deus meur a chapel en eskopti Sant-Brieg ; unan euz ar re vrudetañ a zo en Prad.Enni e vez overennet aliez 'pad ar bloaz, ha da zeiz ar pardon e tered diniver a belerined.

Notenn gand Embann an Hirwaz : E-barz "Ya", niverenn 481, e heller lenn, bet skrivet gand Job an Irien : « Ar chañs hon eus, e-giz pobl, da gaout ur vamm-gozh anvet Anna gant ar gristenien, hag Hannah gant ar vulzumaned. Gwriziennet eo en hor bro gant kontadennoù souezhus a-walc'h e Santez Anna ar Palud. Gouzout a reer e veze enoret dija e Apt en 12^{vet} kantved d'ar 26 a viz Gouere. Met pardon Santez-Anna ar Palud a zo bet atav da ziwezhañ sulvezh miz Eost. Moarvat e oa-hi eno pell a-raok an 12^{vet} kantved, ha kredabl bras azalek ar 6^{vet} kantved p'en em stalias ar Vretoned er vro ha pa rajont euz an doueez kozh Anna, doueez ar builhentez, mamm-gozh Jezuz ! »

Lennit ar pezh en-doa skrivet Anatole France diwar-benn Santez Anna Alre. (Ober : Anatole France - Sainte Anne d'Auray, war Google.

Sant Samson

Seizved devez war-ugent a viz Gouere

Eskob Dol (480 – 565)

Samson a deuas er bed en Breiz-Veur, er bloaz 480, hag a oe skolaet en Lanildud. Dubrik, eskob Kêr-Leon, hen belegas. War aotre sant Ildud, en em dennas en manati Enez-Pir ; ahann eh eas d'an Iwerzon, da rei an dorn da zant Gweltaz da zavel a-nevez ar relijion er vro-ze.

Eno e reas e-leiz a viraklou, hag e konvertisas e-leiz a eneou. Diwezañ tra a reas a oe tennañ an droug-spered euz korv eun abad ; hemañ a oe ken eüruz goude e zelvrañs ma roas e vanati da Zamson, ha ma heuillas anezañ da Vreiz-Veur.

Dizro d'e vro, e reas d'e oll gerent mond da leaned ha da leanezed : e dad, e vamm, e bemp breur, e eontr, e voereb, e gendirvi.

Kas a reas e eontr Umbrafel da houarn ar manati a oa bet roet dezañ gand an abad iwerzoniad en-devoa pareet diouz an droug-spered.

Goude ze, o vezañ kemeret gantañ Ammon, e dad, an abad iwerzoniad-se hag eur manah all euz a Lanildud, en em dennjont o-fevar d'ober pinijenn en eur hoad don, war lez ar Savern³³.

En em guzet en-devoa eno ken mad ma ne oa den evid gouzoud peleh e oa. E genvroiz, enkrezet oll gantañ, ha gand aon na vije maro, a furchas oll goajou ar vro ken a gouezjont warnañ.

Neuze e oe greet dezañ kemer stur eur manati, savet gand sant Jermen, ha prest goude, Dubrik hen sakras eskob.

Meur a vloaz goude, da Zul-Fask, eur vouez deut euz an neñv a lavaras dezañ treuzi ar mor ha diskenn en Breiz-Vihan.

En em lakaad a reas raktal en hent, ha douarañ 'reas en aber Gwioul, en Breiz-Uel, war-dro ar bloaz 548.

Eno e savas e beniti, a deuio gand an amzer da vezañ manati hag eskopti brudet Dol³⁴. Embann a reas kerkent ar hevridi en-devoa bet.

« Dond a ran er vro-mañ, emezañ, degaset gand Doue, da brezeg Aviel Jezuz-Krist, da dennañ an dud euz ar gaou hag euz ar pehed, ha da zeski d'ar poblou n'eus doue all ebed nemed ma Doue. »

Kroui a reas dre ar vro e-leiz a vanatiou hag a barrouziou, hag en o fenn e lakaas e zeskibien. E-pad ma rede an Domnone, e klevas kelou euz ar hañvou a oa enni. He roue, Iona, a oa o paouez bezañ lazet gand Konomor, muntret e bried Trifina hag e vab Tremeur, ha Judual, mab Iona, a oa dalhet pell diouz Breiz, en lez ar roue Childebert.

Samson, pa glevas an dra-ze, a yeas da Bariz, ha dre hir amzer, e teuas a-benn da dennañ Judual euz a dre daouarn Childebert.

Pa zegouezas mab Iona war douarou an Arvor, an Domnone a-bez a zavas evid en em lakaad dindan e urziou ; brezel a zavas, ha Konomor a oe lazet e Plouneour-Menez, e-tal ar Releg (555).

Samson a chomas eur pennad en-kichenn Judual, hag e zikour a reas da zegas ar peuh en e rouantelez.

Divennour ar bobl hag ar gwir, Samson a varvas war-dro ar bloaz 565.

³³ Savern : Severn (?)

³⁴ Dol : Notenn gand an oberour : Adaleg ar bloaz 848, beteg ar bloaz 1199, eskob Dol a oe arheskob Breiz, ha gwir en-devoa da zougen at pallium.

Chapeliou en-deus en on bro,en Plougasnou, en Plouared, en Pleuveur-Bodou, en Pleudel, en Plouha, en Kemper, ha meur a iliz-parrouz war e ano, evel Keriti ha Lanveleg. Pedet eo evid an droug-izili.

Sant Gwillerm

Tregontved devez a viz Gouere

Eskob Sant-Brieg (1184 – 1234)

Gwillerm, eskob Sant-Brieg, brudet dre ar madoberou a skuillas, dre ar stourmajou a houzañvas evid ar justis, dre ar vertuziou a vagas ha dre ar miraklou a reas, a welas an deiz e Bro-Arvor, en bloaveziou diwezañ an XII^{ved} kantved.

Mab 'oa da Olier Pichon ha da Jann Fortin, o chom e Sant-Alban, diou leo hanter diouz Lamball.

'Dal ma tigoras bleuniou kentañ e yaouankiz, e oa troet da gared an Aotrou Doue ha d'hen diskouez, dreist-oll, dre an evezted a lakae da vired e hlanded.

Kemend a gened a oa war e dal, ma klaskas merhed diniver e douelli hag e zougen gante d'an droug ; Gwillerm o zrehas, a-drugarez Doue, hag a zalhas ken dinamm e ene ma lavared e oa eun eil Jozef.

Joselin, eskob Sant-Brieg, a roas dezañ an Urziou Sakr, hag en e amzer hag en hini Per ha Silvestr, an daou a azezas war gador eskob Sant Brieg, war e lerh, e labouras war-dro an eneou hag e ras deze eur vad dispar.

*

Da varo Silvestr, war-dro ar bloaz 1220, mouez an oll hen lakaas en penn an eskopti. "Pastor euz ar re wellañ, eme Ionasant IV, rei a reas tri seurt maagdurez d'an eneou a oa fiziet ennañ : magadurez e brezegennou, magadurez ar grasou a denne warneze dre e bedennou, ha magadurez ar skwer vad en pep hent."

« N'eo ket souez eta, eme ar pab c'hoaz, e vije neuze lorh en Sant-Briegiz gand eun heveleb eskob, rag Gwillerm a oa, dre ar gelennadurez a roe, evel eun heol skeduz o parañ war Breiz a-bez ha war ar broiou all tro-war-dro ».

Ken troet 'oa gand ar bedenn, ma lavare bemdez psalmou David, ouspenn e ofis.

Aliez, e-leh chom en e wele, e tremene an noz war leur e gambr. Ha goude ma vije aotrounez vraz oh azezañ ouz e daol, kammed na zebre e-unan nemed boued dister ; ha ne eve nemed dour sklêr pe zour livet gand eun diveradenn win.

*

En amzer-ze, Breiz a oa en he fenn eur Gall, e ano Per ar Vrenn, lesanvet "Fall Gloareg", abalamour m'oa deut war e giz, goude bezañ bet en penn an hent da vond da veleg. Eun den 'oa ha n'en em gave êz nemed o klask trabas ouz unan bennag.

Sant Loeiz, roue Frañs er mare-ze, a lavare :

« Biskoaz n'am-eus kavet den o kaoud c'hoant d'ober kemend a haou ouzin³⁵ evel duk Breiz. »

Goude bezañ en em gemeret ouz an noblañs, en em gemeras ouz an Iliz.

Er bloaz 1227, e vodas en Redon oll bennou braz Breiz, hag eur wech displeget diraze pegement a kave abeg en dud a Iliz, en em glevas gand e dudjentil evid krennañ o gwiriou.

O weled an dizurziou o sevel en o eskoptiou war-lerh an emgleo-ze, seiz eskob Breiz a daolas an eskummunugenn war an duk, ha war ar re a oa eet a-du gantañ, en Redon.

Per, gand ar gounnar, a lammas war danvez Gwillerm, eskob Sant-Brieg, Stephan, eskob Landreger, ha Josselin, eskob Roazon, hag o argasas er-mêz euz o eskoptiou.

³⁵ kemend a haou ouzin : notenn gand an oberour : Oncq n'ai trouvé pis qui m'ait voulu faire comme le comte de Bretagne.

Gwillerm ha Josselin a yeas neuze war-eeun da Rom, hag en o ano hag en ano o henvreudeur, e rojont da anaoud da Hregor IX an dristidigez a oa en Breiz. Ar pab, goude bezañ studiet piz pep tra, a daolas an eskummunugenn war duk ha war seiz eskopti Breiz, d'an 30 a viz mae 1228, hag a zivennas ouz ar veleien ober ar pezh a oa en o harg, nemed badezi ar vugale ha koves an dud war o zremenvan.

Per, e-leh anaoud e fazi, a yeas neuze da heskinad ar rouanez Wenn hag he mab sant Loeiz.

Mez ar Vretoned, o weled o ilizou prenet, o beleien hag o eskibien divroet, a droas kein d'o duk hag a reas dezañ plegañ da hourhemennou ar pab (1230).

Ar peuh a deuas.

Euz Poitiers, e leh e oa en em dennet en dizro euz a Rom, Gwillerm a deuas adarre daved e bobl, a reas dezañ ar gwellañ degemer a heller ober d'eun den.

Gonezet mad en-devoa e gurunenn, ha Doue hen galvas davetañ, d'an 29 a viz Gouere 1234.

E gorr a oe sebeliet en iliz-veur nevez a lakae sevel, hag ar miraklou a hoarvezas war e vez a reas d'ar pab Inosant IV lakaad e ano war roll ar zent, d'ar 15 a viz Ebrel 1247.

Sant Gwillerm eo kentañ Breizad eo bet embannet e zantelez gand ar pab.

An aotrou Fallières, eskob Sant-Brieg, en-deus greet sevel eur bez nevez da zant Gwillerm, en e iliz-veur.

C'hwezegved devez a viz Eost

Sant Arzel

Abad(VI^{ved} kantved)

Er bloaveziou kentañ ar VI^{ved} kantved, e teuas eur bagad Bretoned euz Bro-Geumri da chom da Vro-Arvor ; en o fenn e oa Kerangall, kenderv Paol-Aorelian, hag eun abad, e ano Arzel.

Arzel ne reas nemed treuzi Bro-Leon ; a-dal m'en-devoa savet ar barrouz a zoug e ano, eh eas en hent etrezeg Pariz, kaset gand Wizur pe gand sant Paol da gaoud ar roue Childebert. Goude bezañ bet o chom meur a vloaz en e lez, eur wech peurhreet e gevridi gantañ, e c'hoantaas dizrei da Vreiz-Izel.

Mez Childebert, o houzoud³⁶ pebez anaoudegez en-doa, ne oa ket chalet da weled anezañ o vond eus e rouantelez, hag a roas dezañ eun dachenn douar en kichennig Roazon.

Arzel a zavas eno eur manati, hag a reas eur vad dispar da eneo ha da gorvou e amezeien. Mez keit 'oa bet en Pariz, ma oa deut da gaoud kasauz³⁷ trouz ar hêriou, hag e pellaas diouz Roazon evid en em denn en koad Bresilian.

En Loutehel, e leh ma tiskuizas eur pennad, e lakaas, war a lavarar, eun eienenn gaer da darzañ. Eiz leo pelloh, en-kreiz eur vro ouez, e savas e beniti, hag e hallas, eur pennad, tañvañ ar blijadur a gaver o vevañ e-unan gand Doue hepken.

Hebdale e welas ne oa ket ken diboblet ar vro m'he-devoa doare da vezañ ; kaoud a reas, a-gleiz hag a-zehou, en donder ar hoad, tiegeziou Gallaoued, en em dennet eno, eun hanter kant vloaz bennag a oa, o tehel a-raog an Alaniz hag ar Zaozon, a oa bet o tismantr an Arvor ; trist 'oa ar bed gante ; paour 'oant a vadou an douar, ha ken paour all a vadou an ene. Arzel a honezas aneze da Jezuz-Krist. Dond a rejont neuze da chom en-kichenn o abostol, hag oll a-unan, en em daoljont da ziskar eur horniad euz koad Bresilian, d'ober douar-labour. En doareze, Arzel, e-leh eur peniti hepken, a zavas adarre eur barrouz nevez a anver bremañ Plouermel.

Euz e beniti en-kreiz ar hoad, an abad santel a yee beb an amzer, d'ober troiou beteg e vanati en lez Roazon ; n'eo ket hepken e veneh o-deveze mall d'e weled o tond davete, mez oll dud ar vro-ze a veze laouen ouz e gaoud en o zouez, abalamour d'e zantelez war gleñvejou al loened. Arzel a ranne e amzer etre an daou di-ze ; koulskoude, gwellañ m'en em gave en neb leh 'oa en Bresilian, hag eno e kreder e varvas.

Plouarzel, en eskopti Leon, ha Plouermel, en eskopti Gwened, o-deus an enor d'e gaoud da batron.

³⁶ o houzoud : galleg : pa ouie

³⁷ da gaoud kasauz : brezoneg iskiz : da vezañ kasauz ; da gaoud kasoni.

Sant Elouan

(Eizved devez warn-ugent a viz Eost)

En deiz-mañ, e reer gouel sant Elouan, pe Elocau, enoret en parrouz Sant-Gwenn, gwechall “trev“ euz Mur.

Bevañ ‘ree er vro-ze da amzer sant Judikael, roue an Domnone, da lavared eo, er VII^{ved} kantved. Ar priñs-mañ en-devoa savet penitiou da veur a ermit, en koad Bresilien, gand ma lakjent korniadou anezañ dindan douar-labour. Sant Elouan a oa unan euz an ermitted-ze.

Goude e varo, eur chapel a oe savet dezañ war e vez. An Tad Maner a brezegas enni, mil vloaz goude, eur pennadig a-raog ma oe adsavet gand an aotrou Galerne, person Mur.

Pa oe benniget ar mên kentañ anezi, er bloaz 1656, Tad Maner a brezegas ; ar bobl a oa ken niveruz ma ne oa bet biskoaz gwelet kemend-all ouz e zelaou. Ahane eo e teu brud pardon Sant Elouan, a zo bet pell amzer unan euz ar haerrañ pardonioù a Vreiz.

Sant Elouan a zo pedet ouz an derzienn.

Sant Jili **Abad (650 – 720)**

Kentañ devez a viz Gwengolo

Jili a deuas er bed en kêr Athen, war-dro ar bloaz 650. E gerent a oa a lignez uhel, euz a lignez ar rouanez zoken, war a leverer. Lakaad a rejont rei d'eo mab deskadurez war an oll skiantchou. Athen, d'ar mare-ze, a oa c'hoaz ar gêr vrudet ha darempredet evid he skoliou braz. Mez ouspenn skiantchou ar bed a rojont dezañ. Kristenien 'oant euz an dibab, ha falvezoud a reas gante lakaad en kalon o mab ar c'hoant da vezañ evelte. nag a vugale a vije sent, ma kemerje o zud preder da lakaad da ziwann en o halon eur c'hoant evel henez. War skiant ar zent, Jili a reas kammejou brasoh c'hoaz eged war skiantchou ar bed.

E-touez an oll vertuziou a vleunias en e ene, an hini a gemeras ar penn kantañ a oa an izelded a galon. Mez Doue a 'n em blij o uhellaad an dud a fell deze en em izellaad. Eun devez ma'h ee an den yaouank d'an iliz e kavas war e hent, o houlen an aluzenn, eur paour kêz hanter-noaz ha dare da vervel, rag klañv-braz 'oa. Leun a druez, Jili a ziwisk e vantell hag he lak war dioukoaz ar hlañvour ; kerkent, hemañ a 'n em gavas pare. Jili a welas, dre eno, pegement e plij an aluzenn da Zoue ; rag-se, da varo e gerent, e rannas etre ar beorien ar madou braz a oa deut digante.

Miraklou all o vezañ lakaet daoulagad an dud da barañ re warnañ, e soñjas tehel diouz e vro gand aon rag ar meuleudiou. Pignad a reas war eul lestr a yee da Vro-Hall. Eur barr-amzer spontuz a zavas, hag a vennas he has da goll. Jili, dre druez ouz an dremenidi, a bedas Doue hag ar mor a zioullaas.

En Marseill e touaras, mez ne chomas ket eno ; mond a reas pelloh en douar, war-zu kêr Arl. Burzudou a reas adarre eno, ha brud a zavas aneze ; an den yaouank a oe mall gantañ pellaad ha mond d'en em guz en eul leh gouez, en traonienn ar ster Gard. Eno e kavas eur henvroad, e ano Veredem, o chom en eun toull en douar, demdost da Gollias. An toull kuz-se a weler c'hoaz hirie, hag a zo darempredet kalz gand ar bardonerien. Jili ne zaleas ket da anaoud santelez e genvroad. Er skol en em lakaas gantañ, ha gantañ e teskas an doare d'ober ar bedenn a galon ha da chom bepred unanet gand Doue. An eil egile en em gernnerzent hag en em zikourent da zewel uheloh bepred en skeul ar zantelez.

Euz ar hêriadennou tro-war-dro, an dud a deue da houlen kuzul digante, d'en em erbedi d'eo fedennou ha da glask pareañs euz o hleñvejou. Dibaot 'oa deze koll o foan, rag ar burzudou brasañ a hoarveze dre nerz pedennou an daou zant. Jili a lavare bepred n'en-devoa perz ebed er miraklou a zegoueze, hag e oa pedennou e genvreuer eo a denne euz an neñv madelezu an Aotrou Doue.

Eun devez, Veredem ne oa ket war al leh, pa oe degaset eun den klañv d'an ermitaj. Jili a hoantaas e gas d'ar gêr, o lavared ne oa nemed eur peher paour ha n'helle netra evitañ ; ar gouëriaded deut gand ar hlañvour a zisklêrias krenn n'ajent ket kuit nemed p'o-dije bet o mennad. Jili a bedas an Aotrou Doue da evesaad ouz feiz an dud-ze, hag ar hlañvour 'n em gavas pare. Aon a grogas adarre en den santel rag meuleudiou an dud. Daoust d'e garantez evid e genvreuer, e tehas kuit, hag eh eas da chom c'hweh pe seiz leo ahane, en eun draonienn goloet a goajou hag a strouez, anvet traonienn Flavius. En skol Veredem, Jili en-devoa desket bale anezañ e-unan war hent ar baradoz, hep riskl da vezañ touellet gand an droug-spered. Kreski a reas c'hoaz e bedennou hag e binijennou. N'en-devoa ken bevañs nemed lêz eur havrez. Eun devez, mestr ar vro, Flavius Wamba, a oa deut da chaseal d'ar hoard ; ar chas a zibouchas ar havrez a vage ar zant. Homañ, goude kant ha kant tro, skuiz-marzo ha war-nez bezañ tapet, a skoas war-zu lochenn ar zant, evel evid goulenn skoazell. O kleved youh ar chaseourien, tourni ar chas ha klemmou ar havrez, Jili a deuas er-mêz euz e beniti. Raktal e welas an dañjer ma oa e loenig koant, hag en em daolas dirazañ evid e ziwann diouz ar birou.

Siwaz, unan euz ar chaseourien a oa kriz a-walh evid tennañ bepred. Ar bir a dreuzas dorn an ermit. Flavius Wamba a oa ivez war al leh. Ar zantelez moulllet war dremm Jili a skoas eun taol en e galon. Dizrei a reas an deiz war-lerh evid e weled ; lakaad a reas trohañ ar strouez a ziwalle e lochenn. Ouz e weled neuze leun a zouster, en desped d'e boan, en em strinkas d'e dreid evid goulenn pardon. C'hoantaad a reas louzaoui ar gouli, mez ar zant ne lezas ober netra. Gouzoud a ree eo en-kreiz ar boan e teu ar vertu da gemer he brasañ lufr.

Euz buhez sant Jili, n'eus netra anavezetoh eged ar skoazell a roas d'ar havrez. Ar bobl he-deus gwelet eno ar merk euz ar skoazell he-deus roet bepred an Iliz d'an dud dister, 'eneb d'an dud gallouduz, d'an dud dinoaz ouz d'ar re o gwallgas.

Flavius Wamba a dalhas da zond aliez da weled an ermit santel. Ober a reas dezañ donezonou euz ar re gaerrañ. Biskoaz ne falvezas da Jili degemer netra evitañ e-unan. E lezel a reas hepken da zewel eur manati, evid ma vije ennañ kanet meuleudiou an Aotrou Doue, hed-a-hed ar hantvejou. Kalz meneh ne zalejont ket da zond d'en em lakaad dindan urz eun tad ken mad ha ken santel. Dous ha stard, eveziant ha leun a furnez, eur skwer veo 'oa evid e oll veneh.

Goude bezañ bet en Rom o houlen bennoz ar pab evid e vanati, ar pez a oe aotreet dezañ, dre eul lizer skrivet d'ar 26 a viz Ebrel 685 ; goude bezañ bet kalz da houzañv euz a-berz ar Vulzumaned, goude bezañ bet eur rener leun a furnez evid Charlez Martel, e varvas en peuh, war-dro ar bloaz 720.

Sant Jili a zo patron diou barrouz euz eskopti Sant Brieg ha Landreger : Sant-Jili Plijo ha Sant Jili ar Hoad.

En Sant Jili Plijo, ez eus eur pelerinaj darempredet a-bell, dreist-oll deiz e bardon braz, ar zul kentañ a viz Gwengolo, hag ivez deiz e bardon bihan, ar bempved sul goude Pask.

Pedet a-eneb d'an droug-sant, d'an tangwall ha d'ar spont ; e halloud a zo 'n em ziskouezet, meur a wech, d'an dud kêz skoet gand ar hleñved pe gand gwalenn an tan ; ar vugaligou gouestlet dezañ a vez ivez diwallet gantañ diouz pep spont.

Lavarom dezañ, gand parrouzianiz Sant Jili ar Hoad :

Reit ho pennoz d'al labourer.

'Vir sul ha gouel, 'vel ma tleer :

A beb droug diwallet e dud,

E drevad hag e loened mud.

Sant Dogmael pe Toll

Seizved devez a viz Gwengolo

En deiz-mañ e reer gouel sant Dogmael pe Toll, bet eskob en on bro, e-kerz ar V^{ed} kantved ; pedet eo evid rei ar herzed d'ar vugale diwevad.

Enoret eo en Peurid hag en Rospez, en diou chapel gouestlet dezañ.

Pardon braz ar Follgoad

Eizved devez a viz Gwengolo

Ginivelez ar Werhez

Mari,muiañ-karet an Aotrou Doue, merh Joachim hag Anna, a deuas er bed en kêrig Nazareth, “koant evel eul lilienn arhantet gand gliz ar mintin“.

He ginivelez a oe eur helou a levenez evid ar bed oll, rag anezi e tlee genel Heol ar Justis, On Zalver Jezuz-Krist, an hini en-deus lemet diwarnom ar malloz ha skuillet en e leh ar bennoz, an hini a zo bet treh d’ar maro, hag en-deus gonezet dim,en doare-ze, ar vuhez a bado da viken.

Gouel ar Werhez en miz Gwengolo a ro dim digarez da zisplegañ amañ burzudou ar Follgoad, rag an devez-se eo an hini o-deus dibabet Leoniz evid ober, en kalonenn o bro, pardon braz o Mamm hag o Itron.

Notenn gand Embann an Hirwaz : “ar vuhez a bado da viken“ : ha sur eo ? Hag-eñ e talv ar boan ? Ha ne vefe ket eun doare lorh a vefe e pep hini ?

*

War-dro hanter ar pevarzegved kantved, ar Zaozon hag ar Hallaoued a oa krog gand eur brezel a dlee padoud kant vloaz, hag ar Vretoned, rannet en diou gostezenn, hini Bleiz hag hini Montfort, a valee ivez euz an eil emgann d’egile.

Hogen, e-pad an amzer-ze, eur paour-kêz den, galvet³⁸ Salaun, a oa o vevañ war-dro Lezneven. Ganet ‘oa en Kervriand. Deut ‘oa er bed gand eur spered berr.N’en-devoa gallet biskoaz deski nemed an daou her-mañ euz e bedennou : « *Ave Maria* », mez o lavared a ree hep paouez, ha dougen a ree en e galon eur garantez dener evid Mamm Doue.

Da varo e dud hag eñ c’hoaz yaouank-flamm, en em dennas en eur hoad, en-kichenn eur feunteun, en parrouz Elestreg ; eno n’en-devoa ken gwele nemed an douar, na ken ti nemed eur wezenn gamm ha kleuz. Bale ‘ree bepred diarhen ha gwisket e veze a druillou.

Thel a ree diouz plijadureziou ar bed evel ma teh ar wenanenn diouz breinadurez an douar. Beb mintin eh ee da Lezneven, eun hanter leo ahane, hag e kleve an overenn er gêr-ze, ha keit ha ma veze en iliz, ne baouez da lavared “*Ave Maria*“, pe c’hoaz “*O ! ma Itron,Gwerhez Vari !*“.

Goude an overenn, eh ee da houlen an aluzenn dre gêr, ha war dreujou an tier e lavare : « *Ave Maria, Salaun a zebrfe bara !* ha p’en-deveze bet eun draig bennag, e tizroe d’e goad, ar vugaligou o redeg war e lerh, hag e tebre laouen e vara ouz hen soubañ er feunteun, hag o lavared, bep tamm a gemere : “*Ave Maria*“.

Pa veze yen an amzer, en em ziwiske hag e tiskenne beteg e ziou gazell er feunteun, evel eun alarh en eul lenn, ha chom a ree eur pennad eun dour, o kanañ eur rimodell bennag en enor d’ar Werhez. Goude-ze e wiske adarre e zruillou hag, o pignad en eur wezenn, e kroge en eur barr d’en em vrañsellad, hag e kane a-bouez-penn : “*O Mari ! O Mari !*“

An dud ha n’ouzont barn o nesañ nemed a-ziavêz, ne reent nemed Salaun ar Foll anezañ. Evitañ, n’ee ket a zroug ennañ ouz ar re hen glaze, ha n’enebe ket ouz ar re hen gwallgase.

« *Ne don na Bleiz, na Montfort ; flohig on gand ar Werhez Vari. Ave Maria.* »

³⁸ galvet : galled : anvet.

Ar respont-se a roe da houzoud ne oa a-du na gand Charlez Bleiz na gand Yann Montfort, a oa neuze brezel etreze. Lakaad a reas ar zoudarded da hoarzin, ha goude bezañ furchet anezañ, o vezañ ne gavent netra gantañ, e lezjont anezañ da vond en e hent.

Kared a ree ar sioulder, hag er sioulder, Doue hag ar Werhez a gomze outañ ; kared a ree ar binijenn, ha drein ar binijenn a viras glanded e ene, evel ma teu ar harziad spern da vired en o haer al lili a zao en he hreiz.

Evel-se e tremenas Salaun e vuhez, heb ober an disterrañ gaou ouz den.

Erfin, war-dro ar bloaz 1350, e kouezas klañv. A-raog mervel, evel eun durzunell, e lakaas hekleoioù ar hoad da dregerni, evid diskouez e oa goañv e vuhez o tremen hag an hañv braz o tond. Kanañ 'reas kaloneg ar gerioù-mañ : « *O ! O ! O ! O ! O ! O ! Maria* », ha neuze, frealzet gand Mamm Doue ha douget gand an Êlez, e ene glan a bignas da balez an Drinded. E benn, hag a oa liou an astuz warnezañ beteg neuze, a gemeras kened al lili hag ar roz.

E gorv a oe sebeliet didrouz, en harz e wezenn, ha den ne gomze ken anezañ, pa falvezas da Zoue diskouez d'an dud dre eur burzud euz ar re gaerrañ, pegement e plije dezañ ar garantez en-devoa bet ar paour-kêz den-ze evid ar Werhez.

Lakaad a reas da zevel war e vez eul lilienn wenn ; hag ar pez a oa estlammusoh c'hoaz 'oa gweled an daou her "*Ave Maria*" skrivet, evel gand liou aour, war beb delienn anezi.

Ar vrud euz ar mirakl-se a reas buan tro ar vro ; eur mor a dud a zeredas euz Leon, Treger ha Kerne, da weled al lilienn vurzuduz, a viras he hened e-pad c'hweh sizun. Pa ne goñve, e oe toullet en-dro d'he garr hag e oe kavet e oa he gwrizioù en genou hag en kalon Salaun ar Foll.

An aotrou de Rochefort, eskob Kastell-Pol (1349 – 1356), a deuas da weled an nevezenti ; eun iliz, koant evel eul lilienn, a zavas war vez flohig ar Werhez ; an aotrou Alan Kerastred, eskob Kastell-Pol, a gonsakras anezañ er bloaz 1419. Tri bloaz goude, d'an 10 a viz Gouere 1422, an aotrou Yann V, duk Breiz, diwar al leveou hag an deogou en-devoa e Plouneour, en Plouider, en Elestreg hag en Lezneven, a roas peadra a-walh d'an iliz nevez da gaoud pevar beleg da bedi Doue enni bemdez, *evid duked ha pobl Vreiz*.

Notennoù gand an oberour : "*a zavas war vez flohig ar Werhez*" : Setu amañ anoioù ar re a roas ar profou kentañ : Hamon Quiniou (1410) ; Prigent Gouzian (1416) ; Maurice Quillifiry (1418) ; Robert Inizan, Herry Montfort (1419) ; Marharid Audoc'h, Yann Miorcec ha Marharid Forget e bried, an aotrou Rohan (1420), Azeno Moal (1421).

pevar beleg : An aotrou Kergoal, euz a Wiseni, eo kentañ beleg a houarnas ar Follgoad ; unan euz an tri all a roe an dorn dezañ, an aotrou Milbeo, a deuas da vezañ kovesour an duk Yann V, hag a oe kaset gand hemañ da Orléans daved Jeanne d'Arc (1429), *da ginnig dezi gourhemennou ar Vretoned*.

An aotrou Frañsez I hag an aotrou Per II, bugale an aotrou Yann V, ha duked Vreiz evel o zad, an eil war-lerh egile, a deuas d'en em erbedi ouz Itron Varia ar Follgoad.

An aotrou Arzur III, breur an aotrou Yann V, skoazeller Jeanne d'Arc, duk Breiz war-lerh an aotrou Per, a deuas d'en em erbedi ouz Itron Varia ar Follgoad, hag a stagas ouz he iliz peadra a-walh da gaoud dalhmad c'hweh beleg war he zro, e-leh pevar a oa beteg neuze.

An aotrou Frañsez II, niz an aotrou Arzur III ha duk Breiz war e lerh, hag e vreh vrudet, Anna dukez Vreiz ha rouanez Frañs (1458 – 1544), a deuas d'en em erbedi ouz Itron Varia ar Follgoad, hag a roas dezi profou pinvidig.

An aotrou kardinal Alan Koativi, unan euz bugale Leon o-deus greet ar muiañ enor d'o mamm-vro, a deuas aliez d'en em erbedi ouz Itron Varia ar Follgoad ; lakaad a reas sevel, e-tal he iliz, ar halvar a zougas he ano ; war e houlenn, ar pab Sixt IV a roas 100 devez pardon da honid da gement hini a yaje da Follgoad da bedi ar Werhez, d'ar 25 a viz Meurz, da zul kentañ miz Eost, da Hanter-Eost, d'an 8 a viz Gwengolo ha da ouel an Oll Zent ; ha pa varvas en Rom, d'an 22 a viz Gouere 1474, e hlahar 'oa gwelet n'hallje ket e relegou mond da ziskuizañ d'e vro, en gwasked ti e Vamm vad.

Notenn gand an oberour : *da ouel an Oll Zent* : Inosant VIII (1484 – 1492) ; Leon X (151, -1521) ; Jul III (1550 –1555), ha Pi IX (1846 – 1878) o-deus astennet c’hoaz, abaoe, roll en induljañsou a haller gonid o pedi en iliz ar Follgoad.

Pobl Vreiz a gemeras skwer war e aotrounez : Montreleziz, taget gand ar vosenn, er bloaz 1507, ha Ploueskadiz, skoet gand an heveleb kleñved, er bloaz 1627, a deuas d’en em erbedi ouz Itron Varia ar Follgoad.

Siwaz, iliz ar Follgoad a gollas he chalonied, er bloaz 1681 ; adaleg neuze hag e-pad c’hweh-ugent vloaz, ne reas nemed koll he hened hag he lufr, tamm-ha-tamm.

D’ar pevare sul a viz Meurz 1708, e oe serret ; d’ar 14 a viz Gouere 1791, he listri sakr a oe kaset da deuzi ; d’an 10 a viz Eost 1792, he c’hweh kloh a oe torret. Eur vantell gañv a holoas ar vro.

Doue, koulskoude, a deuas da zelled a druez ouz ar Frañs ; ar peuh a deuas. D’an 8 a viz Gwengolo 1808, skeudenn ar Werhez, kuzet e-pad an dispah, a zizroas d’he zi. Pevar-ugent vloaz goude, d’an 8 a viz Gwengolo 1888, an aotrou kardinal Place, arheskob Roazon, c’hweh eskob ha kant-mil den en-dro dezañ, goude prezegenn helavar an aotrou Freppel, a lakaas, en ano Leon XIII, war benn ar Mabig Jezuz ha war hini Itron Varia ar Follgoad, an diou gurunenn aour ha perlez savet evite gand feiz, fiziañs ha karantez ar Vretoned.

Notenn gand an oberour : *a zizroas d’he zi* : D’an 23 a viz Eost 1810, daouzeg kristen mad a ‘n em glevas evid daspreñañ iliz Follgoad, digand Anquetil, an hini en-devoa he bet digand ar Gouarnamant ; setu amañ o anoioù : A. ar Gall, F. ar Gall, H. ar Gov, F. Uguen, M. A. André, G. Loaec, J. Toutous, J. ar Gae, an aotrou G. Kerbrat, G. Abjean.

Boked

Patronez dous ar Follgoad,
On Mamm hag on Itron,
An dour en on daoulagad,
Ni ho ped a galon.
Harpet an Iliz santel.
Avel diroll a ra...
Tenn ha kriz eo ar brezel.
Ar peuh, o ! Maria.

*

Chapel ar Follgoad, e Pañvrid ar Beskont

En Bro-Dreger, demdost da Wengamp, war douar Pañvrid ar Beskont, tostig d’eur hoad braz, a-uz d’eun draonienn euz ar vravañ, zo³⁹ ivez eur chapel, he ano “Chapel ar Follgoad”.

N’oufe den, moarvad, lavared dre just da be amzer e oe savet ; pell zo, a dra zur, diouz gweled pegen koz e tiskouez bezañ ar skeudenn venniget a zo en tu dehou d’an aoter.

Adsavet a-nevez ha kresket er bloaz 1846, chapel ar Follgoad-Pañvrid a zo pell war-lerh hini Bro-Leon. Daoust pegen dister eo, brudet eo koulskoude, er vro tro-dro, kreiz ‘tre Gwengamp ha Pempoull, Bear ha Plouha, rag enni ivez e teurvez an Itron Varia rei stank, d’he felerined, testeniou burzuduz euz he galloud hag he madelez.

Dre vilierou e teredont d’he fedi, an eil sul a viz Gouere hag ar bevare sul a viz Gwengolo. En deizioù-ze, ar chapel a vez kalz re vihan, rag pardonioù ar Follgoad a zo bepred, hervez ar hiz kristen gwechall, gwir bardonioù a zevosion. An ofisou a vez kanet, en disheol ar gwez faou, e-tal eun aoter vein-benez savet, nevez zo, en lein ar roz.

³⁹ zo :tregerieg : ez eus.

Eun dudi eo kleved a-ziwar-dro, e-pad ar prosesion, moueziou ar gristenien o kanañ a-greiz kalon :

*War an douar koulz hag en neñv,
N'eus ket kaerroh, war-lerh Doue,
N'esu ket gwelloc'h 'vid on Mamm vad,
Itron Varia ar Follgoad.*

En tu-hont da ofisou ar pardon, overennou a vez lavaret er Follgoad, eur wech ar zizun, well-waz, hag aliesoh en kerz miz Mae hag an hañv.

Itron Varia ar Follgoad emañ ar hiz vad gand ar mammou kristen gouestlañ dezi o bugale vihan ; degaset e veint da zeski ober o hammejou kentañ war leurenn he chapel.

Sant Levias

Daouzegved devez a viz Gwengolo

Hirie en em gav gouel sant Levias, abad en Arvorig ? Bezañ 'n-eus eru chapel e Tredarzeg, e leh m'eo pedet evdi ar vugale dinerz ha klañvidig.

Sant Korneli

C'hwezegved devez a viz Gwengolo

Sant Korneli a ouarnas Iliz Rom daou viz warn-ugent, hag a varvas en harlu, en Cività Vecchia (253), pemp ploaz, deiz evid deiz, a-raog sant Siprian.

Enoret eo, dreist-oll, en Karnag, en Bro-Wened.

Sant Sezni

Naontegved devez a viz Gwengolo

Eskob en Iwerzon, V^{ed} kantved ; bezañ eo patron Gwiseni (Bro-Leon)., e leh m'emañ e vez, ha Trezeni (Bro-Dreger). En Trezeni e vez greet ebradon an trede sul a viz Gwebgolo.

Sant Vaze

Kentañ devez warn-ugent a viz Gwengolo

Maze, genidig euz ar Galile, a oa eur publikan, da lavared eo, e oa unan euz ar baotred karget da zastum ar gwirioù d'ar Romaned e-touez ar Judevien. Eun den 'oa eta, hag abalamour d'e vicher, e oa gwelet fall gand e genvroiz.

Eun devez, Jezuz, o tremen hed-a-hed mor Jenezareth, a gavas anezañ azezet en e vureo hag a lavaras dezañ : « Deut d'am heul ». Maze a zavas hag a zentas war an taol ouz gourhemenn an Aotrou. Prest goude e reas eul lein vraz en e di. Jezuz hag e ziskibien a deuas, ha kalz publikaned ha kalz peherien a azezas ouz taol gante.

An Doktored hag ar Pharizianed, o weled e tebre an Aotrou gand ar buplikaned ha gand ar beherien, a hrozmoles hag a lavare d'en eskibien :

« Perag e tebr hag eh ev ho mestr gand ar buplikaned, ha gand ar beherien ? »

O vezañ klevet an dra-ze, Jezuz a lavaras deze :

« N'eo ket ar re yah eo o-deus ezomm euz ar medisin, mez ar re glañv ; n'on ket deut da hervel an dud just d'ar binijenn, mez ar beherien. »

Diwar neuze, Maze ne dehas ken diwar-dro On Zalver, ha ne gollas ket unan euz e gomzou. Nao bloaz hepken goude m'oa pignet en neñv, e lakaas dre skrid e vuhez hag e gomzou, ha rei a reas d'e levr an ano a *Gelou mad* (Aviel), abalamour ma roe da anaoud d'an dud e oa deut Mab Doue war an douar da zigeri, gand koad e groaz, dorjous ar baradoz, prenet gand gwezenn ar pehed.

Pa gemeras an Ebestel pep hini e gorn euz ar bed, evid prezeg ennañ ar feiz, sant Vaze a yeas d'an Ethiopi, hag eno e skuillas e wad evid Jezuz-Krist. E gorr a oe sebeliet en Kaireh, kêrbenn an Ejipt, e leh ma chomas eiz-kant vloaz bennag. En naved kantved, pa gouezas a vro dindan galloud an dud divadez, sant Vaze a hoantaas gweled e relegou o vond en eur vro gristen.

En em ziskouez a reas da vahadourien vreizad a oa eet da Gaireh, hag a lavaras deze en brezoneg :

« Euz a beleh oh-c'hwi, ma breudeur, hag evid petra oh deut amañ ? »

Hag i a lavare :

« Ni a zo Bretoned hag a red ar bed oh ober marhajou. »

An abostol a lavaras deze neuze piou 'oa, hag o vezañ roet da anaoud deze peleh e oa e gorr, e pedas aneze d'e gas gante d'o bro.

Ar Vretoned a reas evel m'oa bet kemennet deze ; kavoud a rejont ar bez, tennañ a rejont gand doujañs ar relegou anezañ da gas gante d'o lestr, ha raktal e stignjont al lien da zond etrezeg ar gêr.

Buan e rejont an hent, rag an amzer a oa euz ar haerrañ. P'en em gavjont en Bro-Leon, e kasjont kelou d'o henvroiz ; Salaun, a oa en amzer-ze roue Breiz, a deuas war an aod gand aotrounez vrasañ e rouantelez, da ziarbenn ar relegou santel. Klask a rejod tostaas al lestr ouz ar hae ; mez kaer a oa sachañ warnañ, ne flache tamm. Neuze Riwalen, euz Bro-Gerne, galloudusañ aotrou a oa en Breiz, a lavaras d'ar roue :

« Aotrou, emezañ, anaoud a ret ar hiz fall a zo er vro-mañ. Pa n'hall ket eun tiegez paeañ ar gwirioù a dle d'ar roue, e kemerer ennañ daou pe dri vugel hag e werzer aneze evel sklavourien d'an diavêzidi a deu d'ar porz-mañ, hag e lakaer an arhant a doucher evite da baeañ ar gwir. Ar hiz gouez-se hag he-deus lakaet rei d'al leh-mañ an ano a Borz-Keinvan, a zisplij, heb mar ebed, da zant Vaze. Torret anezi eta, aotrou roue, ha gouestlet dezañ diwar vremañ, ar vugale reuzeudig-se a veze diframmet digand o zud ha gwerzet da vond da bell-bro. 'Dal m'ho-pezo greet an dra-ze, an abostol santel a vezo laouen oh ober e ziskenn en on touez.

Salaun a douas war relegou ar zant ober ar pezh a houlenne outañ an aotrou Riwalen ; kerkent, skañv evel eul lapous, al lestr a yeas da stokañ ouz ar haer. Korv an abostol a oe douget gand lid braz d'an douar, ha savet e oe, evid rei degemer dezañ, eun iliz kaer, a oa anvet *Lok-Maze Penn-ar-Bed*.

Relegou sant Vaze ne chomjont ket kant vloaz en Breiz-Izel ; sammet e oent gand al laeron-vor, hag er bloaz 954 e klever ano aneze en Salern, en traoñ an Itali. Evid rei repu deze, e oe savet eun iliz nevez a oe konsakret gand ar pab braz Gregor VII, er bloaz 1085.

eSant Suliao, pe Suliak

Abad (VIved kantved)

Suliao⁴⁰ a oa mab d'eur roeu ezu Bro-Geumri, e ano Bromail. Kuitaad a reas ar gêr, en despet d'e dad ha d'e vreudeur, evdi mond d'ar gouent da heul eun abad santel anvet Gwimarh. Pa varvas Gwimarh, e oe lakaet da abad en e blas ; med re e oe dezañ dilezel e abati hag e vro evid tehel a-raog karantez direiz ar briñsez Hajarme, e hoar-gaer, hag e teuas da chom d'an Arvorig : en eur hoad tost d'ar Rañs, e savas e beniti ; 'n em lakaad a reas da brezeg d'ar baganed a oa er vro-ze.

Sant Samson, eskob Dol, a deuas d'e weled, hag a dremenas eun nebeud deveziou gantañ.

Suliao a varvas en e beniti an 8 a viz Du. En iliz parrouz Sant-Suliak, e-leh ma vevas, eo miret e vez. Bezañ eo ivez patron Tresigné, eskopti Sant-Brieg, ha patron Sizun, eskopti Kemper.

⁴⁰ Suliao : bet skrivet "Suliau" er skrid orin.

Trede devez a viz Here

Sant Melar Merzer (531 – 546)

Miliao⁴¹, mab Budig, roue Bro-Gerne, a zimezas da Aurelia, merh Winnog, hag en-devoe eur mab anvet Melar.

Kelennet gand sant Gwennole ha gand sant Korantin, Miliao a ouarnas mad ar vro hag a oa karet gand ar re a oa dindannañ. Mez eun devez, den ne oar mad a-walh perag, e vreur Rivold a gemeras kement a gasoni outañ ma skoas gantañ taol ar maro ha ma hourhemennas trohañ dorn dehou ha troad kleiz e vab Melar, eur bugel seiz vloaz, evid ma n'hallje biken na dougen kleze, na pignad war eur marh, ne bezañ roue pa deuje en oad.

Pennou braz Bro-Gerne, pa glevjont kemend-all, a ziframmas ar bugel-roue euz a-dre daouarn e eontr hag a roas anezañ da eskob Kemper da zevel. Hemañ, goude bezañ greet e gelenn ervad war dreo ar bed-mañ ha war dreo ar bed all, e-pad seiz vloaz, a fizias anezañ en eun den anvet Keriellan a dlee e beur-skolia. Neuze e savas ar vrud e halle ar priñs yaouank pignad war loen ha derhel kleze koulz ha nikun, ha ne oa netra bet a vired outañ da zougen kurunenn e dad Ar helou-ze a strafuillas Rivold, en-devoa lakaet en e benn bezañ roue war-lerh e vreur ; kemenn a reas d'ar red da Geriultan dond d'e gaoud, ha goude bezañ roet dezañ da zebri ha da evañ e walh, e komzas outañ evel-henn :

« Mar karit lazañ Melar, emezañ, me ho kreio barner braz en Bro-Gerne, hag a roio deoh kement tra ho-pezo c'hoant da gaoud. »

Keriellan, daoust dezañ da gared Melar, a lavaras, touellet gand komzou Rivold :

« Goude an taol-ze, me 'bigno war uhellañ menez a zo er vro-mañ, hag an douarou a welin ahane tro-war-dro a vezo din. »

« Ya, m'hen tou, eme Rivold, dit e vefont. »

Koulskoude, gouarner Melar, a-raog rei e her evid mad, a zisroas d'ar gêr da houlenn ali e wreg. Homañ ne gavas netra da lavared war ar marhad iven e oa he gwaz o klask ober ; « Daoust, emezi dezañ, ha ne dle ket ar gerent kemer preder, dreist pep tra, gand amzer da zond o bugale ! Hag a-hend-all, n'eo ket brao chom hep senti ouz ar briñsed. It eta en-dro da gavoud Rivold, ha grit pep tra evid ar gwellañ. »

Keriultan a zisroas da di Rivold hag a gasas gantañ e vab Justan da dest war e varhad euzuz. Chom a rejont eiz deiz bennag d'en em gleved war ar gwellañ stumm d'ober o zaol. E-pad an amzer-ze, ar gwel euz ar paotrig yaouank, karantezuz ma oa Melar, a reas d'ar morhed kregi en kalon e vamm vagerez, kement ma c'hoantaas saovetad e vuhez. Tehel a reas eta gantañ a-dreuz ar meneziou, beteg kastell Beuzid, en-kichenn Lanneur. Eno e oa o chom ar roue Konomor hag e bried, c'hoar ar roue Miliao. Ober a rejont d'o niz degemer euz re wellañ.

Keriultan, p'en em gavas er gêr, a chomas sebezet o weled e di goullo, ha Rivold, pa glevas petra 'oa c'hoarvezet, 'oe darbet dezañ koll e benn. Gervel a reas adarre e zen ; hemañ, touellet gantañ muioh-mui, ha kounnaret o weled e huñvreou aour o vond e maged, a douas ober e daol, daoust da bep tra. Ha setu eñ ha Justan war roudou ar priñs yaouank. Gand ober o zud vrao, e halljont kaoud degemer e kastell Beuzid. Melar, p'o gwelas o 'n em gaoud, dre n'en-devoa anaoudegez ebed euz o fallagriez, a lammas da bokd deze, hag a houlennas bezañ lezet da gousked er memez kambr gante, en noz war-lerh. E houarnerez a viras outañ e-pad daou zevez dioustu, mez en trede devez, o kredi e oa deut keun d'he zud, e selaouas e bedenn ; o kimiadi dioutañ e lavare : « Kee, ma mbig ker, ha Doue ra viro ahanout ! »

⁴¹ Milao : Bet skrivet "Miliau" er skrid orin.

Notenn gand an oberour : Patron Gwimiliau, en eskopti Leon, Ploumiliau, en eskopti Treger, ha Plumeliau, en eskopti Gwened. Sant Miliau a zo enoret ivez en Plounevez-Forze.

Melar a hourvezas, ken dineh ha tra ; etre Kerialtan hag e vab, ha goude bezañ o briataet gand teneridigez, en em roas da gousked. An daou vleiz, unan a bep tu dezañ, ne gouskent ket. Pa weljont ne oa mui den war bale er hastell, e savjont didrouz, hag en keid ma talhe Justan bleo hir melen e vreur-mager, an tad a gemeras e vouhal hag a darhaoas eun taol krenn war goug Melar : penn an oan a strinkas diouz e gorv beuzet en e wad. Hervez ar marhad, Kerialtan a ranke kas ar penn da Rivold. Justan, hag a oa gwevn e izili, a 'n em gargas da vond gantañ er-mêz eur ar hastell ; mez en eur ziksenn en douflez, e reas eul lamm treuz hag e torras e houg ; an deiz war-lerh, pa lakaas Kerialtan e dreid war bont-gwintr ar hastell, e kavas e gorv maro en-kichenn ar zah a oa ennañ penn Melar. Ne chomas ket da zelled diou wech endro dezañ ; kemer a reas samm e vab hag e kerzas gantañ d'ar red da di Rivold : « Mad eo, a lavaras hemañ, gand eur c'hoarz ivern, pa hallas dougen war bal e zorn penn an hini a oa en e holo war an douar, mad eo ! Pignal a ri bremañ war ar menez a gari, ha kement a weli ahane a vezo dit ! »

Kerialtan a bignas war lein eur menez ; digeri a reas e zaoulagad ; klask a reas gweled ; mez ne welas ket eur berad : dall-put 'oa deut da vezañ ; horjellañ 'reas war e dreid, ha kouezañ d'an douar maro-mik. Rivold, strafuillet oll o weled tremenvan e vignon, a grogas ivez an derzienn ennañ, hag a varvas evel eun den daonet, eun nebeud deziou goude. An êlig Melar a zo enoret en Breiz-Izel a-bez, ha dreist-oll e parrouziou a zoug e ano, hag en kêr Lanneur, e-leh ma oe sebeliet. Mired a reer c'hoaz e vez, kosañ tamm labour greet gand morzoliou kristen a oufed da gaoud en on bro.

Notenn gand an oberour : e parrouziou a zoug e ano : Loc-Melar Sizun ha Loc-Melar Gwineventer en eskopti Leon ; Melar en eskopti Kerne.

Pempved devez a viz Here

Sant Mauris

**Abad Itron-Varia Garnoed
(1115 – 1191)**

Mauris a deuas er bed e Kroaz-Hañveg, en eskopti Gwened, war-dro ar bloaz 1115. A-vihanig, e teuas gand e dud da chom en parrouz Loudieg ; troet 'oa gand ar studi, ha yaouank 'oa c'hoaz pa oe kavet gouizieg a-walh evid ober skol d'ar re all. Da hweh vloaz warn-ugent, en em dennas en manati Itron Varia Langoned, savet daou pe dri bloaz 'oa en eskopti Kerne, gand an duk Konan III ha gand sant Bernard. Eno ne zaleas ket da vezañ skwer an oll vreudeur, ha pevar pe bemp bloaz hepken goude m'oa deut en o zouez, e tibabjont anezañ da vezañ o zad abad. Chom a reas tregont vloaz er garg-se. E-pad an amzer-ze, n'eo ket trubuill nag anken a vankas dezañ, koulz a-berz e veneh evel a-berz e amezeien.

An duk Konan III a gare kalz meneh sant Bernard, o heuill war ze skwer e vamm-goz, an dukez Ermengard ; kinnig a reas da abad Langoned douarou tost d'ar gêr a Gemperle, eskopti Kemper. Er bloaz 1177, Mauris, gand daouzeg manah euz Langoned, a deuas di da zevel eur manati nevez ; dre o labour e teujont a-benn da dennañ o bevañs euz an douarou fall a oa bet roet deze, ha dre o ijin e halljont en em zizober euz ar bleidi hag euz ar razed a rivine ar vro.

Mauris a varvas deiz gouel Mikêl, 1191, en e hwezeg vloaz ha tri-ugent. Pempzeg vloaz 'zo e oa en Karnoed : pemp bloaz ha tregont 'oa bet e Langoned, hag a-raog, en-devoa bevet c'hweh vloaz warn-ugent 'barz ar bed. E gorv a oe sebeliet en iliz e abati, hag e-leiz a viraklou a hoarvezas war e vez.

Er bloaz 1880, darn euz e relegou a zo bet degaset, gand lid braz, euz a Garnoed da Langoned. Ar prosesion a ziblasas euz a Garnoed d'ar zadorn 7 a viz Eost, ha goude bezañ tremenet an noz er Faoued, en em gavas en Langoned, a-benn an overenn-bred, a oe kanet dirag tri eskob hag eun niver braz a gristenien, deredet euz pevar horn Breiz-Izel da ganañ meuleudiou sant Mauris.

Kentel

..... On tadou, eme on henvroad brudet Chateaubriand, a oa tud ken gouez, ma rankas an Iliz deski deze pep tra, beteg, zoken, an doare da bourchas o magadurez.

Seizved devez a viz Here

An den eüruz Charlez Bleiz

Duk Breiz (1320 – 1364)

Charlez Bleiz n'eo ket eun diavêziad evidom, rag en on bro en-deus tremenet an darn vrasañ euz e amzer ; enni eo en-deus greet brezel ; enni eo marvet, hag enni emañ e vez. On henvroad eo eta, ha dre ze, unan euz on gwellañ divennourien dirag Doue.

Mab 'oa da C'hien Chatillon ha da Varharid Valois, ha genel a reas en Blois, er bloaz 1320. Adaleg e vloaveziou kentañ e oa stumm eur zant warnañ. E zudi 'oa bezañ en iliz, ha kerteri en-dije da verraad e bedennou ; e blijadur 'oa degemer ar beorien ha rei deze an aluzenn. Da zeiteg vloaz, Philip VI, roue Frañs hag e eontr diouz tu e vamm, a roas dezañ dimezi d'eur briñsez euz e oad, Janed Breiz, merh Gien Penteür, breur Yann III, duk Breiz.

Bezañ e oe eur skwer euz an oll vertuziou a hall diwan en kalon eur pried kristen. Pevar bloaz 'zo 'oa dimezet pa varvas Yann III, heb lezel eur bugel da zougen e gurunenn war e lerh. An daou gar tostañ dezañ 'oa Yann Montfort, *e hanter-vreur*, pried Janned Flañdr ha Janned Breiz, *e nizez*, pried Charlez Bleiz.

Gwiriou Charlez Bleiz ha re Yann Montfort, hervez barnerien an amzer-ze, a oa keit-ha-keit ; gand aon d'ober gaou ouz hini ebed, Yann III ne fellas ket dezañ anaoud re ar hentañ kentoh eged re an eil ; pa vije komzet a ze dezañ war e dremenven, e lavare : « En an' Doue, lezit ahanon en peuh ; n'houllan ket sammañ ma ene. »

Goude e varo, ar Vretoned a 'n em rannas en diou gostezenn : hini Bleiz, harpet gand Bretoned Breiz-Uhel ha gand ar Hallaoued, ha hini Montfort, harpet gand Bretoned Breiz-Izel ha gand ar Zaozon. Ar brezel a zirollas hag ar gwad a ruilla en pevar horn ar vro.

Yann Montfort a varvas en Henbont, d'ar 26 a viz Gwengolo 1345 ; mez ar peuh ne deuas ket en Breiz evid kelo-ze, rag eur bugel c'hweh vloaz, Yann Montfort eveltañ, a chome war e lerh, hag ar brezel, goude bezañ padet pevar bloaz etre an eontr hag an niz, a badas naonteg vloaz etre an daou genderv.

Charlez Bleiz, ha en gare nemed ar peuh, a dremenas e vuhez en-kreiz trouz ar brezelioù ; mez daoust da ze ; ne dahas ket eur gammed diwar hent ar zantelez. Dougen a ree dindan e zillad eur gouriz reun stardet en-dro d'e gorv gand kerden leun a skoulmou. Kousked a ree war an douar noaz pe war ar hoard ; ouspenn d'an deziou merket gand an Iliz, e yune daou zevez er zun ha derhent oll gouelioù ar Werhez ; kared a ree lakaad e gorv en pinijenn, evel ma kar ar re all lakaad o re en o êz.

Kinnig a reas e zukaj⁴², hag en em rei a reas e-unan, korv hag ene, d'an hini a zo roue ar rouanez hag aotrou an aotrounez. Bemdez e lavare e vrevier gand unan euz ar veleien a veze bepred ouz e heul ; pedi a ree evid Breiz, evid ar zoudarded maro o tivenn e wiriou hag evid e enebourien ; bemdez e kleve diou overenn, ha gwell 'oa gantañ koll eur hastell pe eur gêr eged koll eun overenn, rag eur gêr, emezañ, a honezer anezi adarre gand sikour Doue, e-leh eun overenn, eur wech lavaret, n'he haver ken ; beb noz eh ee da goves a-raog mond da gousked, ha lavared a ree ne dlee ket eur hristen mond en e wele en stad a behed. Tostaad a ree aliez, an daerou en e zaoulagad, ouz taol ar Zakramant meulet ra vezo.

Troet 'oa d'ober vad d'an ilizou, da weled ar glañvourien, da wiskañ ar beorien, da zivenn an intañvezed, da zevel an emzivadad, da zispartiañ ar gwir diouz ar gaou. Gand aon da vond 'eneb d'al lealded, e tastume en-dro dezañ an dud ar gouiziekañ war gizioù ha lezennoù ar vro. Kared a ree e bobl, ha poaniet 'oa o weled ar reuz a zache ar brezel warnezi, mez aliou e bried a vire outañ da blegañ d'e genderv.

⁴² e zukaj : e zukelez.

Kaloneg 'oa en emgann ; en deiz ma oe prizoniet gand ar Zaozon, er Roh, d'an 20 a Vezeven 1347, daoust d'ar seiteg gouli en-devoa bet, e stourmas evel eul leon, e-pad diou eurvez dioustu, harpet ouz eur voger goz, war dosenn ar Mêzou ; ha pa gouezas hanter-varo, ne fellas ket dezañ rei e gleze d'eur Zaoz, mez d'eur Breizad euz kostezenn Montfort.

Ar hollou a goueze warnezañ n'hen lakaent d'en em glemm euz an Aotrou Doue. Lavared a ree aliez : « Ra vezo benniget Doue en pep tra : *Benedictus Deus in omnibus.* »

Pa deuas d'ar gêr euz a Vro-Zaoz, goude bezañ bet dalhet eno seiz vloavez, eh eas war e droad, en-kreiz ar goañv, dre an erh hag ar skorn, euz ar Roh da Landreger, da bardonañ da vez sant Erwan. An dud ouz hen gweled o tremen, a lede pallennou war an hent dre drez outañ, mez eñ a droe diwarne evid en em gastizañ muioh-mui.

Da Ouel Mikêl 1364, goude bezañ bet diou wech o koves, klevet diou overenn ha bet o komunian, eh eas da stourm ouz e enebourien en lanneier Alre ; eno, eur Zaoz a skoas gantañ taol ar maro ; kouezañ a reas war e benn d'an douar : « A ! Aotrou Doue ! », emezañ, ha kerkent e tremenas. Bertrand Gwesklen, pa welas petra 'oa c'hoarvezet, a lavaras : « Allaz, maro eo kalonekañ den a oa er bed ! ».

'Dal ma paouezas ar stourmad, Yann Montfort a reas klask korv Charlez Bleiz e-touez ar re varo. Pa oe kavet, eh eas d'hen gweled hag en em lakaas da ouelañ : « Doue a oar, emezañ, aotrou Charlez, nag a geun am-eus d'ho kweled evel-se, pa halljem bezañ en em welet en eun doare all. »

Ober a reas sevel ar horv ha dougen anezañ da Wengamp 'leh ma oe sebeliet en chapel menh sant Frañsez. An dud a yeas niveruz da bardonañ d'e vez, ha miraklou kaer a vrudas e zantelez.

D'ar 14 a viz Kerdu 1904, Pi X a roas aotre d'hen enori evel den eüruz, ha d'an 8 a viz Gwengolo 1910, 12 eskob, 30 prosesion, 700 beleg ha 30.000 den a zeredas da Wengamp, evid ar hentañ pardon braz greet en Breiz en enor d'an duk santel ; an overenn-bred a oe kanet en-kreiz ar Vali ; an aotrou Dubourg, arheskob Roazon, a reas en brezoneg meuleudi Charlez Bleiz.

*

* *

Hirie e reer c'hoaz gouel sant Alor, a oe, war a greder, trede eskob Kemper, en kerz ar VI^{ved} kantved.

Dezañ en-deus eur chapel en Plijidi, e-leh ma vez greet e bardon ar bevare sul goude Pask.

Kentel

Bretoned om : gwir on-deus da vezañ mistri en on bro, ha d'ober Bretoned euz on bugale ; gwir on-deus da gaoud skoliou a vezo ano enne euz ar yez kaer on-deus desket war varlenn on mamm, hag euz ar zent koz hag euz an duked vraz a grouas ken kaer hag a houarnas ken mad on havell.

Seizved devez a viz Here

Sant Konogan

En deiz-mañ e reer ivez gouel sant Konogan, diskibl sant Gwenole, hag eskob Kemper war-lerh sant Korantin ; eur barrouz en on bro, Treogan, he-deus e gemeret da batron : chapeliou en-deus en Karnod, en Groñvel, hag en Lokarn en Penharz. Ar zant-mañ a zo pedet ouz an derzienn.

Pempved devez warn-ugent a viz Here

Sant Gouenou

Eskob (VI^{ved} kantved)

Tudoghil eo ar hentañ Breizad a zo bet ano anezañ e Bro-Leon. En em gaoud a reas er vro er bloaveziou kentañ ar VI^{ved} kantved, ha sevel a reas e di-bedi en kastell Gollob, en-kreiz tre an Aber Ac'h hag an Aber Benniget.

Bezañ en-devoa tri grouadur : daou baotr, Gouenou ha Majan, hag eur verh Tudona.

Majan a dreuzas an Aber Benniget hag a yeas da chom el leh dudiuz m'emañ bremañ c'hoaz ar chapel a zoug e ano.

Tudona a yeas da vevañ pemp leo bennag ahane, en goueled ar Hoad-Donnañ.

Gouenou a ziskennas etrezeg Brest, hag a zavas e beniti 'n eul leh gouez, diou leo diouz ar gêr-ze, en tu an hanternoz. Ar roue Konomor, eun deiz ma oa o chaseal, a zegouezas gantañ kouezañ war Gouenou ; goulenn a reas digantañ e ano, euz a be vro e teue, penaoz e ree da vevañ, ha distro d'ar gêr, e tiskuillas d'e dud santelez ar manah en-devoa kavet oh ober e dro.

Nebeud goude, e-leiz a dud yaouank a hoantaas kemer skwer diwar Gouenou ha bevañ gantañ. Konomor, o vezañ klevet kelo a ze, a roas douar a-walh d'ar zant da zével eur manati ha da vegañ e veneh.

An abad santel, ken dre e gomzou, ken dre e skweriou, a renas ervad e veneh. Taol evez a ree, dreist pep tra, da vired deze o brud vad, hag abalamour da ze plah ebed n'halle lakaad he zreid er manati.

War a lavar ar re goz, eh azezas eur pennad war gador eskob Leon hag e oe ar pastor mad a oar diwall e zeñved diouz ar bleiz hag o magañ gand frouez ar gwir zantelez.

O vezañ eet da Gemperle d'ober eur bale da weled sant Korbasius, eur mignon dezañ, e oe lazet gand eur morzol o kouezañ diwar eur voger e oad o sevel.

E gorv a oe sebeliet en Kemperle. Diwezatoh e oe degaset e relegou d'e vanati. Douget e veznt beb bloaz en-dro d'e vinihi, da geñver pardon braz ar Yaou-Bask. Duked Breiz o-unan a houlennas an enor d'o dougen ; an aotrou Charlez Bleiz hen greas, er bloaz 1342 ; an aotrou Yann V, er bloaz 1417 ; an aotrou Per hag e eontr, an aotrou Arzur, er bloaz 1455.

Er bloaveziou kentañ arXVII^{ved} kantved e oe savet en Gouenou kaerrañ iliz a zo war-dro Brest.

Ar zant-mañ en-deus chapeliou en Priel hag en Plouillo. Bezañ eo patron Sant-Goueno, en Breiz-Uhel.

C’hwehved devez warn-ugent a viz Here

Sant Alor – Sant Alan

Ober a reer hirie, en Kemper, gouel sant Alor, eil eskob Kerne goude sant Korantin, patron Erge-Vihan, Plobannaleg ; Tremeog ha Tregenneg, ha gouel sant Alan, a bignas war gador-
eskob Kemper, prest goude sant Alor, hag en-deus e-leiz a fillored hag a fillorezed en Breiz-
Izel.

Seizved devez warn-ugent a viz Here

Sant Magloar

Eskob Dol (**-585)**

Magloar a oa eur Breizad a ziskennas war-dro hanter ar c'hwehved kantved e Bro-Arvor, da heul e genderv Samson, hag a bignas, da varo hemañ, war gador-eskob Dol (565).

Mez dond a reas buan da gazoud ar garg-se, ha goude bezañ roet e gador da zant Budog, en em dennas en enezennou a oa stag ouz e eskopti, evid galloud bevañ eno pell diouz trouz ar bed. Eur Breizad gallouduz ha pinvidig, e ano Loieskon, a oa perhenn teir euz an enezennou-ze. Seiz vloaz 'zo e oa klañv gand al lorgnez. Goude bezañ klasket louzeier a-gleiz hag a-zehou, o weled ne wellae tamm, en em erbedas ouz sant Magloar. An eskob santel, dre e bedennou hag e ouiziegez, deuas a-benn d'e bareañ. Loieskon, evid diskouez e anaoudegez vad, a roas dezañ an hanter euz enezenn Serk hag a viras an hanter all. Neuze e c'hoarvezas eun neventi zouezuz. Lapoused an enezenn ha pesked an aochou a 'n em dennas oll en tachenn ar sant. Loieskon, hag en-devoa aour hag arhant, mevelien ha plahed, kezeg ha loened-korn, douarou edeg ha gwiniennou zoken, ne reas ket kalz a van evid gweled ar holl-ze o c'hoarvezoud gantañ; mez e wreg, hag a oa eur plah tost, a reas dezañ tennañ digand Magloar e dachenn ha rei dezañ eben. Kerkent al lapoused hag ar pesked a yeas da heul ar sant. O weled kement-se, Loeiskon, den a spered hag a galon, a roas an enezenn a-bez da Vagloar, daoust da glemmou e wreg. Hemañ a zavas neuze enni eur manati kaer e-leh ma chomas beteg e varo.

Ar manati-ze, evel eun tour-tan en-kreiz 'tre an Diou Vreiz, a sklêrijenne war dreou ar bed all ha war dreou ar bed-mañ, an dudigou kêz a oa o chom en enezennou tro-war-dro. Kement hini a gare mond da Zerk a gave eno magadurez evid e gorv hag evid e spered.

Er bloaz 585, ar gernez a reas gaou braz ouz Bro-Arvor. Enezenn Serk, labouret mad gand he meneh, he-devoa berniou ed da ziuoued d'an Arvoriz tro-war-dro.

Koulskoude, dond a reas kement a dud da glask an aluzenn, ma teuas an irhier da vezañ goullonderet, ha setu an dienez ivez er manati. Darn a lavare kas ar re yaouankañ d'ar gêr, ken a vije tremenet ar gernez, mez Magloar ne oa ket chalet d'ober an dra-ze. Fizioud a ree war Brovidañs Doue.

Eun devez goude lein, bugale-skol ar manati a deuas d'e gaoud, hag o vezañ poket d'e dreid, e lavarjont: « Tad, laoskit ahanom da vond d'an aod evid na vezo ket on moueziou skiltruz o harz ar veneh koz d'ober o housk. War an aod ni 'hallo lenn on henteliou a vouez uhel, hag en doare-ze e teskfom aneze kalz buannoh. »

« Mad, it d'an aod, bugale », eme Vagloar, « mez bezit fur, ha distroit d'ar gêr d'an eur. »

Ha setu ar baotred, lorh enne, o tiskenn d'ar red d'ar porz-mor. Kaoud a reont eno eul lestr koz, mad da netra, hag a oa bet sachet war ar bili. Pignad a rejont e-barz da hoari; redeg a reont euz an eil penn d'egile hag ober a reont sin da roeñvi. Hogen, en devez-se e oa reverzi vraz. Ar mor a deue warneze, hag i 'oa ken troet da hoari ma ne daolent ket ple. En eun taol, eun tarz a deuas a zibradas al lestr, hag a gasas anezañ, bugale hag all, etrezeg ar mor don. A-drugarez Doue, an avel a oa sioul hag a gasas aneze, heb droug ebed, war aotchou Bro-Hall. Douarañ 'reont en eur harter ha ne oa ket a gernez ennañ. Pa lavaras ar vugale pebez paourentez 'oa en manati Serk, e oe karget deze o lestr a vleud hag a ed. Dizrei 'rejont d'ar gêr: tri devez o-devoa laket d'ober o zro. Kemend a aluzennou a oa deut gante, ma rankas c'hweh koublad ejenned dond da gerhad aneze d'ar porz-mor.

Sant Magloar a varvas prestig goude (585).

Ar zant-mañ en-deus eur chapel en parrouz Tregrom. Pedet eo ouz ar gouliou.

Sant Milio

Merzer (VI^{ved} kantved)

Milio a oa mab henañ Budik, trede kont a Gerne, maro war-dro ar bloaz 530 ; eur breur en-devoa, anvet Rivod. Milio a gemeras evid pried Aurilia, merh Winnok, priñs a Domnone, a roas dezañ eur mab hag a deuas da vezañ ar merzer yaouank Melar.

Seiz vloaz e renas e Kerne, hag en keit-se, war a lavar an Istor, nag ar glao, nag ar grizill, nag ar skorn, nag ar zehor, ne rejont gaou ouz traou an douar.

En e amzer e varvas sant Kaorantin, eskob Kemper, ha sant Gwennole, abad Landevenneg. Eñ e-unan ne chomas ket pell war o lerh, ha bezañ en-devoe eur maro truezuz meurbed. E vreur Rivod en-devoa kemeret droug outañ, hag hen lazas eun deiz gand eun taol kleze.

Milio eo patron Plouillo, e leh ma vez greet e bardon sul war-lerh an Asañsion.

Eur chapel en-deus en Trebeurden, 'barz an enezenn a doug e ano.

Kentel

Ar re a beh 'eneb ar feiz⁴³.

An heretiked eo an dud ne fell ket deze bezañ *kelennet* gand an Iliz.

Ar chismatiked eo an dud ne fell ket deze bezañ *gouarnet* gand an Iliz.

An naherien o feiz eo an dud a *dro kein* da Zoue o badeziant.

Ar ouenn aneze eo ganet en deiz ma hanas an Iliz he-unan, ha padoud a raio beteg fin ar bed.

Petra a ra d'an dud-se, da vihannañ, tehel evel-se diwar barlenn on Mamm Zantel ?

Daoust ha re galed e kavont ar giwrioneziou 'zo da gredi ?

Nann, n'eo ket ar gador-zarmon a ra deze tehel euz an Iliz, ar gador-goves an hini eo ; n'eo ket abalamour m'eo re galed ar giwrioneziou da gredi e nahont o feiz, mez abalamour ma kavont re striz ar gourhemennou 'zo da heulia, hag e lavaront neuze en o halon : « N'eus Doue ebed ! *Non est Deus !* ». En *o halon* eo e lavaront an dra-ze, n'eo ket eno spered, rag gand *o spered*, pa zigoront anezañ an disterrañ, n'hallont ket chom heb gweled ar skleur, da vihannañ, euz Doue ; mez techou fall o halon, savet uheloh eged o fenn, o-deus o dallet, hag abalamour da ze, ne welont mui Doue. Evid gweled Doue, kalon an den a rank bezañ sioul, ha reiz an traou enni.

Bezom glan a galon, hag e chomfom war barlenn on Mamm Zantel an Iliz ; bezom glan a galon hag e welfom Doue.

⁴³ Ar re a beh 'eneb ar feiz : Mennoziou eur "hristen" penn-kil-ha-troad, ha netra ken.

Kentel

Ar vered hag an Iliz

Eur bobl hag a intentfe pebez liamm kaer ha talvouduz a zo etrezi, e vered hag e iliz, honnez a vefe eur bobl kreñv-meurbed.

Evel-se e oa gwechall pobl Vreiz-Izel, rag an tri leh-mañ a oa unanet en e vuhez : an iliz, ar vered, ar gêr. An iliz a oa kalon at barrouz, ar re varo dastumet oll an tostañ dezi, hag ar re veo bodet, muiañ m'hallent, en-dro d'ar vered ; euz ar hreiz e save an tour, da gas war-zu an neñv klemm an Anaon ha pedenn ar re veo : ar vered a stage ar barrouz ouz an iliz, hag an iliz hag an tour a stage oll ouz an neñv.

Eun daolenn gaer, mar oe biskoaz. Hirie e vezer o tanzen difreuzañ anezi. Ar vered a oa hent an iliz ; 'vid dizrei ar Breton diwar hent ilizou, e kaser ar berejou pell dioute : an iliz diouz eun tu, ar vered diouz eun tu all, hag an dud diroutet a vo evel tri maill torret eur chadenn hag a yee gwechall euz ar bed-mañ d'ar bed all.

En kreiz ar vered, an iliz an disterrañ a zo kaer da weled : kened ar vuhez, ar galloud⁴⁴, ar vadelez, ar splann dispar war he zal, en-kreiz park sioul ar Maro : hag ar Vered, pegen dudiuz d'ar galon, he fleustri tro-war-dro d'an iliz ! Na tener ha frealzuz ar moueziou a zav euz don ar beziou o lavared oll en eur hantik :

« Skuillet on-deus en-dro d'an iliz ludu or horvou, evid ober eun hent da gas da dabernakl an Doue beo⁴⁵.

« Pa oam o vevañ e-touez an dud, e teskem deze hent an iliz : bremañ, pan om maro, ni o helenno c'hoaz.

Pegen mad eo beva en harz ho tihouesltd⁴⁶, o Doue, ha pegen mad kousked goude en skeud hoh iliz, 'leh e oam badezet.

Ar voger a zsiparti ahanom diouz tachenn ar re veo a zo heñvel ouz divreh an Aotrou o stardañ ahanom war e galon.

Rag an Aotrou Doue a gar ivez ar re varo ; kared a ra beteg ludu o horvou.

Skuilla 'ra warnezo bemdez, diwar an aoter, mil bennoz.

Ar vered eo liorz an Aotrou Doue, a zo o chom enni, ha korvou an anaon a zo 'vel plantennou kizidig miret ha temzet gantañ e douar o havell da hortoz ma vint trañsplantet⁴⁷ en liorz ar Baradoz.

Eun dra dinatur eo dispartiañ, heb red, ar vered diouz an iliz : evel-se setu mouget ar moueziou a gelenne ken kaer ar hristen. Ar vered, heb an iliz, n'eo ken eul leh mud, karget a deñvalijenn hag a dristitigez : an iliz parrouz, heb ar vered en he hichenn, a zo heñvel ouz eur vamm he-deus kollet he bugale, ouz eur rouanez he-deus kollet he hurunenn hag he lez.

Mez mar zo truez da gad ouz ar re varo argaset diwar o iliz, muioh a druez 'zo da gad c'hoaz ouz ar re veo deut da vezañ ken kaledet ha ken dall ma freuzont a-benn-kaer ar haerrañ bleuniou dispak dirag eul lagad kristen.

● * * *

Miz Du eo miz an Anaon. Er houlz-mañ euz ar bloaz e savont o mouez, mud evid biskoaz, da houlen digand ar re veo pedennou, yuniou, overennou, kommuniou.

⁴⁴ ar galloud : notenn gand "Embann an Hirwaz" : galloud ar veleien ?

⁴⁵ Doue beo ; notenn gand "Embann an Hirwaz" : hag ez eus anezañ ?

⁴⁶ tihouesltd : ? Marteze "dihouestla", nompaz miroud eur "gouestl" ?

⁴⁷ trañsplantet : galleg.

Devosion an Anaon 'zo unan euz kaerrañ re a zo en Iliz. En on amzer e fell du dud fallagr he mougañ : laeret o-deus digand ar re varo alhwez o frizon, an arhant espernet gante, pa oant war an douar, evid pedi evite, pa vijent o leski en tan ar purgator.

Dihaouom an Anaon paour laket en noaz kasom dezañ an aluzenn on fedennou birvidig : eñ, diwezatoh, a bedo evidom ivez.

Sant Kado

Eskob ha merzer (VI^{ved} kantved)

Enorom ivez sant Kado, en em gav e ouel en deiz-mañ⁴⁸. Ganet ‘oa en Breiz-Veur, ha mab ‘oa da roue Glanmorgan, an hini a chomas sant Iltud eur pennad en e zervij. O vezañ kuitaet ar bed, e savas eun abati en Lankarvan hag e vodas ennañ 300 manah. Ne chomas ket pell gante, kemend a hoant en-devoa da vevañ didrouz da dizanvez. E vuhez a dremenas o veaji. Bale a reas dre bep korn a Vreiz-Veur hag a Iwerzon, e leh ma labouras da brezeg ar feiz gand Sant Gweltaz.

Mond a reas ivez da Vro-Hall, da Rom ha beteg da Jeruzalem. O tizrei euz an Itali, e touras en eun enezennig etre Gwened hag Alre, hag e savas eno eur manati damdost d’e vignon Sant Gweltas.

A-benn nebeud, avad, Doue hen galvas adarre da vond pelloh. War a greder, e tizroas da Vreiz-Veur, e oe greet eskob Benaven ha lazet eno gand ar Zaozon.

Sant Kado a zo brudet en Breiz-Izel, e leh m’eo pedet ouz ar gouliou hag evid al loened. Bezañ eo ivez patron an dud a vrezel. Ar Vretoned o vond da *Stourm an Tregont*, ar 26 a viz Meurz 1351, a bede anezañ evel-henn :

Aotrou Sant Kado, on paeron,
Roet-hu dim-ni nerz kalon.
Ma hounezefom, hirie an deiz,
War enebourien euz a Vreiz.

Mar deom-ni d’ar gêr war on hiz,
Ni a roy deoh-hu eur gouriz.

Ma laro an ddu o selled,
Aotrou sant Kado benniget :
Koulz er baradoz hag en douar,
Sant Kado n’en-deus ket e bar.

Bezañ ‘n-eus eur chapel en Karnot. En Plouillo e vez greet e bardon ar pevare sul a viz Here. Enoret eo ivez en Sant-Kleve, hag e Lomikêl-an-Trêz.

⁴⁸ en em gav e ouel en deiz-mañ : d’ar hentañ a viz Du.

Sant Gwenael

Trede devez a viz Du

Abad Landevenneg (VI^{ved} kantved)

Gwenael, mab da Ronvel ha da Levenez, a oa ganet e Lanveneg⁴⁹, en goueled Leon. E gerent a oa Bretoned, genidig o-daou euz a Vreiz-Veur, hag a oa euz ar re gentañ a dreuzas ar mor evid dond da chom e Bro-Arvor.

Eun devez – seiz pe eiz vloaz e halle bezañ er mare-ze – e oa o c’hoari er porz dirag e di, pa zegouezas gand sant Gwennole tremen en hent-se gand eun toullad euz e veneh. Abad Landevenneg, o weled ar bugel koant-se, a lavaras dezañ gand eur mouse’hoarz :

Ma mabig, n’az-peus ket c’hoant da zond da vanah ganim-ni ?

O ! ma Zad, eme ar paotr bihan, me ‘zo prest d’ober, evid plijoud d’an Aotrou Doue, kement tra a hourhemennfet din !

Hag ar bugel, heb mond en ti, na netra, ha da heul dioustu sant Gwennole. Hemañ a chomas mantret ouz e weled, hag a lavaras dezañ :

Re vihan out c’hoaz, mignon, da zond ganim ; Landevenneg a zo pell ahann ; n’halli ket kerzed beteg eno.

O ! eo, eme ar paotrig ; hag e kerze da heul ar veneh.

Gwennole, souezetoh evid biskoaz ouz e weled o tond war e lerh gand kemend a bres, a zizroas gantañ da di e dud hag, o vezañ bet o asant, e kasas anezañ gantañ da Landevenneg.

Daoust pegen yaouank ‘oa pa’h eas da zerviji Doue er manati, Gwenael ne deuas ket da yennaad en e zervij, pell ahane. Tri bloaz goude e wiskas sae ar veneh ; en em rei a reas a galon d’ar studi ha d’ar bedenn ; mired a ree reolenn an ti penn-da-benn, gand ar brasañ aket.

Aliez, e-pad ma kemere e vreudeur o diskuiz, en em daole, en hañv koulz hag er goañv, en dour beteg e ziouhazell, hag e kane seiz psalm ar binijenn evid goulenn digand Doue ar hlanded a gorv hag a ene, ken evitañ e-unan, ken evid an oll gristenien.

Gwennole, war e varo, a anvas anezañ da bignal war e gador. Gwenael a chomas seiz vloaz en penn abati Landevenneg. Goude ar seizved, e treuzas ar mor gand unneg manah hag eh eas da *Vro goz e Dadou*.

E-pad tregont vloaz hag ouspenn, e prezegas en Breiz-Veur hag en Iwerzon ; sevel a reas daou pe dri manati nevez ; e-unan e reas pep tra ‘barz ar re goz, hag eur wech greet an dra-ze, e teuas c’hoant dezañ da zizrei da Vreiz-Izel. Treuzi ‘reas ar mor en eur vag haleg goloet gand krehen. Evid e oll deñzor e tegasas gantañ eur bern levriou ha relegou.

Douarañ ‘reas en Bro-Gerne, e leh ma savas tri manati ; goude eh eas da Hroe, hag eno e chomas eur pennadig brao da adstummañ ar manatiou bihan a oa niveruz en enezenn-ze. Daoust pegen troet ‘oa war e labour, eur mare a deuas hag e rankas ober eun diskuiz ; mond a reas eta euz Groe hag e reas e ziskenn en aber Blañwez⁵⁰, e leh ma savas eur manati all.

O vezañ eet eun devez da weled Karadeg, unan euz e veneh, a oa en em dennet eur pennad ahann en e beniti e-unan, e tegouezas gand eur harv hag a deuas dindan e vantell⁵¹ d’en em goach ‘raog ar chas a oa o redeg war e lerh. Gwerog, roue Bro-Wened, eo a oa dre eno oh ober eun dro-chase. P’en em gavas gand ar zant, e oe laouen-braz da vezañ gallet ober anaoudegez gantañ, hag e stagas daou damm leve ouz e vanati, evid ma vije pedet evid silvidigez e ene *ha hini ar vro*.

⁴⁹ Lanveneg : **notenn gand an oberour** : En parrouz Lanrivoare.

⁵⁰ Blañwez ;:Blavweh.

⁵¹ eur harv hag a deuas dindan e vantell : ? Diêz evid eur harv mond dindan mantell eun den !

Gwennael a varvas prest goude, war-dro ar bloaz 500. Plougouvelen, en eskopti Leon, Erge-Gaberig ha Bolazeg, en eskopti Kerne, o-deus e generet da batron.

Notenn gand an oberour : Chapeliou en-deus, pe en-desu bet e Gwiskriv, en Poullaouen, en Elliant, en Moelan, en Ploneiz, en Landivizio,, en Kore hag e Poulldergad.

Ar plah eüruz Frañseza Amboaz

Dukez Breiz (1427 – 1485)

Pempved devez a viz Du

Frañseza, gloar Breiz ha bleunienn ar Harmel, merh henañ Loeiz Amboaz ha Mari Rieux, a oa ganet er Poatou, an 9 a viz Mae 1427. Pevar bloaz goude, an 21 a viz Gouere 1431, e oe prometet da Ber, an eil euz bugale Yann V. Adaleg neuze, e oe savet en Naoned, en lez duked Breiz, gand an dukez Jann, pried Yann V ha c'hoar Charlez VII, roue Frañs. Jann a oa eur wreg santel, a reas dre he henteliou mad eur zantez euz an hini a dlee bezañ he merh-kaer ; he hustumi a reas da gemer plegiou mad ; 'dal ma hallas komz, e teskas dezi ar hatekiz hag an doare da bedi a henou hag a galon, evel ma oa bet desket dezi he-unan gand sant Visant Ferrier.

Frañseza a diskoueze abred e vije diwezatoh eur zantez. He flijadur 'oa mond da weled an ilizou ; ne golle ket he amzer o c'hoari evel ar vugale all euz he oad, mez bepred e veze oh ober eun dra bennag, o nezañ, o wriad, o lenn pe o skrivañ. Pa veze eur brezegenn bennag en iliz, ne vanke gwech ebed da vond d'he selaou, ha goude, ar rest euz an deiz, ne veze ken ano ganti nemed euz ar pezh en-dije lavaret ar prezeger.

Adaleg he bloaveziou tenerrañ, e tiwanas en he halon an devosion da Jezuz-Krist en sakramant an aoter ; da vare ar gorreou, pa zave ar beleg an hosti adoret gand ar bobl, e veze gwelet aliez an daerou o tond en he daoulagad ; en deiziou ma tlee an duk, an dukez hag oll dud o lez tostaad ouz an daol zantel, e veze trist-marro ; ne zebre na ne eve, ha kaer e vije, n'halled ket tennañ diouti petra 'vije kirieg dezi da vezañ evel-se. Eun devez, nehetoh evid biskoaz, an dukez a gemeras anezi a-gostez, hag a houlenas petra 'oa oh obe dezi kemend all a boan.

« Allaz, itron, eme ar verh vihan, an aotrou duk ha c'hwi, hag oll dud ho lez, ho-peus bet hirie an eurvad da reseo korv On Zalver, ha me hepken, dre n'am-eus ket an oad, a rank chom a-dreñv. Gwelet neuze ha n'am-eus ket a leh da 'n em gaoud diêz ? »

Hag ar briñsez a ouele.

« Arabad deoh gouelañ ken, ma n'eus nemed se, eme Jann, rag da ouel an Oll Zent a zeu, e tostaet, mar gallan, ouz taol ar Zakramant. »

Ha hi raktal da gaoud kovezour ar verh, An Tad Yvon Pontsal, manah euz a Gemperle, a oe, er bloavez-se, sakret eskob en Gwened. Hemañ, o weled devosion hag anaoudegez Frañsezaig, a gavas mad gweled anezi o tostaad dioustu ouz sakramant an aoter, daoust ma n'he-devoa c'hoaz *nemed pemp bloaz* (1432).

Er bloaz war-lerh, an dukez Jann a varvas ; a-raog tremen, e vennigas gand teneridigez an hini a dlee bezañ he merh-kaer, hag e roas dezi, gand he henteliou diwezañ, ar chapeled koad he-devoa bet digand sant Visant Ferrier.

Eiz vloaz goude, er bloaz 1441, e oa greet gand lid braz he eured gand an aotrou Per, hag en deiziou war-lerh, ar priejou nevez a yeas da chom da gastell Gwengamp (**notenn gand an oberour** :

Jili Breiz : E-pad an amzer a dremenjont eno, e c'hoarvezas en Breiz eun darvoud skrijuz a roas kalonad deze hag a lakaas kañvou 'barz ar vro a-bez. Jili, o breur yaouank, a oa dimezet da Frañseza Dinan, pinvidikañ pennherez a oa en Breiz. Hogen, en lez o breur henañ e oa deut da chom eun dijentil, e ano Arzur Montauban, c'hoant braz gantañ ivez kaoud da bried ar Vreizadez pinvidig-se. Evid dond a-benn euz e daol, e tamallas Jili dirag e vreur, hag e roas dezañ da gredi e oa 'n em glevet gand ar Zaozon evid diframmañ diwar e benn kurunenn Breiz. Frañsez a reas raktal serri ar priñs yaouank, hag Arzur Montauban, goude bezañ klasket e ampoezoni, a reas e vougañ en e brizon, ar 25 a viz Ebrel 1450, endra ma oa o ren e bempved bloaz warn-ugent. Ar 17 a viz

Gouere war-lerh, an duk Frañsez a varve en maner ar Genkiz, e-tal Gwened, rannet e galon o weled petra a oa c'hoarvezet gantañ evid bezañ selaouet re vuan mouez eun tostenner⁵²)

Nao bloaz goude, da varo an aotrou Frañsez I, e pignjont war dron Breiz.

Frañseza a daole evez evid na vije roet ar hargou nemed d'ar re 'oa barreg d'en em denn enne ; he brasañ c'hoant 'oa gweled oll lezennou an Iliz miret en he dukach⁵³ ; ne oa ket chalet da weled lakaad trujou nevez war ar bobl. P'en em vodas oll bennou-braz Breiz en Gwened, er bloaz 1451, e oa darn hag a lavare e oa peuh er vro eur pennad a oa, e kreske an arhant e-touez an dud, hag e oa mad kreski ivez an trujou, gand aon, pa vijent re en o êz, n'halljed mui dond a-benn aneze.

An dukez vad a ziskouezas e oa dever kenta ar briñsed gwellaad stad ar re a oa dindanne ha nann pinvidikaad an dud piz gand c'hwezenn ha gwad ar bobl. Lakaad a reas ar gwir da vezañ treh d'an displeaded, ha setu perag e vez lavaret :

Daoust d'ar re fall, ar Bobl, en Breiz, a yeas war well,

En amzer an duk Per hag e bried santel.

D'ar 17 a viz Gouere 1453, ar Zaozon a oe trehet en Kastillon gand ar Hallaoued skoazellet gand ar Vretoned, ha dreist-oll gand ar pedennou birvidig a lakaas an dukez ober dre Vreiz evid goulenn ar viktor-ze.

Er bloaz 1455, war houlenn duked Breiz, e oa laket ano Visant Ferrier war roll ar zent ; pa oa greet en Gwened ar goueliou braz kentañ en e enor, ar 5 a viz Ebrel war-lerh, duk ha dukez Breiz a oa en penn o Bretoned o pedi en harz relegou ar zant nevez.

D'an 22 a viz Gwengolo 1457, an aotrou Per a varvas. E gerent ha Louis XI, roue Frañs ; a glaskas dre gaer ha dre heg, lakaad Frañseza da addimezi. N'halljont ket ; da daou-ugent vloaz, e wiskas, en Gwened, sae leanezed Urz Karmel. War urz Sixt IV, eh eas da ren manati Itron Vari Iskoed, en-kichenn Naoned. Eno e varvas, ar 4 a viz Du 1485, en eur lavared d'he c'hoarezed, evel kimiad, ar homzou e oa kustum da lavared aliez : « Gand a refet, gret ma vezo bepred karet Doue dresit pep tra ! »

Pi IX, an 11 a viz Gouere 1863, a roas aotre da vired ha da greski he devosion.

⁵² tostenner : troet e galleg gand an oberour : courtisan.

⁵³ dukach : dukelez.

Sant Iltud

C'hwehved a viz Du

Abad (VI^{ved} kantved).

Iltud a oa ganet en Breiz-Veur, en rouantelez Glamorgan. Evid ober evel e dad, eh eas d'an arme, hag e oe savet abred en penn an enoriou. Mez war ali sant Kado, abad Lankarvan, en em dennas er-mêz euz ar bed, ha pa'h eas Jermen Auxer da Vreiz-Veur, e oe unan euz e wellañ deskibien ; beleget e oe gantañ pa zistroas an eil gwech da vro ar Vretoned.

Iltud a ziazezas neuze, demdost da Lankarvan, war ribl ar mor, ar manati brudet a zougas e ano ; eno e oe savet sant Divi, sant Paol, sant Samson, sant Leonor, sant Magloar, sant Gweltaz, hag eun niver braz a re all c'hoaz hag a deuas da vezañ sklêrijenn ha kened an Diou Vreiz, dre o gouiziegez hag o zantelez.

En Laniltud, n'eo ket hepken ar spered a labour, ar horv en-dije ivez e lod. Ar manati a oa savet war lez eur vreh-vor, ha dre ne oa torraod ebed, ar mor a hweze warnezañ. O weled an dra-ze, an eskibien a deuas da gad Iltud da bedi anezañ da lakaad ar mor da vond war-dreñv. Eun devez eta ma oa reverdi vraz, an abad santel a gemeras e vaz hag a ziskennas en aod gand e vugale, pa oa ar mor ar pellañ. Ober a reas eur roudenn en trêz hag e zeskibien a zavas eur hleun eno da derri an tarziou mor. Pa oe peurhreet al labour, e houlennas digand Doue ober d'ar mor chom a-zav, pa vije en em gavet gand ar hleun o-devoa savet e baotred, hag abaoe, ar mor a lezas dizolo eun tamm brao a zouar etre ar manati hag eñ. An douar-ze a oe labouret hag a roas eostou euz ar haerrañ.

Iltud, sklêrijennet gand ar gloar a ree dezañ e zeskibien, brudet der e vertuziou, skuizet gand al labour hag ar gozni, a lakaas eun all en e blas en penn e vanati, hag a 'n em dennas en e beniti e-unan, e-pad tri bloaz. A-viskoaz en-devoa greet pinijenn ; diwar neuze e reas muioh c'hoaz.

Ano sant Iltud a dle padoud keit ha ma pado ar feiz en Breiz.

Diou barrouz ezu eskopti Sant-Brieg ha Lndreger o-deus kemeret anezañ da batron \ Koadoud ha Landeberon ; mired a reont c'hoaz darn euz e relegou. R bardon a vez greet en Koadoud, an eil sul a viz Gouere. Pedet eo evid al loened.

Sant Eflamm – Santez Enora

Hirie (C’hwehved devez a viz Du) en em gav ivez gouel sant Eflamm ha santez Henora, e bried, a ziskennas o-daou en Arvorig er VI^{ved} kantved, hag a zavas peb a beniti war-dro al Leo-Drêz. En o amzer e veve eno eun ermit all, Jestin, hag e-neus roet e ano da barrouz Plistin.

Sant Eflam a zo patron Plistin, e leh e-neus eur chapel.

Bezañ ‘n-eus chapeliou all en Karnot, en Leskouet hag e Pederneg.

Kentel

Talvoudegez an deskadurez

Gwell eo deski mabig bihan

Eged dastum madou dezañ.

a lavare ar re goz, hag ar wirionez a oa gante. N'eus netra ken kaer hag an deskadurez. Hi eo a laouenna on buhez ; hi eo a zav on eneuou etrezeg ar wirionez ; hi eo a wella on stad ; hi eo a vag, a zivenn, a greñv on feiz.

Mez an deskadurez, daoust pegen kaer eo drezi he-unan, a hall ober muioh a zroug eged a vad, ma ne vez ket roet d'ar hrouadur hervez ar relijion a dle heuill, ar vro e tle bevañ enni, hag ar vicher a dle kemer, ha just a-walh, setu petra 'hoarvez en Breiz-Izel en amzer-mañ.

Skoliou on-eus ezomm evid ober euz on bugale Bretoned seder ha kristen, tud ha ne ruzfont ket euz o zadou, hag a vezo barreg d'en em denn en peb leh. Beh on-deus ouz o haoud.

Tadou ha mammou, gret eta, gand evez, an dibab etre ar skoliou ma tleet kas enne ho pugale. Ar skoliou dizoue, ar re wellañ aneze, ne dalvezont seurt. Etre diou skol gristen, dibabet an hini a oar ar gwellañ silañ karantez ar vro en kalonou ar re he darempred.

Breiz-Izel he-deus ezomm e chomfe er gêr ar pep brasañ euz ar baotred hag euz ar merhed he-deus ganet. Ha penaoz e chomfont er gêr ma n'o lakaer ket d'he hared ? Ha penaoz he harfont ma ne roer ket deze anaoudegez anezi ?

Notenn gand Embannan Hirwaz : A-du e oa Moal gand peurrenerez e feiz kristen. Arabad d'ar re na oa ket kristenien penn-kil-troad diouto, klask menegi o zoñjou.

Santez Trifina ha Sant Tremeur

Seizved devez a viz Du

Nebeud euz ar zent ganet en Arvorig a zo bet muioh brudet ha karet gand o henvroiz evid santez Trifina ha sant Tremeur.

Gwerog a rene war bro-Wened (500 – 550) : bezañ en-devoa eur verh anvet Trifina ; kelennet gand sant Gweltaz, homañ ‘oa eur skwer a furnez hag a zoujañs Doue. Ar hont koz hag a anaveze an teñzor roet dezañ gand an Aotrou Doue, a gare e verh dreist e vugale all, hag a glaske eviti eur stad uhel.

Konomor, roue bro Geraez, a welas eun deiz Trifina hag he c’hoantaas da bried, gonezet dre he hened, he furnez, marteze ivez dre ar c’hoant da gaoud kontach⁵⁴ he zad, ha da vezañ mestr da Vreiz. D’eun heveleb goulenn Gwerog a deu spont dezañ : « Penaoz rei ma merh da fallañ den ar vro ? » Rag Konomor, den didruez, difeiz, a laze e briejou, war lavariou faoz ar zorserien : « Diwallet, Konomor, emeze, gand eur mab deoh e vefet lazet ! »

Evid daleañ, Gwerog a respontas da Gonomor : « N’ho-pezo ket ma merh Trifina da bried, ma ne deu an den santel Gweltaz d’he goulenn en ho ano. » Galvet eo Gweltaz d’ar palez ; gand aon na zavje brezel etre an daou briñs, e lakaas Gwerog d’asanti.

Ne badas ket pell ar garantez a zeblante Konomor kaoud evid e bried yaouank. Trifina ‘oa o vond da vezañ mamm d’eur bugel, ha Konomor na houll ket an enor da vezañ tad. Selled a ra bremañ a-dreuz ouz e wreg. Ar briñsez a rank soñjal tehed da di he zad : « O ma Doue ! eme Trifina, pebez stad truezuz eo ma hini ! Mez ne dlean ket en em glemm, rag pep tra euz ho polontez ‘zo greet evid ma evurusted. »

Beure mad ha didrouz, e tilez Trifina ar hastell ; mez hebdale ivez Konomor a glask e bried. Pa oar eo tehet kuit, gand kounnar e lamp war e varh, hag a-raog pell e tap en eur hoad Trifina. Nag he sellou glaharuz, nag he fedennou, netra ne denera kalon Konomor ; evel eur bleiz gand eun dañvad, dre eun taol kleze e lemm digand ar briñsez he buhez.

Peleh e c’hoarvezas an torfed-se ? War douar parrouz Santez-Trifina, an hini⁵⁵ he-deus c’hoaz bez ar zantez hag he relegou.

War-lerh e dorfed, Konomor a red da Gastell-Finañs, savet ‘uz d’ar Blavez. Servijerien a gas d’he zad kelou euz muntr Trifina. Gwerog a halv Gweltaz :

« D’eur bourreo, a laras-eñ, hoh-eus roet ma merh ; ar boureo en-deus he dibennet. »

« Gloar a deuio da Zoue, eme sant Gweltaz, euz ar muntr a ra ho klahar. »

Daoulinañ ‘ra ar manah dirag ar horv maro, ha goude eur bedenn, e lar : « Trifina, en ano an Drinded santel, me hen gourhemenn deoh, savet ha bevet adarre. » Ha setu ar horv maro o sevel leun a vuhez evel gwechall.

‘Benn eun nebeud amzer goude, ‘oe galvet c’hoaz sant Gweltaz da skuill dour ar vadeziant war dal ar bugel a hanas Trifina : « Tremeur, eme ar manah, a vo e ano ; evel eun êl e vevo ; evuruz e vamm hag e vro ! »

Beteg an oad a bemp bloaz e chomas gand e vamm ; goude ‘oe kaset da abati sant Gweltaz, da Ruiz. Neuze Trifina en em dennas en eur manati leanezed, e leh ma varvas leun a veritou.

E berr amzer, Tremeur, desket gand sant Gweltaz, ‘oa deut da vezañ eur bugel santel. Eur zulvez, an 8 a viz Du 554, ma oa eet da vale war ar mêz gand ar skolaerien all, Konomor en em gavas gantañ, hag an tad digar a dibennas e vab evel en-devoa dibennet e bried.

Parrouz Santez-Trifina he-deus an enor da gaoud bez ha relegou santez Trifina ha sant Tremeur, he fatroned. Ar chapelig savet war o bez ‘zo darempredet gand kalz a gristenien. E-

⁵⁴ kontach : kontelez

⁵⁵ an hini : pehini, er skrid orin.

pad miz Mae, mammou ar vro a degas o bugale vihan war o bez, ha meur a vugel en-deus greet eno o hammejou kentañ.

Pardon ar zantez a vez greet an 21 a viz Gouere, devez berz evid ar barrouz. Pardon sant Tremeur a vez lidet ar zul kentañ a viz Mae.

Kentel

Deveriou ar priejou an eil e-keñver egile.

Ar priejou a dle en em gleved : trouz ebed kammed ; en em gared hervez Doue, rag en em gared 'eneb Doue n'eo ket en em gared eo.

Arabad dimezi nemed gand unan hag a anavezer mad. « Kemer da bried, a lavare eun den fur, e-touez da vignoned, e-touez da amezeien, e-touez tud ar barrouz, ha ne vezi ket tromplet. » Ar re goz a lavare : « Ar gedon a-bell a ya oll da lern. »

Ar priejou a dle c'hoaz en em bardoni. N'eus parkad ed ebed, ha ne vefe ennañ eul louzaouenn fall bennag ; red eo dilouzaoui an douar. N'eus ti ebed ha ne vefe ennañ eur gomz rok bennag ; red eo en em bardoni.

Fachet Mari, ne lavar ger ;

Troet he fenn ouz ar voger.

Mouzet Yannig ha du e dal ;

Tost eo an arne da strakal.

Arabad fachañ, arabad mouzañ. Arabad chom mouzet, rag n'eo ket brao. En em dispartiañ n'hellet ket. Ha pa rafeh, ne vefeh ket gwell, pell ahane.

Eur hwezadenn war an tamm koumoul-ze, ha peuh en ti, en ano Doue !

Sant Malo

Pempzegved devez a viz Du

Eskob Aleth (***) - 621)

Malo a oa genidig euz a Vro-Geumri. Beleg hag abad 'oa da dregont vloaz, hag e teuas e Bro-Arvor war-dro hanter ar c'hwehved kantved, gand eun tregont deskibl bennag. Douarañ 'reas en eur gourenez tost da gêr Aleth, en Breiz-Uhel, ha dioustu en em lakaas da brezeg Jezuz-Krist en Aleth, en Korseul ha war ar mêziou tro-war-dro.

Dond a reas c'hoant dezañ da vond da ganañ overenn ar Zuk-Fask da Gorseul. Mez ar gloareged a oa gantañ o devoa ankouezet ar gwin overenn hag ar halur. E,-keid am oad o vond da gerhad an traou-ze en kêr, Konomor, ar roue eskumunuget, a deuas ivez di gand aotrounez e lez, hag a gavas war e hent eun toulladig tud o vond en eur ouelañ da zebeliañ eun den yaouank pinvidig. Ar roue a oe poaniet-braz o weled pegen glaharet e oant. Lavared e rejod dezañ, en eur ziskouez an iliz 'leh ma tlee Malo overennañ :

« En iliz-se 'zo eur beleg santel, e ano Malo, hag a ra traou souezuz. Ma'h afeh d'hen kaoud, aotrou, e hallje, goude bezañ pedet e Zoue, lakaad an den-mañ da zével euz a varo da veo ! »

Konomor a yeas en iliz, hag o vezañ greet sin da bedi Doue, e lavaras :

« Peleh emañ an den ho-peus komzet anezañ ? »

« Setu-eñ aze, stouet d'an douar, o pedi e Zoue. »

« Lavaret dezañ sevel ha dond d'am haoud. »

Malo a deuas, mez ne zaludas ket ar roue, hag ar roue ne houlennas ket e vennoz. Kement hini a oa eno a houlennas neuze ouz ar zant rei ar vuhez d'an den yaouank.

« An Aotrou Doue hepken, eme hemañ, a hall ober an dra-ze. »

Koulskoude, o weled pegen braz 'oa o glahar, e lavaras : « Degaset ar horv d'an iliz, ma vezo greet warnezañ pedennou ar re varo. »

Pa oe degaset ar horv maro d'an iliz, Malo a reas d'an oll mond er-mêz, ha ne zalhas en e gichenn nemed e gloareged. Stoui a reas neuze d'an douar hag e pedas a-greiz kalon. Pa zavas en e zav, an den maro a zavas ivez euz e arched.

E-touez ar bobl a oa bodet eno evid goueliou Pask, e oa kement a baganed hag a gristenien. Oll o-devoa c'hoant da weled an overenn.

Goude hir-gortoz, e oe komañset ; mez war-lerh ar Gredo, e rankjod adarre poz ; ne gaved ket en Korseul nag eur banne gwin nag eur halur. Ar baganed o-devoa en em glevet evid ober kontrol ouz ar gristenien. Ar roue Konomor hag ar bobl a deue da skuizañ o hortoz ; ar zant a reas neuze eur halur gand eur mên euz an aoter hag a droas an dour en gwin : en doare-ze e hallas achui e overenn.

Malo a zavas e-leiz a vanatiou. Labourad douar a ree ivez. Eun devez ma oa eet d'e bark, e lemas e vantell hag e lakaas anezi en pign ouz eur wezenn dero. Eul laouenanig a deuas hag a dozvas eun u enni. D'abardaez, p'en-devoe achuet e zevez, Malo a yeas da gerhad e vantell. Pa welas an u, e chomas souezet hag e lavaras : « Doue oll-hallloudeg, c'hwi eo ho-peus lakaet al lapous bihan-ze d'ober e neiz em mantell. Ma leman anezi digantañ e koll e u. » Ha kentoh evid ober an disterrañ poan d'al lalouenanig, eh eas d'ar gêr, o lezel e vantell ouz ar skourr, ken e oe savet an evned bihan.

Goude bezañ tremenet daou-ugent vloaz o kelenn ar baganed,oh ober vad da gorr ha da ene an dud a oa war e dro, ar bobl a houlennas digand Judael, roue an Domnone, sevel eun eskopti en Aleth ha lakaad Malo da eskob.

Ar manah santel a yeas da D/Tours hag eno e oe konsakret eskob ; eur wech dizro d'e eskopti, e labouras c'hoaz muioh da astenn en-dro dezañ rouantelez Jezuz-Krist. Koulskoude

e brezegennou ne blijent ket d'an oll, d'ar re fall dreist-oll. Klask a rejont nozoud outañ. Eur manah koz, hag a oa diouz e du, a oe stlapet gante er mor ha beuzet.

O weled kement-se, Malo a guitaas ar vro, hag en em dennas en Luxeuil, e leh ma oa neuze sant Kolomban. Pa gredas e oa torret d'e enebourien, e teuas en-dro, mez degemer fall a oe greet dezañ, hag eñ kuit adarre.

An Aotrou Doue a skoas neuze bro Aleth, o tegas warnezi eur zehor vraz. Daoulagad Alethiz a zigoras neuze ; mond a rejont da glask ar zant, ha dre forz pedi anezañ, e halljont e lakaad da zond gante d'e eskopti. Kerkent ha ma 'n em gavas er gêr, ar zehor vraz a baouezas. Sant Malo a varvas en Aleth, war-dro an oad a gant vloaz, er bloaz 621. Abaoe, ar gêr-ze a doug e ano.

Sant Melani

Eskob Roazon (** - 530)

C’hwezegved devez a viz Du

Melani a oa ganet e Plaz, eskopti Gwened, er horn tostañ da eskopti Roazon. Sevel a reas war e zouar eur manati braz a zervijas kalz da gristenañ ar vro a zo etre Gwened, Roazon ha Naoned.

Eun den koz euz Bro-Wened, o vezañ kollet e vab, a lavaras d’e vignoned : « Douget korv ar paotr-se d’an den santel Melani : fiziañs am-esu e roio dezañ ar vuhez, eñ hag a brezeg an Doue beo. »

Ar horv a oe douget d’ar zant ; an tad a deuas d’e heul hag a lavare, an daerou en e zaoulagad : « O ! den mad, kredi a ran ho-peus galloud da rei ar vuhez d’am mab. » An dud a oa deredet da heul ar Gwenedour a harpe e bedenn.

Sant Melani a zizroas warneze : « O ! Gwenediz, da betra ober miraklou dirakoh en ano Jezuz-Krist, pa n’eo ket mad deoh kredi ennañ ? »

En amzer-ze c’hoaz, Gwenediz, koulz lavared oll, a oa paganed. Ar bobl a respontas : « Ma lakez ar vuhez da zond er bugel-ze, neuze ni ‘gredo oll en Doue a brezegez. »

Melani a bedas, a reas sin ar groaz war galon ar hrouadur, hag ar hrouadur a vevas. Ar bobl, sebezet, a youhas raktal : « A-walh eo ! Ni a gred oll en Doue Melani ! » Hag en gwirionez, nebeud amzer goude, ar zant en-devoe ar blijadur da vadezi, koulz lavared, kement hini a oa bet test euz e virakl.

War-dro ar bloaz 490, Melani a bignas wargador eskopti Roazon. Den ebed ne ouie gonid an dud eveltañ.

War e ali, Klovis a zavas e-leiz a ilizou nevez, a dresas ar re a oa fall, a ziazezas kalz a vanatiou, hag a labouras heb paouez da greñvaad ar relijion. War e ali c’hoaz, e vodas en Orléans, er bloaz 511, an daou eskob ha tregont a oa neuze en Frañs, evid en em gleved ‘eneb an Arianed hag evid embann gwir gredenn an Iliz. Sant Melani eo an eskob a skedas ar muiañ er hoñsil-ze. Eñ eo a deuas a-benn en Frañs da lakaad an Iliz hag ar Gouarnamant da rei dorn an eil d’egile, evid brasañ mad ar vro.

En amzer-ze e oa e Bro-Wened eun aotrou braz, e ano Euzeb, den pinvidig ha digalon. Eun devez m’oa eet da Gomblesak, gand e arme, eh eas droug ennañ, den ne oar perag, hag e reas tennañ o daoulagad ha trohañ o daouarn da e-leiz a dud euz ar gêriadenn-ze. En noz war-lerh, e kouezas klañv-braz, hag e oa dare da vervel. Ar vedisined ne ouient netra diouz e gleñved. Tri devez ‘zo ‘oa er stumm-ze pa gouezas klañv ivez e verh Aspasia. Homañ a ‘n em ruille war an douar evel pa vefe bet eet an droug-spered enni. Komzet ‘oa neuze da Euzeb euz a Velani, a deue c’hoaz, beb an amzer, d’ober eur bale da Blaz, daoust dezañ da vezañ eskob Roazon. Euz a Goblezak da Blaz, ne oa nemed c’hweh leo ; Euzeb a gasas eur hannad da gad an eskob d’e bedi da zond d’e weled, en ano ar garantez. Melani a deuas, hag o vezañ ‘n em gavet gand ar hlañvour, e kovesaas anezañ, e roas dezañ eur binijenn galed, e lakaas dezañ teir gwech eoul benniget hag e pareas anezañ, eñ hag e verh. Euzeb, evid diskouez e anaoudegez vad, a roas d’e vadoberour parrouz Komblezak a-bez.

Melani a varvas en Plaz war-dro ar bloaz 530. E gorr a oe degaset da zebeliañ da Roazon. Pa oa o tremen mogeriou kêr, daouzeg laer a oa eno, en eur prizon, o hortoz bezañ laketa d’ar maro, o kleved kan an dud o vond da heul ar horv, a z en em ouestlas d’an eskob santel, o houlenn o delivrañs. En eun taol, an tour ma oant ennañ a faoutas euz traoñ beteg kreh, ha dre ar faout, al laeron a hallas en em zachañ er-mêz, hag a yeas war-lerh ar horv beteg an iliz.

Sant Melani a zo patron d’eur barrouz euz Montroulez hag en-deus chapelioù en Plelauf hag en Plufur. Pedet eo evid terri ar gwalinier a gastiz.

Sant Emilion

C’hwezegved devez a viz Du

Hirie e reer ivez gouel sant Emilion. Evitañ da vezañ Breizad, ar zant-mañ ‘zo nebeud anavezet en Breiz, nemed e Logivi-Plougraz, e leh m’en-deus eun iliz euz ar haerrañ ; en Koadaskorn en-deus ivez eur chapel.

Ganet en Gwened, en eur renk dister, e plijas da gont ar vro-ze hag e oe kemeret gantañ da vevel-braz. Tud gwariziuze hen tamallas d’e vestr ; neuze e tilezas e garg hag e vro, hag eh eas da chom d’ar Sainthoñj, el leh a doug bremañ e ano hag a zo ken brudet dre e winiennou. Emilion a doullas ‘barz ar rohell eun ermitaj hag a zo bremañ souezusañ iliz a ouied da weled.

Eno e varvas goude bezañ bet Tad eun niver a venedh deredet da vevañ dindannañ.

Pedet eo on bro evid mired an eost diouz peb gwalenn.

Sant Vodez

Abad ; VI^{ved} kantved

Triwehved devez a viz Du

Modez, genidig euz Iwerzon, a oa, war a lavarar, mab d'eur roue bihan euz ar vro-ze. Adaleg an oad a zeiz vloaz e oe laketa en eur manati hag eno e teskas, e skeud skiantchou ar bed, skiant an Aotrou Doue. Goude bezañ tremenet 'mesk ar veneh e yaouankiz a-bez, e oe greet beleg da bemp bloaz warn-ugent ; prestig goude e oe laketa da bennrener war an oll veneh. E genvroiz, war a lavarar, a fellas deze kemer anezañ da roue ; mez Doue a roas da anaoud d'an oll, dre eur mirakl, ne oa ket greet sant Vodez da chom 'barz ar bed : en eun noz, ar hleñved a zistummas e dremm ken euzuz, ma souze an oll diwarnañ. Kerkent hag ankouaet o zoñj gand an dud, Doue hen lakaas adarre ken yah ha biskoaz.

Ar vosenn o vezañ kroget 'barz ar vro a gasas ganti e dad hag e vamm, e vreudeur hag e hoarezed ; eñ e-unan 'oe red dezañ mond kuit ; kemer a reas eur vag vihan, ha renet gand dorn Doue, e touaras en Breiz-Izel, gand daou euz e vignoned, sant Tudi ha sant Bodmael. Prezeg a reas enni Jezuz-Krist en eun doare helavar meurbed. Poblou diniver a zerede d'e zelaou.

Goude bezañ bet er Goz-Yeoded o weled sant Tual, hag en Landreger, o weled sant Ruelin, eh eas da chom war lez ar mor, er horn pellañ eru a barrouz Pleuvian, etre ar Joadi hag an Treo, el leh a anver bremañ Lanvodez. Ar vrud euz e zantelez a reas d'e-leiz a dud dond d'e gaoud. Pareañ 'reas tud notet o izili, tud dall, tud vouzar, tud eet an droug-spered enne. Gand yehed ar horv, e roe deze ivez yehed an ene.

Evid pellaad diouz trouz kasauz ar bed, a vire outañ d'en em rei d'an Aotrou Doue evel m'en-devoa c'hoant, en em dennas en eun enezenn ouez, eul leo bennag diouz an douar braz. Den ebed n'en-devoa gallet c'hoaz chom en enezenn-ze, kement a amprevaned louz a oa e-barz. Modez a reas ar riñs warneze, hag a zavas eun tammig ti-bedi gand eur peniti en-kichenn.

Kaer en-devoa bet tehel pell diouz an dud, c'hwez vad e zantelez a reas d'ar bobl kaoud e roudou, ha meur a hini a yeas da vevañ dindannañ, da zeski gantañ hent ar baradoz. Sevel a rejont o fenitiou tro-war-dro d'e hini, disparti an eil diouz egile. En kichenn, e savjont ivez eun iliz, ha pa oe peurachu, an abad santel a bedas oll eskibien Breiz da zond d'ober gouel e dedi

Tra souezuz, peniti sant Vodez, daoust d'an amzer fall ha d'ar hantvejou niveruz a zo tremenet warnañ, a zo c'hoaz en e zav ; greet eo en mên, mogeriou, toenn hag all. Anvet eo dre ar vro *Forn-Vodez*, abalamour m'eo savet evel eur forn. C'hweh metr uhelder a hell kaoud, ha daouzeg pazenn a zo da bignal e-barz. Eno e tremenas Modez ar rest euz e vuhez, o 'n em zantellaad e-unan, hag o santellaad, muiañ ma helle, kement hini a deue d'hen darempredi.

O vezañ kouezet klañv, e hourhemennas stard d'e veneh derhel da gared mad an Aotrou Doue, ha goude bezañ bet e zakramantchou, e tremenas en peuh, e zaoulagad o parañ war groaz On Zalver.

Sebeliet e oe e gorv en iliz an enezenn. Doue en-deus embannet e hloar dre galz a viraklou.

Tri-ugent iliz pe chapel a zo bet savet en Breiz-Izel en enor da zant Vodez ; goude sant Erwan, n'eus ket eur zant hag a vefe pedet muioh gand Breiz-Izeliz.

Sant Houardon⁵⁶

Patron Landerne

Naved devez warn-ugent a viz Du

Houardon a oe eskob en Leon. Bevañ a reas en amzer sant Gouenou, sant Tenenan ha sant Herve, ar manah dall. Genidig e oa euz a Vreiz-Veur, evel an darn-vrasañ euz an ebestel kaloneg a lakaas sklêrijenn ar feiz da zevel 'uz da Vreiz-Izel. Hervez ar pezh a lavar dim ar skridou koz, e renas eskopti Leon war-lerh sant Tenenan. Da gredi eo e termenas eur pennad bennag euz e vuhez war-dro Landerne, peogwir kristenien ar gêr-ze a gemeras anezañ da batron. Sant Tenenan, eskob Leon en e raog, a gare dond, beb an amzer, da vanati Beuzit, savet gand sant Gwenegon hag a oa o chom en-kichen Landerne, war hent ar Forest. Eno e ree e ziskuiz. Houardon a reas eveltañ.

Er mare-ze e oa Konomor⁵⁷ o paouez lakaad d'ar maro e bried Trifina hag e vab Tremeur. War houlenn Gwerok, roue Bro-Wened ha tad Trifina, oll bennou braz Breiz a 'n em zastumas war ar Menez-Bre, evid barn ar roue kriz ha fallagr. Sant Houardon a deuas kelou dezañ ivez da vond di, hag a gasas gantañ sant Herve, brudet-braz abalamour d'e furnez ha d'e zantelez.

Eno Konomor a oe distaget diouz an Iliz.

Eur wech taolet an eskumunugenn warnezañ, sant Houardon ha sant Herve a zistroas da Gastell-Paol. En eur zond d'ar gêr, ne oa ano gand ar manah dall nemed euz an traou kaer a zizoloe dezañ an Aotrou Doue. Sant Houardon a zelaoue anezañ gand plijadur hag a hoantaas gweled e-unan an traou dudiuz-se. En em gavet e Kastell-Paol, an daou zant a dremenat tri devez e yun hag o pedi ; d'an trede devez, war-dro kreisteiz, eun êl a lavaras deze sevel o daoulagad war-zu an neñv, hag e weljont êlez, arhêlez, sent ha sentezed ar baradoz, oll o veuli Doue. Ar gwel-ze ne badas nemed eun huñvre ; an daou zant en em lakaas rakal da ganañ ar psalm *Cantemus Domine*. An deiz war-lerh, sant Herve a zistroas d'e vanati, ha sant Houardon a dalhas da ren e eskopti evid ar gwellañ.

Sant Gwenou en-devoa savet eur manati tost da Vrest ; pa oa echu an iliz, sant Houardon a oe pedet da zond d'he benniga. Eun nebeud bloaveziou goude, an eskob santel a gouezas klañv, hag o kredi e oa arru ar maro gantañ, e halvas sant Gwenou da zond d'e gaoud ; goude bezañ bet digantañ e oll zakramantchou, eh anvas anezañ da bignad war e lerh war gador eskob Leon.

Sant Houardon a varvas war-dro ar bloaz 650 goude donedigez Or Zalver.

Chapeliou en-deus en Kamlez hag en Boulvriag. Pedet eo dreist-oll gand an dud a vor.

⁵⁶ Sant Houardon ; **notenn gand an oberour** : An aotrou chaloni Bail, genidig euz a Landerne, en-deus bet ar vadelez da rei d'an oberour an notennou a oa red evid ober buhez ar sant-mañ.

⁵⁷ Konomor : Klask an ano-ze. Meneget eo meru a wech.

Kentel

An eskumunugenn

Heb mar ebed, an Iliz he-deus gwir da lakaad he bugale en pinijenn pa dizentet outi

Notenn gand “Embann an Hirwaz : *se zo diktaturiez*

Ar skoaler en-deus gwir da lakaad er-mêz eUZ e skol ar bugel ne vefe ket evid doNE a-benn anezañ.

Notenn gand “Embann an Hirwaz : *n’eo ket gwir.*

Ar penn-tiegez en-deus gwir da gas euz e di ar plah pe ar mevel ne blij ket dezañ.

Notenn gand “Embann an Hirwaz : *n’eo ket gwir. (ar plah = ar vatez)*

Ar vro he deus gwir da harlui kement hini a glaskfe he gwerzañ.

Notenn gand “Embann an Hirwaz : *harlui ?*

Hag an Iliz hepken n’he-dije a wir da stlepel diwar he barlenn ar hristen n’eo ket mad dezañ senti outi ?

An dra-ze n’hell ket bezañ ; an Iliz evel an sosietou all, he-deus gwir da eskumunugi, ha dre an eskumunugenn eo he-deus diwallet ar gwir feiz, diarbennet an dizurziou, flatret an hereziou ha dispennet ar chismou.

Notenn gand “Embann an Hirwaz : *Gand an Iliz e vefe ar wirionez ?*

An Iliz he-deus gwir da eskumunugi, ha keit ha m’ah ey ar bed en-dro, e talho da skei dizamant, evid e brasañ mad, ar re euz he bugale a welo o heuill ar gaou, goude ma vefent an dud galloudusañ hag an dud gouiziekañ a vefe war an douar.

Sant Tual

Eskob (VI^{ved} kantved)

Kentañ devez a viz Kerzu

Tual a oa ganet e Breiz-Veur, bloaveziou diwezañ ar bempved kantved. Koupaia, e vamm ; a oa c'hoar da Riwall, an hini a zavas rouantelez an Dommone⁵⁸, en Breiz-Izel. En em denn a reas en e yaouankiz en eur manati, ha dond a reas abred da vezañ abad, gand e-leiz a veneh o vevañ dindannañ. Evel ma oa kalz a darempred, en amzer-ze, etre Breiz-Veur hag Iwerzon, eh eas d'ober eun dro er vro-ze, ha chom a reas enni eur pennad. War-dro ar bloaz 515, ar Vretoned a deuas niveruz en Bro-Arvor. Tual a heuillas ivez e genvroiz hag a reas e ziskenn en Konk-Leon, gand e veneh hag e-leiz a dud all. E-touez ar re-mañ e oa e vamm Koupaia, e hoar Seva hag eun intañvez santel, heh ano Mahelhen, a walhe dillad ar veneh. Mond a reas da chom eun hanter-leo en douar braz, el leh a anver bremañ Trebabu⁵⁹, ha bezañ en-devoa eno, digand Derok, mab Riwall, peadra da zavel eur manati :mez ne chomas ket pell amzer. O weled pegement a ezomm o-devoa an Arvoriz da vezañ kenteliet war gwirioneziou ar reiljion, en em lakaas da gelenn aneze, gand sikour daouzeg euz e veneh. Treuzi a reas Bro-Leon euz an eil penn d'egile. Redeg a reas an Dommone a-bez. Prezeg a reas dre-oll komzou Doue, ha war e roudou e tiwane ar miraklou⁶⁰. Gonid a reas e-leiz a Arvoriz da Jezuz-Krist ; sevel a reas kement a ilizou hag a vanatiou, ma haller lavared eo bet abostol brasañ ar relijion gristen en Breiz-Izel. E-touez ar veleien zantel a roe ar miuañ dorn dezañ, e kavom Laouenan⁶¹, Ruelin, Kireg ha Briag. Kaerrañ manati a zavas a oe hini Landreger, hag eno eo e karg bezañ an aliesañ.

Er mare-ze, Konomor a oa o trei fall. Da varo Iona, mab Derok, e timezas d'e bried hag e klaskas lazañ e lezfab Judual. A-drugarez Doue, e oe gallet kas ar priñs yaouank en kuz da Bariz, da lez Childebert. Tual a 'n em gave neuze da vezañ toatañ kar ar roue Riwal, en Breiz-Izel. A-walh 'oa evid ma vije en hent ha golo da Gonomor ; hemañ ne gredas ket e lazañ koulskoude ; kas a reas, avad, unan euz e vignoned, ar Ru, da haillosaad⁶² anezañ miuañ ma hallje. Tual a ziskennas neuze en Bro-Wened. Eno e kavas Albin, eskob Angers, a 'n em ginnigas dezañ da vond da gaoud Childebert, da houlen skoazell ouz e enebourien. Tual, eme Laouenan, a yeas da Bariz, gand an aotrou Albin ha daouzeg deskibl ; eno e reas meur a vuzud.

Rei a reas ar vuhez d'eun den maro. Kaset e oa kelou da Childebert euz ar pez a hoarveze, ha hemañ a bedas raktal Tual da zond d'e gad gand e zeskiplien ; e-pad ma oant en o zav en e gichenn, eur goulm a ziskennas euz an neñv war skoaz an abad santel. Neuze ar roue a anavezaz e oa eur zant dirakañ ; stoui a reas d'e dreid, eñ hag ar rouanez, hag oll dud e lez. Goulenn a reas digantañ petra 'glaske. Tual a lavaras : « Ne houlenan nemed eun dra, ma hellin mired didrouz, me ha ma meneh, ar peadra a zo bet roet dim gand tudjentil ar vro. »

Childebert a roas e her d'e zivenn, ma vije ezomm, hag a hourhemennas e zakri eskob. Goude, Tual a zizroas adarre da Landreger, leh ma hallas bevañ didrouz ar rest euz e vuhez. E varo a zegouezas war-dro ar bloaz 564. Sebeliet e oe en iliz e vanati, hag ar miraklou a hoarvezas en-dro d'e vez a embannas e vadelez.

⁵⁸ Dommone : **notenn gand an oberour** : Ar rouantelez-se a yee, adaleg ar ster Kouesnon, en Bro-Dol, beteg Penn-ar-Bed. Breiz-Vihan, tu an hanternoz penn-da-benn, a oa eta oh ober anezi.

⁵⁹ Trebabu : **notenn gand an oberour** : Pabu pe bap, da lavared eo,tad, a oa eul lesano roet da zant Tual.

⁶⁰ e tiwane ar miraklou : **krennlavar** : Pep sant nevez en-deus e viraklou d'ober.

⁶¹ Laouenan : **notenn gand an oberour** : Patron Treflaouenan, en Gorre-Leon.

⁶² haillosaad : stummet war "hailloñ".

Sant Tual a zo pedet ouz an droug-skevent hag evid pellaad ar gwalinier a gastiz. Bezañ eo patron kêr hag eskopti Landreger, patron Pabu, ha patron Langoad ; a-unan gand e vamm, emañ eno he bez.

Bezañ 'n-eus, pe en-deus bet, chapelioù e-leiz dre ar vro : en Bear, Beurlidi, Logivi, Plistin, Plouared, Plougoñver, Plounevez-Moedeg, Peurid, Prad, Kemper, Senven, Trabriant, Tregrom, Tregidel, TYrezelan, Plouganou.

Kentel

Bremañ n'eus ken a viraklou

An dra-ze n'eo ket gwir. *Miraklou a zo c'hoaz*. Dalhmad e klever ano euz a unan pe unan, a-gleiz hag a-zehou. Kement a hoarvez aneze bep bloaz, en Lourdes, ma haller lesenvel ar gêr-ze, "Kêr ar Mitaklou".

Miraklou a zo eta, hag e-leiz, hag en meur a leh ; hag en meur a zoare.. *N'eus ket kement ha gwechall*, gwir eo. Gwechall, prezegeien ar feiz a ranke lakaad ar miraklou da zigeri hent d'o homzou. Ar Judevien a oa ken penneg hag ar baganed ken diroll, ma n'o-dije ket kredet biken e oa relijion Jezuz-Krisr ar gwir relijion, panevert ma teue ar miraklou da zigeri deze o daoulagad.

Miraklou a zo eta, ha ma n'eus ket kement ha gwechall, eo *abalamour ma n'eus ket a ezomm aneze bremañ, hag a oa gwechall*. « Pa blanter gwez yaouank, eme sant Gregor, e touarer aneze, ahann ma vez krog o gwriziou, mez kerkent ha ma vezont stag mad ouz o douar, e paouezer d'o दौरa. »

Evel-se, dour ar miraklou a goueze puill, en amzer goz, war gwezenn ar feiz p'oa nevez plantet gand On Zalver Jezuz-Krist ; bremañ avad, p'eo en em ledet ken stank he gwriziou en pevar horn ar bed, n'halla birviken bezañ diskaret, gand se ar miraklou a vezo muih distank.

A-walh e vezo, koulskoude, ha kement hini a zello ouz tal an Iliz a welo emañ ganti ar wirionez. Ne vije ket bet en he sav, kemend-all a vrezel a reer dezi, panevert m'emañ Doue, ouz he harpañ. N'eus ken nemed ar re a stank o-unan o daoulagad, evid mired ouz ar sklêrijenn da vond enne, a gement a lavar n'ouzont ket en pe tu trei war hent ar vuhez.

Notenn gand Embann an Hirwaz : Krennlavar : Pep sant nevez en-deus e viraklou d'ober.

Sant Alar pe Eler

Eil devez a viz Kerzu⁶³

Eskob Noyon (*** - 659)

Alar a oa ganet e Chatelak, diou leo diouz Limoj, war-dro ar bloaz 588. E dud a oa pinvidig ha vertuzuz, ha savet e oe gante e doujañs Doue. Evel ma oa eur paotr dornet mad, e oe kaset da Limoj, da zeski bezañ orfebrer, hag e teuas buan da vezañ dispar war e vicher.

Kloter II, roue Pariz, o vezañ klevet ano anezañ, hen galvas da vond d'e lez, hag hen kargas d'ober dezañ eun tron aour. Alar a reas daou, e-leh unan, gand an danvez a oe roet dezañ. Ar roue a oe souezet o weled kaerder al labour hag onestiz ar micherour. Diwar neuze, Alar a chomas en Pariz, hag eno e talhas da labourad war e vicher. Gweled a reer e ano war ar peziou aour a oa greet en amzer-ze ; mez e vrasañ plijadur 'oa ober archedou da lakaad relegou ar zent.

Prest goude ma teuas da chom da Bariz, e reas eur govesion jeneral, hag e kemeras ar mennoz stard da ren eur vuhez kristennoh evid en-devoa greet beteg neuze. Pa ranke mond dirag ar roue, e touge dillad seiz, med dindanne e veze gantañ eur zae reun. Rei a ree d'ar beorien kement en-dije digand ar roue. Pa deue diavêzidi da houlenn peleh e oa o chom, e veze respontet deze : « N'ho-peus nemed mond d'ar ru-mañ-ru, ha p'en em gavfet gand eun ti a vezo eun toullad peorien e-tal e zor, e hellfet lavared : « amañ eo. »

Ober a ree eur bedennig bep gwech ma'h ee euz ar gêr ha bep gwech ma tizroe. Da varo Kloter, e vab Dagobert a dalhas da gaoud ennañ ar fiziañs en-devoa e dad. Goulenn a ree e ali war aferiou brasañ ar Gouarnamant, ha war an traou a zelle outañ e-unan. Alar a gemere e dro ahane evid trei ar priñs war ar justis, an douster hag ar relijion. Tud al lez, o weled pegen arru mad e oa gand ar roue, a gemeras droug outañ, hag a zavas gwall gomzou en e eneb. Dagobert, e-leh selaou an teodou fall, a garas muioh-mui an den santel., hag a skuillas e vadoberou warnañ gand muioh a largentez. Alar, avad, ne oe tamm 'bed pinvidikoh evid kelou-ze ; kreski a reas e aluzennou :rei a reas d'al leanezed eun ti kaer en-devoa en Pariz, ha lakaad a reas sevel abati Solignac, diou leo diouz Limoj, evid meneh euz a Luxeuil.

En amzer-ze, Dagobert a 'n em gemeras ouz Judikael, roue Breiz, war digarez m'oa bet eun toullad Bretoned oh ober eun tamm tro war zouarou e rouantelez. Sant Alar a deuas neuze en Breiz ha, dre e gomzou fur, e lakaas ar peuh etre an daou briñs. Judikael hag e-leiz a aotrounez vraz euz Breiz a yeas da heul sant Alar, da weled ar roue Dagobert, da Greill. Eno e oe sinet ar peuh etre an daou rouantelez (636).

Tri bloaz goude, da varo Aker, eskob Noyon ha Tournay, Alar, daoust ne oa ket c'hoaz den a Iliz, a oe anvet da gemer e garg. Sakret e oe en Rouen, er memez devez gand e vignon sant Ouan, d'ar zul a-raog ar Yaou-Bask (640).

Bezañ e oe eun eskob euz an dibab, ha n'en-devoa preder gand netra nemed gand silvidigez an eneou. Tud e eskopti, e-leiz aneze, a oa c'hoaz divadez p'en em gavas en o zouez : en em lakaad a reas d'o helenn. Diskouez a ree dreist-oll e deneridigez evid ar re a chome pell d'ober skouarn-vouzar outañ ; mond a ree da weled o zud klañv, hag o hennerzi a ree en o ankeniou. A damm da damm, an dud gouez-se, o weled madelez an eskob santel, a garas anezañ, hag a deuas da gemer skwer warnezañ : ar re a veze gonezet a labore da honid ar re all, hag e vezent gwelet neuze o terri o idolou, o tiskar o zemplou hag o vond da houlenn ar vadeziant.

⁶³ Eil devez a viz Kerzu : **notenn gand an oberour** : E ouel a vez greet en Iliz, pe d'an deiz kentañ a viz Kerdu, pe d'ar bemp warn-ugent a Vezeven.

Sant Alar a zo enoret braz en on bro ; eur barrouz aq zo en eskopti Sant Brieg hag a doug e ano ; meur a skeudenn en-deus en on ilizou ha chapelioù ; pedet eo evid ar hezeg.

Sant Beuzeg, abad Lavret ha sant Beuzeg, eskob Dol.

V^{ed} ha VI^{ed} kantved

Naved devez a viz Kerdu

Daou zant a zo bet en on bro o tougen an ano a Veuzeg ; unan aneze a vevas er bempved kantved hag egile er c’hwehved. Sant Beuzeg ar bempved kantved eo a zavas en enezenn Lavret⁶⁴, war-dro ar bloaz 460, ar hentañ manati⁶⁵ a zo bet ano anezañ en Breiz-Izel. Di eh eas Gwennole d’ar skol, da zeiz vloaz, hag eno e chomas beteg e vloaz warn-ugent.

Eun devez, an abad santel a deuas ezomm dezañ da vond d’ober eun dro d’an douar braz, hag a hourhemennas d’e baotred-skol diwall d’ober droug ebed : « Ya ! ya ! Tad, emeze, bezet dineh ! » Mez a-veh ‘oa eet an abad en-dro, m’en em lakjont da redeg a-dreuz an tevenn, hag unan aneze a dapas eul lamm hag a dorras e har. Neuze e savas gouel⁶⁶ : « Petra ‘refom bremañ ? eme ar baotred. Peleh tehel ? Dizentet on-deus ouz on tad. Dismegañs on-deus greet, n’eo ket hepken dezañ, mez d’an Hini emañ o terhel e blas en on hichenn ! »

A-drugarez Doue, Gwennole a gavas an tu da bareañ ar har dorret, hag en doare-ze den ne glevas trouz.

Setu amañ gourhemennou abad Lavret d’e zeskielien :

« En em roet d’ar *studi*, ha bezet izel a galon. Arabad deoh tennañ lorh euz ho teskadurez ; rag Doue eo en-deus roet deoh ar pezh a ouzoh.

Labouret gand ho korv, hep klask tennañ meuleudi an dud war ar pezh a refet, hag heb ober dismagañs war an hini n’anavezfe ket ho micher. An den dizesk a zo krouet gand Doue, koulz hag ar micherour gouizieg. Aliez an neb a zo barreg diouz eul labour en-deus ezomm euz e nesañ evid eul labour all. Rag ne gredan ket e kroufe Doue eun den heb ma vefe gouest d’ober eun dra bennag. Ma ouzoh diou pe teir micher da honid ho para, n’ho-peus nemed trugarekaad Doue d’ober.

Erfin, bezet war evez, yunet ha *pedet* hervez giz an Tadou ? N’am-eus netra ken da lavared deoh. Ma heuillet an tri gourhemenn-ze, e valefet heb faziañ war hent ar zantelez. »

Abad Lavret a varvas en bloaveziou diwezañ ar bempved kantved.

Sant Beuzeg, ar c’hwehved kantved, an hini a reom e ouel hirie, a oa mab da Azenor ; gouarn a reas eskopti Dol war-lerh sant Magloar, e-pad tregont vloaz, adaleg ar bloaz 570 beteg ar bloaz 600. Patron eo da Borspoder, da Blourin, da Veuzeg-Kap-Sizun, da Veuzeg-Konk, ha da Dregarvan.

⁶⁴ enezenn Lavret : E ma an enezenn-ze e reter da enez Vriad.

⁶⁵ ar hentañ manati : **notenn gand an oberour** : An dismantrou anezañ a zo bet dizoloet er bloaz 1890, gand an aotrou ‘n abad Lasbleiz, genidig euz a Vriad.

⁶⁶ e savas gouel : ? e ouelont (?)

Sant Envel

Unnegved devez a viz kerdu.

Hirie e reer ivez gouel an daou zant Envel, daou vreur, o-daou abaded, a ziskennas en Arvorig, gand o c'hoar Yuna, en kerz ar VI^{ved} kantved. Sevel a rejont peb a beniti en koajou Koad-an-Noz hag eno e vevjont didrouz ahann ma teuas Doue d'o herhed.

Ar hosañ euz an daou vreur a oa e beniti 'leh mañ bremañ iliz koant Lok-Envel ; ar yaouankañ 'oa e hini 'leh 'mañ hirie Chapel ar Hoad, war douar Benah ; santez Yuna 'oa o chom en Plounevez.

Pardon sant Envel yaouank a vez greet ar zul kentañ a viz Gwengolo ; hini e vreur, patron Lok-Envel, ar zul war-lerh an 11 a viz Kerdu.

Sant Envel a zo pedet evid diwall al loened diouz ar bleidi ha diouz ar hleñvejou.

Sant Korantin

Kentañ eskob Kemper

Daouzegved devez a viz Kerdu

En amzer gwechall, en koad Neved, en-kreiz Bro-Gerne, e veve daou vanah, unan koz hag unan yaouank : Primel ha Korantin.

An hini koz, Primel, dre n'en-devoa feunteun ebed en-kichenn e lochenn, a ranke ober eur gwall bennad hent bemdez, en eur jilgammad, evid mond da gerhad dour.

An hini yaouank, er hontrol, en-devoa eur feunteun euz ar re sklêrrañ harp ouz e beniti, hag eur pesk burzuduz e-barz. Bemdez, war a lavarere, e trohe eun tamm anezañ, hag a-benn an deiz war-lerh, e veze adarre en e bez. Eur wech ma oa Gralon, roue ar Gerneviz, o chaseal al loened gouez, e tegouezas gantañ en em gaoud, skuiz-marro ha naon du dezañ, dirag peniti sant Korantin. Ar manah a aozas d'ar roue eun tamm euz e besk. Gralon, dre anaoudegez vad, a roas neuze d'ar manah santel al lodenn euz ar hoad braz a deuas da vezañ diwezatoh parrouz Ploudiern, en harz ar Menez-Hom. Kaerroh a reas : kas a reas ar manah da Dour⁶⁷, hag e oe sakret eskob war Bro-Gerne. Pa zizroas da Gemper, Gralon a lezas gantañ e balez da zervijoud a iliz.

« Tier sklêrijenn gaer, a lavar eur skrivagner koz, a baras neuze 'uz da veneziou Bro-Gerne, pa oa Gralon, Korantin ha Gwennole o terhel enni ar renk kentañ.

Gralon 'oa ar roue ; gouarn a ree gand furnez an Argoad hag an Arvor. Korantin 'oa an eskob ; terri a ree sehed ar bobl o rannañ etrezañ⁶⁸ evaj prisiuz ar feiz. Gwennole eo ar manah, ha dre e vertuziou dispar e veritas bezañ lesanvet tad ar veneh. »

Korantin a varvas en fin ar bempved kantved. En e iliz-veur, en Kemper, e virer c'hoaz eun askorn braz euz e vreh.

⁶⁷ Dour : Tours, e-kichenn ar ster Loire.

⁶⁸ etrezañ : "etrezañ" er skrid orin. Gwregel eo "ar bobl" : "etrezi", pe e vefe al liester "ar poblou", he neuze "etreze".

Sant Yann diarhen

Euz a Urz sant Frañsez

Ganet e Sant-Nouga er bloaz 1280 ha marvet en Kemper er bloaz 1349

Ar zant-mañ a zo euz tri eskopti : euz hini Leon, dre ‘mañ ennañ parrouz e vadeziant ; euz hini Roazon, dre ‘mañ ennañ ar barrouz e oe person enni ; hag euz hini Kerne, dre ma tremenas ennañ e vloaveziou diwezañ. Genel a reas e Sant-Nouga, en Gorre-Leon, er bloaz 1280, ha roet e oe dezañ, da zeiz e vadeziant, ano an aotrou sant Yann, embanner braz ar binijenn.

Bloaveziou laouen e vugaleaj a dremenas evel eun huñvre.

Gwelet e vije, dre lanneier ha koajou don e vro, o c’hoari, drant ha seder, gand bugaligou all e oad. N’en-devoa nemed selled ouz ar re a valee en e raog war hent ar vuhez, evid gouzoud an tu da gerzed eeun war-zu an neñv.

‘Dal ma oa krennard, eh eas da zeski bezañ mañsoner gand eur henderv dezañ, ha buan e teuas da houzoud e vicher. Pa halle kaoud pontchou d’ober war ar steriou ha kroaziou da zevel er hroaz-hentchou, e veze en e vleud. Gallet en-dije en em denn brao ‘barz ar bed ; mez da ugent vloaz, e oe galvet gand Doue evid bezañ silvidigez e-leiz a dud, ha sentuz ouz mouez an Aotrou, en em lakaas raktal en penn an hent da vond da veleg. E genderv a reas kement a oa en e halloud evid e ziarbenn. Yann a yeas neuze da Roazon, hag eno, goude bezañ greet e studi, e oe beleget. Striz ‘oa ar vuhez a rene. Yann a ree teir gwech er zun diwar bara ha dour ; e zillad, heb bezañ diskempenn, a veze paour ; gweled a ree ar re glañv, ha skuill a ree madoberou en-dro dezañ. Anvet e oe da berson en Sant-Gregor, tost da Roazon. Eun tad ‘oa evid e bobl ; ober a reas dezañ⁶⁹ eur vad dispar, ken dre e gomzou, ken dre e skweriou ; n’en-devoa ket eur gwenneg evitañ e-unan. Pa veze an aotrou ‘n eskob oh ober tro e eskopti, person Sant-Gregor a veze en e raog, euz an eil parrouz d’eben, da lakaad ar vugale en stad da reseo sakramant ar Goñfirmasion, ha bepred e ree e hent war droad ha diarhen. Ahane eo e teuas an dud da d’e lesenvel Yann Diarhen.

Goude bezañ renet e barrouz e-pad trizeg vloaz, eh eas, gand bennoz e eskob, da wiskañ sae sant Frañsez, da Gemper. Ma kare ar baourentez en keid ma oa person, he haras muioh c’hoaz adaleg an deiz-se. Ar fallañ dillad a veze mad evitañ, ha pa vije goulennet digantañ perag e kare bezañ gwisket ken dister, e lavare e oa mad a-walh ar saeou fallañ evid eur manah hag a oa ken pell hag eñ diouz an aotrou Doue.

Dre n’halle ket e-unan rei kalz a zikour d’an dud ezommeg, e troe, gwellañ m’halle, ar re bonvidig d’hen ober, hag e lavare deze :

Ar gwenan ‘zastum mel, ar paour aluzennou ;

Gret aluzenn d’ar paour, da gad mel en neñvou.

Ne golle ket eur pennad euz e amzer ; pa ne veze ket o labourad, e veze o pedi ; dre e bedennou e roe d’e nesañ yehed ar horv hag an ene. Gand aon n’en em glevje re vad a dechou fall hag an droug-spered, evid e zougen d’an droug, e kastize e gorv dre binijennou kaled. Chom a reas c’hwezeg vloaz heb evañ banne gwin, nemed ouz an aoter, hag heb debri tamm kig, nemed gourhemennet e vije dezañ. Bara heiz, pe gerh, ha fao ‘oa e vagadurez pemdezieg. Ober a ree eta koaraiz er bloaz ; dougen a ree rochedou kanab, gwelloh da gignal eun den evid d’e wiskañ.

Doue a roas anaoudegez dezañ euz an amzer da zond. Gweled a reas ar penn kentañ euz brezel Charlez Bleiz ha Montfort. En Kemper e oa pa oa laketa seziz wargêr (1345), pa oa skoet gand ar gernez er bloavez war-lerh, ha pa grogas ar vosenn enni, tri bloaz goude. E-pad

⁶⁹ dezañ : er skrid orin. “e bobl”, dezi... “e boblou”, deze.

ar hleñved staguz-se, e oe eun êl evid Kemperiz : noz-deiz e veze war-dro ar glañvourien, ha mervel a reas en o zouez, goude bezañ roet ar pep gwellañ euz e vuhez d'ar bedenn ha d'ar binijenn. Nao bloaz ha tri-ugent bennag e oa ; e-pad an oll amzer en-devoa tremenet en manati Kemper, ne oa ket eur *pik* en e reolenn ha n'en-dije ket heuillet, hag a-walh eo kement-se evid bugale sant Frañsez, eme ar pab braz, evid ma hqallfed lakaad o anoiou war roll ar zent.

Noblañs ar vro a houlennas dougen war o diouskoaz korv sant Yann Diarhen d'ar bez, hag ar bobl a oe mall ganti kregi war gement tra a oa bet dezañ. Ar burzudou a reas goude e varo a greskas c'hoaz ar vrud euz e zantelez hag ar fiziañs en e halloud.

Notenn gand an oberour : Er bloaz 1792, e relegou a oe kaset en koach da Erge-Armel ; miret e oent gand doujañs gand an aotrou Loëdon, mêr ar barrouz-se, beteg ma teuas ar peuh ; neuze e roas aneze d'e iliz-parrouz. Er bloaz 1842, an aotrou 'n eskob Graveran a hallas kaoud darn euz relegou ar penn, evid e iliz-veur. O mired a reer gand enor a-dreñv kein an aoter-vraz, en-kichenn skeudenn ar zant, hag e-leiz a dud a vez eno o 'n em erbedi outañ. Pedet e vez dreist-oll evid bezañ dilivret diouz ar boan-benn hag evid kaoud an traou kollet.

Kemperiz o-deus e lesanvet "ar zantig du". Al lesano-ze a zo bet roet dezañ abalamour m'oa bet livet en du, eur pennad, ar skeudenn goz en-deus en iliz-veur Kemper.

An aotrou Duparc, dre eul lizer kaset gantañ da oll veleien e eskopti, ar 17 a viz C'hwevrer 1910, a ro da anaoud eo digor e brosez en Rom ; fiziañs en-deus, emezañ, e hallfom lavared hebdale, en on ilizou, e ofis hag e overenn. En doare-ze, Sant Yann Diarhen a vezo ar zant kentañ euz eskopti Kemper ha Leon hag a vezo bet anavezet dre e ano hag e vuhez, hag embannet e zantelez gand ar pab.

Sant Judikael

Roue Breiz (***) - 650)

Seitegved devez a viz Kerdu

Judikael, mab henañ Judael, a zo unan euz Bretoned arVII^{ved} kantved o-deus lezet ar muiañ brud vad war o lerh.

*E vreh a oa dir,
e galon a oa aour ;*

Penn kentañ ha penn diwezañ e vuhez a dremenas en manati Gael. E-pad ma oe war an tron, ar vro a oe e peuh. Diou wech, koulskoude, e rankas ober brezel evid diarbenn ar roue Dagobert a felle dezañ lakaad trujou war ar Vretoned, ha diou wech e honezas.

« Hegarad evid e vignoned, a lavar dim eur skrivagner koz, Judikael a oa didruez evid e enebourien, dreist-oll evid ar Hallaoued. Aliez e stourmas oute ha bep taol e ledas aneze war an dachenn.

Ober a reas, hag eñ c'hoaz yaouank-flamm, traou souezuz ha ne oa ket eun den en-kreiz an oad gouest d'ober aneze.

Gwelet eo bet aliez, e-unan-penn ; o rei lamm da veur a enebour war an dro.

Evel ar meder a sko war an ed a vez en e leur, evel-se, pa veze krogad, Judikael, brezelour gallouduz ha kaloneg, a skoe kaled er stourmad, ha gouzoud a ree lakaad a-daoliou birou da skei e leh ma kare.

Evel ma red ar gwennili war-lerh ar gwenan, evel-se, pa veze krogad, Judikael, brezelour skañv, iskuit ha kreñv, a rede war-lerh e enebourien.

Meur a lamm a roas d'ar H Dagobert, o weled n'halle ket dond a-benn euz arVretoned, a zegasas sant Alar da gaoud ar roue. Alar ha Judikael n'o-devoe ket a boan o 'n em glevet. Mond a rejont o-daou da Vro-Hall. Roue Breiz a ginnigas profou braz da Zagobert, hag hemañ a roas re vrasoh c'hoaz da Judikael. Pedi 'reas anezañ, zoken, da chom gantañ da leinañ ; mez Dagobert a rene er mare-ze eur vuhez fall, hag abalamour da ze, Judikaelne fellas ket dezañ mond da zebri ouz e daol.

Ober a reas e ziskenn en ti sant Ouan, mignon sant Alar, a oa neuze an tostañ d'ar roue, hag a oe, prest goude, anvet eskob en Rouen.

Dizro d'e rouantelez, Judikael a implijas e oll amzer d'ober vad d'an ilizou ha d'ar bobl. O chom e veze pe en Talensak, pe en Pempoull, pe en Mahon, en koad Brekilien.

Eun devez, a lavar ar re goz, o tremen en eun hent, tost d'unan euz e gestell, e tegouezas gantañ eun den lor, azezet e-tal eur ster, o hortoz unan bennag d'e gas en tu all. Judikael hen sammas war e varh hag a reas dezañ treuzi an dour.

Kerkent, e-leh eur paour kêz klañvour, e kavas dirakañ eun den kaer : « Eüruz oh, Judikael, emezañ, dre m'ho-peus kemeret truez ouzin. Me ivez, eun deiz da zond, a raio degemer mad deoh em rouantelez. »

An Aotrou Doue e-unan eo en-devoa sikouret.

Judikael a wele aliez Malo, ha labourad a reent neuze d'en em zantellaad an eil egile. E-leiz a vanatiou a lakaas sevel en e rouantelez ; hini Pempoull eo ar brudetañ aneze.

Pa welas an urz vad hag ar justis o ren en-dro dezañ, e laoskas stur ar gouarnamant gand eun all. Hag tizroas d'ar manati en-devoa tremenet ennañ e yaouankiz. Eno e varvas en peuh, ar 16 a viz Kerdu 650.

Sant Briak

Abad (VIved kantved)

Trihweheved devez a viz Kerdu.

Notenn gand an oberour : Gouel sant Briak a zo ar 17 a viz Kerdu ; abalamour da ouel sant Judikael eo laket an 18.

Sant Briak a oa ganet en Iwerzon, euz a dud pinvidig hag a renk uhel. Adaleg e vugaleaj, e kare ar furnez, ha dre ma kreske en oad, e kreske ivez enni. Desket kaer hebdale, e oe laket gand e dad en palez ar roue ; mez an den yaouank, ha ne hoantae nemed eun dra, “bezañ eur hristen mad“, a dehas ahane, hag a deuas a-dreuz ar mor da Vro-Zaoz, beteg eur gêrig tost d’ar manati a oa ennañ sant Tual, abad.

Degemeret e oe raktal ha gwisket, hag adaleg neuze e teuas da vezañ skwer an oll dre e vertuziou, e binijennou hag e bedennou.

Daou vloaz goude, Doue a hourhemennas da zant Tual dond en Breiz-Izel. Dibab a reas d’hen heuill deg manah ha tri-ugent, ha sant Briak a oa en o zouez.

Meur a di a bedenn a zavas sant Tual en on bro. Kemer a reas da vond gantañ en e veajou, Ruelin, Briak ha Lovean pe Laouennañ. Da gentañ eh ejont o-zri da zaludi ar roue Derok, breur pe genderv kompez da zant Tual. Derok a roas d’e vreur traonienn Treger evid ober enni e vanati braz. Tual hen trugarekaas, hag en eur vond kuit, e lezas gantañ, war e houlenn, sant Briak, evid sevel eur gouent en-kichenn ar maner en-devoa Derok war ar mêz, ‘leh ‘mañ bremañ parrouz Boulvriag. Sant Briak a zentas ouz e abad santel hag a vanas en palez ar roue. Derok hen lezas da glask ha da zibab al leh a garje evid sevel ar manati nevez.

En eur horn euz ar hoad, en eul leh distro, ha war-dro eur hard-leo euz ar maner, e lakaas sevel eur chapel vihan, da hortoz da gaoud peadra d’ober eur gouent. Ar chapelig-se, kentañ iliz bet savet gand sant Briak a oa kinniget gantañ d’an Itron Varia, hag heh ano eo Itron Varia ar Bod-Fao. Eno, dre vuzud, e plomas euz an douar eur feunteun dour sklêr, e leh ma teuas e-pad pell amzer ar belerined d’evañ ha da houlenn grasou.

Dre ma wele ar veneh o vond bepred war greski, en-dro da Vriak, ar roue Derok a reas diskar al lodenn euz ar hoad dibabet gand ar zant evid sevel e vanati. A-benn ugent miz e oa ar gouent e he sav. An abad santel hag e oll veneh a yeas neuze da chom enni. Evel-se e savas bourh Boulvriag deut hebdale da vezañ heñvel ouz eur gêr vihan.

Sant Briak, hag a zoñje gantañ bezañ dilezet ar bed evid mad, a oe souezet o weled e teue an dud muioh-mui d’hen kaved, da houlenn aliou ha pedennou digantañ. Felloud a reas dezañ kuitaad al leh-se. Rei a reas karg euz ar gouent d’eur manah parfet ha santel, hag e pellaas donnoh er hoad. En eur horn distro, war eur grehenn, koad uhel warni, e savas eun tammig ti evitañ e-unan hag eur chapelig da bedi. Ahane e teue, eur wech an amzer, da weled e veneh, ha goude e tistroe d’al leh kuz a blije dezañ dreist ar re all.

Nag a zen klañv a bareas ! Nag a vuzud a reas en peb feson etre e beniti hag ar manati ! Kontet e vent 70 c’hoaz dre ar vro. Mez ar zant, gand aon na deuje an droug-spered d’hen gonid dre lorch, a dehas adarre. Mond a reas tre beteg Rom, evid goulenn bennoz ar pab ha daoulinañ war beziou an Ebestel sant Per ha sant Paol.

Pa arruas war e giz, e veneh hag ar bobl a oa ouz hen gortoz, hag ober a rejont dezañ eun degemer dispar. Evel biskoaz e kouezas ar burzudou euz e zorn, n’eo ket hepken war douar al

Leo-Dro71., med hed-a-hed d'ar veaj a reas d'ar Goz Yeoded, 'kichenn Lannuon, da weled eskob Lexobl, hag ahane da Landreger da weled ar veneh all euz e Urz.

Goude eur vuhez ken santel, Doue en-devoa da rei d'e zervijer fidel eur gurunenn gaer. Arru 'oa koz, ha dinerzet gand e labouriou hag e binijennou. Kouezañ 'reas klañv en e vanati, e Boulvriak. O weled e tostae e dermen diwezañ, a halvas e veneh, e vreudeur oll en-dro d'e wele. Neuze e falvezas dezañ komunianñ ha bezañ nouet dirake. Rei a reas deze, goude e genteliou, e aliou diwezañ, hag e savas e zorn evid rei dezo e vennoz. Neuze e taolas e zaoulagad war ar Hrusifi a oa ouz treid e wele, ha goude bezañ komzet eun nebeud amzer a vouez uhel, gand karantez ha devosion, ouz on Zalver stag ouz ar groaz, e ene santel a bignas d'an neñv, ar 17 a viz Kerdu, er bloaz 627.

E gorv a oe sebelieten-kichenn an aoter vraz, en iliz e vadeziant, ha Doue en-deus diskouezet e oa Briak eur zant, dre ar miraklou en-deus greet en amzer dremenet hag a ra c'hoaz bemdez en-keñver ar re a deu da bedi war bez an abad santel. An dud kêz a gouez en droug-sant, ar re a zo troet o spered, ar re a zo boazet d'an droug-penn, a vez pareet, peurvuiñ, goude ma vent bet o pedi war ar bez, ha ma vez lakaet war o fenn relegou sant Briak.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Rostren.

En miz Kerdu, er bloavez 1300, eur burzud braz a hoarvezas e kêrig Rostren. En harz mogeriou he hastell-kreñv, e oa eur vodenn roz gouez hag a oa deut, nevez 'oa, da daol he glazur hag he bleun da viz Kerdu, evel en-kreizmiz Mae.

An dud a estlammas ; aotrounez Rostren, o chom er hastell, a reas toullañ en-dro d'ar blantenn. Kavet e oe dindanni eur penn gwerhez dero, hag an oll , ouz e weled, a stouas gand levenez ha doujañs vraz da zaludi Mari, Mamm Doue.

Abaoe pegoulz ha dre benaoz en em gave eno ar skeudenn-ze ? Den ne ouie ; marteze 100 vloaz 'oa, abaoe amzer an Normaned, pa rankas ar Vretoned tehel a-raog an dud gouez-se, 'n eur gas gante, pe en eur guzañ en douar, skeudennou ha relegou o zent. Bepred zo, Rostreniz, ha Kerneviz gante, a ziskouezas dezi joa vraz hag a gasas hebdale a-bell bro brud Gwerhez ar "roz-dremen".

Ar belerined a deredas euz Argoad hag Arvor, da chapel ar hastell, e leh ma oa bet douget. Eur feunteun a oa strinket e-barz ar bod roz ; etre ar chapel hag ar feunteun-ze, burzudou stank a hoarvezas hag a lakaas mui-ouz-mui ar bres war ar gristenien da zond da houlen skoazell an Itron Varia.

Gwelet e oe, euz an eil kantved d'egile, priñsed ha sent o tond da daoulinañ diraki ; an aotrou sant Erwan, Charlez Bleiz, sant Visant Ferrier, Frañseza Amboaz, an Tad Maner.

Chapel an aotrou baron a Rostren a 'n em gavas souden re enk da rei degemer d'an oll belerined. Ar baron Per a zavas eun iliz, hag ouz an iliz eun ti chalonied (27 a viz Eost 1483). Neb leh en Breiz ne oe neuze kaerroh pelerined d'ar Werhez, gand heh iliz uhel, frank ha skeduz, bet laket en-dro dezi ijin ha madou braz : he chalonied, he noblañs, rag aotrounez Rostren 'oa, koulz lavared, 'n ouestlet dezi korv ha kalon.

Hirie ne chom ken, euz oberou an amzer goz, nemeur a dra en tu-hont d'ar zoñj ha d'an ano : n'eus ken nemed ar garantez hag an doujañs en-keñver Mari, ar re-ze n'o-deus ket koahet⁷².

Er bloavez 1793, pa rankas kuitaad heh iliz ha tehel, eur wech c'hoaz, a-raog kounnar an dud divadez, e kavas en Rostren eun ti kristen da rei dezi repu.

Den, avad, 'n-ije kredet neuze e tizroje c'hoaz d'heh iliz hag e vije kinniget dezi, kant vloaz goude, kaerrañ enor he-devoa bet biskoaz.

Er bloaz 1888, eur bugel euz Rostren deut da vezañ eskob Sant-Brieg, an aotrou Bouche, a fellas dezañ trehi war baroned Rostren o-devoa greet kement evid ar Werhez. Eun dra a vanke da rouanez Kerne : eur gurunenn. An aotrou Bouche he goulennas digand an Tad Santel ar pab Leon XIII, hag e oe aotreet dezañ raktal. Pebez levenez e-touez ar gristenien ! Ne oa ket eur galon ha ne dridje o soñjal e oa deut tro ar vugale da ziskouez d'o Mamm drugarezuz o anaoudegez vad hag o harantez. Soñj a zeue deze euz ar burzudou greet ganti en o heñver : en Pellan hag en Ploerdud, diou wreg pareet goude ne oa ken louzou ebed evite ; eun den euz Bonen, eun all euz Groñvel, eur meliner euz Plougernevez, mab eur bouloñjer euz Rostren, tennet a-dre skilfou ar maro, rentet deze ar yhed o-devoa kollet.

Eur barrad kañvou a deuas, siwaz, da veskañ kemend-all a levenez : an aotrou 'n eskob Bouche a oe galvet da zegemer eur gurunenn en neñvou, a-raog ma 'n-evoa gallet kuruni e Vamm war an douar.

An aotrou Fallières a achuas e labour, gand skoazell an aotrou Péchoux, person Rostren.

An 2 a viz Gouere 1900, e teuas eskob Sant-Brieg, ha seiz eskob all gantañ, da lakaad war benn ar Werhez eur gurunenn aour kinniget gand unan euz kerent an eskob maro.

Dour-bil a ree, evel en deiz ma oe kurunet an Itron Varia Wir Zikour Gwengamp.

Daoust da ze, ugent prosesion ha tri-hant beleg a oa deut d'ar gouel hag a reas en-dro da Rouanez Kerne eur gurunenn a enor kalz skedusoh c'hoaz 'vid an hini a laked dezi war he zal.

An overenn-bred a oe kanet gand an aotrou Dubourg, eskob Moulins : an aotrou Olier, rener kloerdi Plougernevez, a reas eru brezegenn hag a unanas an oll galonou en harz treid ar Werhez. Veni, coronaberis : deut, ma vefet kurunet.. Pevar beleg a zoug ar skeudenn beteg an aoter. Mouez an eskob a gan ar Regina cœli :

Alleluia ! na pebez joa

Deoh-hu, Mamm a garantez

Pan eo achu, e krog er gurunen aour hag e poz anezi, gand eun dorn hag a gren, war benn ar Werhez : « Evel ma kurunom ahanoh war an douar, emezañ, ra vefom kurunet gand ho Mab en neñvou ! »

D'abardaez, an amzer o vezañ deut gwelloh, ar prosesion a yeas er-mêz, - kaerrañ hini 'oe gwelet biskoaz en ruiou Rostren – en eur ganañ gwerziou ha kantikou. An aotrou Evenou, rener kloerdi Sant-Jakez, a reas neuze d'ar bobl eur brezegenn en brezoneg.

Beb bloaz, gand ar 15 a viz Eost, pardon an Itron Varia a zegas da Rostren e-leiz a belerined.

Ar 14 ; da greisteiz, e vez douget ar Werhez kurunet war he zron. D'abardaez-noz e vez kanet ar gousperou kentañ, ha greet ar prosesion a-deuz da ruiou kêr sklêrijennet. 'Pad an deiz hag en noz, e vez beleien o kovesad. Ar 15 e vez overennou adaleg 5 eur. Da 9 eur hanter, eh a ar prosesion d'ar feunteun, ha da 10 eur e vez kanet an overenn-bred. D'abardaez, goude ar gousperou, ar prosesion a ya adarre er-mêz, hag ar bobl a gan a-greiz-kalon gwerz Itron Varia Rostren, 'leh ma kaver war an dro yez kaer ha feiz virvidig on tadou :

Mamm Zantel da Zoue, Itron Varia Rostren

Rouanez ar gêr-mañ, selaouet on bedenn.

Digoret ho tivreh, digoret ho kalon,

Da rei d'ho pugale ho pennoz, o ! Itron.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Sant-Karre

En lanvelleg

Goueliou ar Pantekost

Er bloaz 1694, e oa o chom e kêriadenn Sant-Karre, en Lanvelleg, eul labourer paour, e ano Bizien Yann, hag en-devoa eur garantez tener evid ar Werhez Vari. E vamm he-doa gouestlet anezañ d'an Itron Varia adaleg ma oa ganet, ha kenatñ tra a zeskas a oa ano Itron Varia Sant-Karre hag istor he chapel hag he devosion.

‘Dal ma reas e gammejou kentañ, ar bugel a baras e zaoulagad war dismantrou ar chapel-ze bet gwechall darempredet gand pelerined e-leiz. Mar vije trist e galon o weled he stad truezuz, ne baoueze ket da bedi ar Werhez gand fiziañs, oh adtremen en e spered ar pezh en-devoa desket war varlenn e vamm.

Gwechall, war-dro ar VI^{ved} kantved, eur zant a ziskennas euz Breiz-Veur en Arvor, e ano sant Karre. Deut ‘oa da heul sant Eflamm hag e gompagnunez : sant Kemo, sant Tuder, sant Harran, sant Kirie ha sant Merin. Eun ti-bedi a zavas, en enor an Drinded, en kichenn Roh-al-Laz, en eul leh a zoug c’hoaz an ano a Lan-Karre. Eun all a zavas en *Sant-Karre*, hag ahane e valee dre ar vro, o prezeg ar feiz d’an Arvoridiz pagan, en e zorn skeudenn Gwerhez ar Seiz-Glahar, an Itron Varia-Druez.

Chapelig Sant-Karre a badas pevar-hant vloaz, ha neuze e kouezas en he foull. Adsavet e oe kalz kaerroh, hag ar chapel nevez a oe pleustret e-pad pemp-kant vloaz all gand oll gristenien ar vro. Neuze e oe diskaret d’he zro, n’eo ket avad, gand an amzer, gand dorn an dud an hini ‘oe. Brezel ar *Re Unanet*, hag a reas en Breiz kemend a reuz, a dremenas warni hag he fladas d’an douar. Skeudenn ar Werhez, zoken, a oe kollet.

Koulskoude, an devosion a harzas ouz an amzer hag ouz ar brezeliou. Ar chapel hlaharet a gavas skoazell en he dienez : an itron a Rozabaou a roas eun tamm leve dezi er bloaz 1620, ha Yann ar Rouz a zavas eur groaz en he hichenn hag a stagas outi eur pezh kaer a zouar er bloaz 1642. Moarvad, kement-se a reas d’ar Werhez trei he sellou war-zu he bugale a Lanvelleg, hag e tibabas unan aneze da adsevel dezi he chapel hag he felerinaj ; hennez a oa Bizien Yann.

Teir gwech, war a lavarere, en em ziskouezas dezañ, evel m’en-devoa en em ziskouezet, nebeud a-raog he Mamm, an itron santez Anna, d’eul labourer all, Nikolazig. Teir gwech e lavarere dezañ e oa kuzet he skeudenn en douar dindan ar chapel goz. Strafuillet ha nehet-oll, Bizien a yeas da houlenn kuzul digand e berson,, an aotrou Nikel. « Pedet ha klasket, eme an aotrou person, ha mar deo ar vouez a-berz Doue, e kavfet. »

Kaoud a reas. Eun abardaez-noz, ma oa eet e-unan da doullañ leh ma oa merket dezañ, e tizoloas skeudenn an Itron Varia⁷³, hag hi ken yah ha pa vije bet nevez-hreet. An den paour, leun a levenez, mui evid pa ‘n-ije oll deñzoriou ar bed, a zaoulinas diraki, ha goude he fedo hag he zrugarekaad, he hasas gantañ d’e di.

An dud, pa glevjont ar helou, a deredas da Zant-Karre ; en ti Bizien, anvet adaleg neuze *Ti ar Werhez*, e oe adsavet ar pelerinaj koz.

Mez ar chapel a oa red adsevel ivez. Bizien, e amezeg Yann Guiyomar hag Erwan Brigant, noter, a ‘n em glevas o-zri evid se. An aotrou kont Perien, perhenn Sant-Karre, a roas douar, hag ar Werhez a ziellas ar marhad dre e-leiz a viraklou. An aotrou Nikol, person Lanvelleg, amgredig beteg-henn, a houlennas neuze digand an aotrou Kermeno, vikel-vraz Dol, o chom en Lannon, aotre da adsevel ar chapel ha d’overennañ enni, abalamour, emezañ, d’ar burzudou braz a hoarveze e Sant-Karre.

⁷³ e tizoloas skeudenn an Itron Varia : lenn ar pezh e-neus skrivet Anatole France diwar an dizoloadenn-ze.

Savet e oe ha benniget, gand an aotrou Nikol, an eil sul a viz Kerdu 1695, dirag eur bobl diniver ha c’hweh prosesion, Lanvelleg, Plufur, Plounerin, Plouared, Plounevez ha Logivi. Pemp bloaz goude, e oe benniget tri gloh nevez.

Ar pelerinaj a adkrogas neuze kaerroh ‘vid na oa bet biskoaz. Dond a raed da Zant-Karre beteg euz Brest, Skaer, Rostren, Laruen, Pleuzal. Pelerined a ra badezi bugale ganet eno, darn all, skoet gand ar hleñved, e tegouez deze mervel hag a gav en Sant-Karre dor ar baradoz, *Porta cæli*.

Er bloaz 1705, adaleg goueliou Pask beteg ar Pantekost, e oe laket 700 overenn en chapel ar Werhez. Hirie, e haller c’hoaz, heb neb gaou, lavared e tremen ouspenn ugent mil pelerin dre ar chapel venniget, etre sul ar Pantekost ha sul an Drinded.

Parrouzianiz Lanvelleg hag o beleien ne lezfont biken da vond da hesk ar feunteun a hrasou, strinket en o zouez.

Ar pardon a vez greet euz ar haerrañ, beb bloaz, en-kerz goueliou ar Pantekost, sadorn, sul, lun ha meurz.

Da oueliou ar Werhez, an 2 a viz C’hwevrer, ar 25 a viz Meurz, ar 15 a viz Eost, an 8 a viz Gwengolo hag an 8 a viz Kerdu, e vez overenn-bred, gousperou ha prosesion e-barz ar chapel.

An eil sul ar miziou all e vez overenn-veure.

War ar pemdez, ‘vez overenn d’al lun, d’ar gwener ha d’ar zadorn aliez.

Gand kovesad, komuniañ ha pedi evid mad an Iliz, ar belerined a hall gonid iñduljañsou braz e-pad eizved ar Pantekost ha da oueliou ar Werhez, pa vez overenn-bred en Sant-Karre.

Itron Varia druez,
Mamm vad ha karantezuz,
Pedet evidom bemdez
On Zalver, ho Mab Jezuz.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia an Enez en parrouz Goudelin

Eil sur a viz Gouere

En penn kentañ an XI^{ved} kantved, e veve en Goudelin eun itron a renk uhel, Mari Porstevnou, muih anavezet dindan an ano “Marie de Goudelin“. Ar plah-mañ a dremene heb amzer o pedi hag o skuill oberou mad en-dro dezi.

Lenn a reer en istor Goudelin penaoz unan euz bugale an itron-mañ, o vezañ eun devez en-kreiz ar mor braz, eur barr-amzer spontuz a zavas, hag e oa al lestr da vezañ lonket gand ar gwagennou diroll. An den yaouank, strafuillet oll, ne ouie petra d’ober, pa deuas da zoñj dezañ euz an hini a anver “Steredenn ar Mor“. Daoulinañ a reas raktal en e lestr hanter leun a zour, hag e zaouarn juntret war e galon, en em ouesltas d’ar Werhez Mari, a zelaouas e bedenn hag a reas dezañ ‘n em denn ahane heb droug.

Evid trugarekaad ar Werhez euz ar burzud-mañ greet en-keñver he mab, Mari Houdelin a lakaas sevel, gand meneh “Beauport“, eur gaer a chapel en enor d’an Itron Varia. Eun dosenn a oa bet dibabet evid diazezañ anezi, mez etre teir gwech e tegouezas d’ar vein bezañ diskennet, e-pad an noz, en eun draonienn leun a fank hag a hrenneugellou⁷⁴. Ar burzud-se a ziskoueze sklêr he-devoa c’hoant ar Werhez e vije savet eno he chapel. Ar vrud a redas buan dre ar vro, hag a-boan ma oa achu al labouriou, e veze gwelet tud a-vandenn a hoarvezas en Goudelin, burzudou a bep seurt, burzudou evid ar horv, burzudou evid an ene. Mari ne skuize ket o skuill grasou war he bugale.

Beteg an XVIII^{ved} kantved, ar chapel a oe renet gand eur manah euz manati “Beauport“. E-pad an dispah braz, chapel an Enez a oe serret ha skeudenn ar Werhez klenket gand tud a zoujañs Doue.

Pa deuas adarre ar peuh, ar skeudenn a zistroas d’he flas. Koulskoude, ar chapel, deut da vezañ tra ar Gouarnamant, a chomas serret ; ne zigoras nemed er bloavez 1831, dre urz ar roue Loiez-Fulup. ‘Benn neuze, eul lodenn vraz anezi a oa krog da vond en dismantr ; an aotrou Desbois, person Goudelin, a reas he adsevel, hag abaoe, he dorjoug ‘zo digor adarre.

An eil sul a viz Gouere en em gav pardon an Enez. Adaleg ar zadorn e tegouez pelerined a bep tu. Da eiz eur noz, e vez kanet ar gousperou kentañ, ha raktal goude, eh eer en prosesion. Ar bourk a vez sklêrijennet evel en deiz. Tachenn ar chapel hag an hentchou war-dro, a vez goloet a gristenien. ‘Kreiz ma vezer oll o kanañ meulodi da Vari, eun êl gwisket kaer a ziskenn diwar veg an tour da hwezañ an tantad, ha kerkent e teh war e giz.

Ma vez kaer an noz a-raog ar pardon, ar zul a vo kaerroh c’hoaz. Adaleg goulou beteg noz du, ar chapel a vez leun-kouch dalhmad, hag eun dudi eo gweled gand peseurt devosion e peder eno.

Tadou, mammou,tud yaouank ha bugale, an oll a deu da zaoulinañ war ar pavez, dirag ar skeudenn zantel, da lavared dezi o levenez, da gontañ dezi o zrubuillou, da zisklêriañ dezi o ezommou : da houlenn diganti he grasou.

Sant Eler

Sant Eler ‘vez enoret ivez en Enez, da goulz ar pardon. D’ar zadorn d’abardaez, d’ar zul ar beure ha d’ar zul goude ar gousperou e teu e-leiz a dud a-ziavêz gand o hezeg, da bedi dirag he skeudenn : eul lodenn vad euz ar prof eo dezi e vez kinniget.

Iñduljañs vraz a zo da honid en Enez, deiz ar pardon, ha ‘pad an eizved.

O ! Iton Varia an Enez,

⁷⁴ a hrenneugellou : ibiliouigou.

*C'hwi 'zo on douster, on buhe',
On esperañs war-lerh Doue.
Neb n'ho kar ket, o ! Rouanez,
Euz Breiz n'eo ket hennez.*

Pardon ha pelerinaj Itron Varia arFeunteuniou

en kêr Pontreo

Trede sul a viz Gouere

An Itron Varia Feunteuniou eo patronez Pontreo e leh eo enoret abaoe pell amzer.

Pegoulz, perag, gand piou e oe savet he chapel diazezet ‘uz d’ar gêr war lein ar roz ?

+ Nemed ha greet e vez bet war-lerh eur gouestl pe eur burzud, a-hend-all n’oufer respont netra.

Eur halvar kaer ha teir feunteun a zo war he zro hervez stumm al lehiou santel ha burzuduz.

Pell a zo eo bet deoh gouestlet
Ar horn-mañ euz Breiz-Izel
Gand on zadou eo bet laket,
Gwerhez, dindan ho skoazell.

Nag a wech, o ! ma Mamm zantel
Eh int deut, braz ha bihan,
Da zaoulinañ en ho chapel ;
Savet e-tal teir fantan⁷⁵.

Evel-se e lavar ar hantik.

Ar Werhez he-deus diskouezet dre galz a viraklou, e pli dezi bezañ enoret en Pontreo hag er parrouziou tro-dro⁷⁶, dindan an ano a Itron Varia ar Feunteuniou, ar feunteuniou-ze o vezañ ‘vel ar skwer euz an oll hrasou a skuill war he bugale.

Nag a vartoloded trehet gante ar mor hag an arne, dre ma oa dorn an Itron Varia o sturiañ o bagou.

Nag a walennou oh ober reuz e-barz ar parrouziou diwar-dro, ha ne gredjont ket tostaad ouz kêr Bontreo diwallet gand ar Werhez ! Nag a beher dizroet ganti ouz Doue !

Gand se an devosion en he heñver ne ra nemed kreski. Beb bloaz, pa degouez koulz he fardon, Pontreo a zilez pep pres ha peb labour evid ‘n em rei oll d’enori he Fatronez. Gand gouleier ar prosesion-noz hag ar chadennadou tan stignet war an oll dier-kêr a lugern ‘vel eur berlezenn hag a ra d’an Itron Varia eur gurunenn a mil ha mil steredenn.

En noz a-raog he fardon
Dre on ruiou kempennet
C’hwi a dremen, o ! Itron,
Seder ha joauz-meurbed.

Douget gand ho martoloded
En-dro deoh ho pugale,
Dindan an neñv steredennet
C’hwi ‘vo kaer ‘vel goulou de’.

⁷⁵ fantan : feunteun, evid ar rim.

⁷⁶ parrouziou tro-dro : **notenn gand an oberour** : He chapel a oa stag gwechall ouz parrouz Kemper. (**Notenn gand Embann an Hirwaz** : Kemper-Gwezeneg).

Ha mar bez sklêr bolz an neñvou,
Ruiou Pontreo ‘vo ive’ :
En noz-se, gand o gouloioù,
E vint sklêr evel an de’.

Taolet zo bet ple⁷⁷ penaoz biskoaz an amzer fall ne harzas ouz ar prosesion noz da vond er-mêz. Gwelet eo bet ar glao o tevel pa deue koulz ar prosesion hag oh adkregi adarre gwasoh ‘vid biskoaz, kerkent ha ma veze dizro d’an iliz.

Koulskoude eun dra a fellfe c’hoaz evid kreski enor ar pardon : eur chapel nevez d’an Itron Varia, testeni a anaoudegez vad ‘vid an amzer dremenet, hag eienenn a hrasou kaerroh c’hoaz ‘vid an amzer da zond ; eur chapel nevez-flamm, ma on-dije esper da weled an Itron Varia enoret en Pontreo hag ar gristenien, a rumm da rumm, o pignad beb bloaz da dachenn he fardon, o kanañ dezi kantik ar vartoloded :

Miret on bagou, on listri,
Itron Varia Fantaniou.
Gret na noazo d’ar verdeidi
Nag avel, na kurunou,
Na kerreg, na gwagennou.
Ni ‘ouestl Deoh on halonou.

⁷⁷ Taolet zo bet ple : tergereig ; Taolet ez eus bet ple

Pardon ha peleinaj Itron Varia ar Goz Yeoded⁷⁸ en parrouz Plouleh

Trede sul a viz Mae

Ar pelerin a bleustr, ‘vid ar wech kentañ, douar santel ar Goz-Yeoded, a wel en unan euz ar haerrañ taolennou a oufe Breiz-Izel dispaka dirag an daoulagad.

Ne oar, da gentañ, ouz petra selled, pe ouz ar mor braz kompez heñvel ouz eur vantell hlaz divent, eur voulouzenn wenn war he zro ha steredennou arhant o lintra a vilierou, war e horre, pe ouz an douar, kosañ tamm en Breiz, marteze, bet pleustret gand kristenien.

War ar hourenezenn vihan-mañ, ar Beg Leger, ‘vel ma vez greet anezi, e oa gwechall eur gêr, heh ano Lexobi, bet savet gand ar Hallaoued koz⁷⁹. Ar Romaned he hemeras, rag eul leh brao da zivenn e oa, gand mor ha traoniennou tro-dro, hag eun hent enk o stagañ anezi ouz an douar-braz. Roudou a bep seurt o-deus lezet war o lerh, magorennou⁸⁰ koz, feunteun volzet kaer, danvez studi ‘vid an dud a ouiziegez.

Ar gristenien d’o zro, he gonezas d’ar feiz kristen nebeud amzer goude donedigez On Zalver, hag a zavas enni eur chapel d’ar Werhez, hag eun eskopti. Ar pelerin, en deiz a hirie, a dro dreist-oll e zellou war-zu ar chapel-ze, kaerroh c’hoaz en he sav, en-kreiz kemend-all a zismantrou stlabezet en-dro dezi.

Gwir eo, adhreet eo bet meur a wech ; er bloaz 1858, eun tiegez kristen euz ar vro o vezañ roet prof a-walh, e oe savet a-nevez, nemed e oe miret kemend a gaer a oa ‘barz an hini goz, ‘vel al lein-aoter dero kizellet, ‘barz ar hreiz anezañ gwele ar Werhez hg ar Mabig Jezuz.

Abred eta e oe anavezet er Goz-Yeoded devosion ar Werhez, peogwir e lavarar e oa distrujet kêr, gand an Normaned, ‘benn ar bloaz 837, hag e oa ‘benn neuze tremenet enni 72 eskob.

War-lerh an dismantr, an eskopti a oe kaset da Landreger, en amzer sant Tual ha sant Ruelin, dre urz Nevenoe, roue Breiz ; mez ar Werhez ne dehas ket, ha hirie, war-lerh ar Hallaoued, ar Romaned, war-lerh an Normaned ivez, n’eus ken eno perhenn nemeti.

Bremañ zo eun daou-hant vloaz bennag, ne oa ket, war bouez diou pe deir leo euz ar Yeoded, eun tiegez kristen ha ne yaje da bardonañ da di ar Werhez, koulz pe goulz e-pad miz Mae ; rag anez bezañ greet en miz Mae, ar pelerinaj ne dalveze netra.

Er mare ma oa adsavet ar chapel (1858), e veze kanet enni eun overenn-bred, an 30 a viz Ebrel, da hanternoz, dirag pelerined deut a bell bro, koulz a Leon ‘vel a Dreger. Bremañ eo kollet ar hiz-se, mez da viz Mae e vez overenn ha gousperou bep sul.

Ar Yeoded a zo hag a vo bepred eul leh devod ha darempredet gand kristenien Vreiz-Izel ; a yelo di da bedi ‘barz en kentañ ti a zavas ar Werhez en o bro.

Ousepnn en Breiz ez eo brudet ; a bep korn a Frañs e teu tud da ‘n em ouestlañ d’an Itron Varia ha da lakaad pedi evite dirag he skeudenn.

Gloar d’ar Werhez, er Goz-Yeoded,
Meuleudi d’he Mab benniget.

⁷⁷ : Yeoded : euz al latin “Civitatem“, deuet da veza “keoded“ ; e Kemper ez eus eur ru a zo “ru ar geoded“ he ano.

⁷⁹ ar Hallaoued koz : ar Halianed.

⁸⁰ magorennou : ? mogeriou.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Gwioded⁸¹ en parrouz Laruen

Sul kentañ a viz Mae

War-dro ar bloaz ma 'n em ziskoueze en Lanvelleg, d'he servijer Bizien Yann, ar Werhez a gomze ivez ouz Glod Alan en Laruen. Treger ha Kerne o-deveze war an dro an eurvad da weled Mamm Doue o tond da ziazezañ he zron en-kreiz o douarou.

Er bloaz 1602, e oa kernez en Breiz-Izel. An dud paour diwar ar mêz o-devoa poan bevañ ; dre oll, tadou ha mammou a bede Doue da zelled a-druez ouz o bugale prest da vervel gand an naon.

En eur gêriadenn euz parrouz Laruen, Krehmorvan, eur hemener anvet Glod Alan, daouzeg a vugale dezañ, a oa ankeniet-braz o vezañ 'nevoa ken eur begad da rei deze ; ne oa ken en ti nemed eur skudellad bleud. Petra 'oa se da vagañ kemend all a dud hag oll digor-mad o halon ? Alan a oa devod-braz d'ar Werhez ; hag eñ o kemer e wenneien diwezañ hag en hent 'trezeg ar velin, e chapeled en e zorn.

Arru e-tal ar gêriadenn anvet gwechall Koadkoustrenneg, ha hirie ar Gioded, e klev eno, en-kichenn ar waz, eur vouez flour-meurbed o hervel anezañ.

Glod Alan, eme ar vouez,, et da Votoa⁸², ha lavaret d'an aotrou person e fell din e vefe savet amañ eur chapel em enor hag en enor da zant Yann, deskibl muiañ-karet ma Mab Jezuz. Hag evid ma kredfet eo Mamm Doue a lavar kement-mañ deoh, c'hwi 'welo burzud hirie. Ar skudellad vleud a zo en ho ti a vago tud ha c'hwi e-pad meur a zevez.

Evel ma 'devoa lavaret ar Werhez, e c'hoarvezas. Glod Alan hag e dud o-devoa leiz-kov, e-pad eun nebeud deiziou, gand o skudellad vleud. Leun a levenez, setu an tad da Votoa da gomz ouz dom Gregor Raoult, ar person. Hemañ, avad, n'hen kredas ket : kaer en-devoe distrei eun eil gwech, ne gavas gantañ nemed komzou treud ha goapauz ; an aotrou person a gemere Alan 'vid eun huñvreer pe eur foll. Ar paour-kêz den a oa glaharet ken a oa. Ar Werhez a gomzas outañ eun deirved gwech : « Et-c'hwi, emezi, ha bezet dineh ; ar wech-mañ person Botoa ho selaouo. »

Ar Werhez n'eo ket gaouiad ; ya, dom Gregor a oa deut da gredi, rag digarez a oa bet roet dezañ : deut e oa dall.

Ar person a yeas en prosesion da Goadkoustrenneg, renet gand Glod Alan. O ! burzud Kerkent ha ma 'nevoa taolet troad war douar Mari, e teuas dezañ ar gweled. Skeudenn ar Werhez a oa eno, nevez savet, rag el leh-mañ he-devoa bet c'hoaz eur chapel. War ar skeudenn e paras, da gentañ, sellou ar person ; dond a reas d'he briata en eur ouelañ hag he dougas gand kalz a stad beteg eur mên a weler c'hoaz hirie war dachenn ar Gioded.

Ar burzud-mañ a reas kalz a drouz dre ar vro hag a zegasas kristenien e-leiz da Goadkoustrenneg. Eun tamm lochenn a oe savet gand koad ha balan, evdi repui ar skeudenn venniget, da hortoz gwelloh.

An aotrou Daniel a Francheville, eskob Périgueux, hag a oa kalz euz e leve e Laruen, a deuas ivez da Goadkoustrenneg ; o vezañ anavezet ar wirionez, e roas douar hag arhant da zevel eur chapel.

War ze, pep hini a deuas da rei e damm, hervez e zamm. 'Benn ar fin e oe dastumet anoiou seiz mil den hag a ginnige leve evid sevel ha derhel chapel ar Werhez.

Savet e oe ha anvet eur beleg d'overennañ ha da govesad enni bemdez. Burzudou a bep seurt, tud vud, tud dall, tud kamm, pareet, a lakaas ar gristenien da zeredeg muioh-mui d'al leh santel. Ar pelerinaj a yee beb bloaz war greski, pa deuas an Dispah da laerez ar chapel ha

⁸¹ Euz al latin "civitatem". Gweled "Yeoded".(marteze)

⁸² **Notenn gand an oberour** : Laruen a oa neuze dindan Botoa, koulz ha Kannel, Santez-Trefina ha Kerlen.

d'he serri. Eun den euz ar barrouz, e ano Hamon an Neëun, a glaskas, zoken, dispenn al labour kaer savet dre feiz Glod Alan hag e genvroidi. Diskar a reas c'hweh warn-ugent euz kroaziou ar barrouz ha taol Gwerhez ar Gwioded diwar he zron. Kastizet e oe hebdale, dre zorn ar Chouanted : ar re-mañ hen lazaz.

Kerkent ha ma oa tremenet reuz an Dispah, ar chapel a oe digoret ha kempennet a-nevez gand daou veleg euz ar barrouz, an aotrounez Yann ha Frañsez ar Penneg. Ar pelerinaj a deuas da vezañ ken brudet ha gwechall, darempredet koulz gand tud Treger ha Gwened evel gand Kerneviz.

Tamm ha tamm, ti ar Werhez a oe kaerreet, pep hini euz personed ar barrouz o lakaad endro dezañ kement ha ma halle a boan hag a arhant : an aotrounez Daniel, genidig euz Mousteru, Ar Rolland, Ar Menn, hirie person Kallag, a brenas dezañ taolennou, aoteriou, gwer livet, a reas greañ anezañ diabarz ha diavêz. An aotrou Rolland, "barz an Itron Gwioded", kaner flour hag helavar, a reas en he enor diou werz.

Abaoe m'eo adsavet ar pardon, ar burzudou a lak adarre da dridal kalon ar Vretoned. Diwezañ hini a zo bet brudet eo pareañs Augustina Fereog, euz Bulad. Ar plahig, trizeg vloaz, a oa klañv gand eun droug skoet en gwalenn he hein. N'halle fiñval nemed gand flahiou. An aotrou Quéré, medisin en Kallag, en-devoa disklêriet ne oa pare ebed eviti. He mamm a gasas anezi da bardonañ d'ar Gwioded, ar 7 a viz Mae 1905.

Gwalhi 'ra dezi he diouharr er feunteuniou, hag ahane eh eont d'ar chapel. Ar glañvourez eo red kazi he dougen. Goude bezañ bet avielet, eh a da bedi stok da skeudenn ar Werhez, hag eno, tra estlammuz, e klev 'vel eur vouez o lavared dezi : *Savet ha kerzet*.

Digeinañ 'ra gand mil boan, heb ma reud he horv, e sant eur freskadurez dispar o 'n em zilañ 'n heh izili. Setu hi 'n he sav hag o kerzed dre ar chapel : « Plommañ 'ra ! », eme ar vamm a ya da heul he merh, 'vel 'n eun huñvre, ar flahiou dindan he breh.

Adaleg neuze, Augustina Fereog n'he-devoe ezomm ebed aneze ken : da'n Itron Varia e oent kinniget.

Pardon braz ar Gwioded a vez d'ar zul kentañ a viz Eost. Da oueliou ar Werhez e vez overenn-bred er Gwioded, hag ivez beb eil sul ar miz, nemed en Azvent hag er Hoareiz.

*Itron Varia Gwioded, pedet evidom*⁸³ !

⁸³ *Itron Varia Gwioded, pedet evidom* : **notenn gand an oberour** :Diwar levr "Sanctuaire et pèlerinage da N. D. de Guiaudet, gand an aotrou Men, person Kallag."

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Sklêrder

en parrouz Perroz

Pemzegved devez a viz Eost.

Pell amzer 'zo, gouel ar Werhez hanter-Eost a zo eun deiz kaer ha meurbed santel en parrouz Perroz hag er parrouziou tro-war-dro. An oll dud a deu d'ar vro, a-dost pe a-bell, a blij deze mond beteg ar chapel savet war eur blênenn uhel, a-uz d'ar mor, chapel Itron Varia Sklêrder. Ar gwir gristen a gouez raktal war bennou e zaoulin d'ober eur bedenn ; an den badezet ha dilezet gantañ e feiz n'hall ket harz da vezañ souezet, hag aliez e teu war e vuzellou an *Ave Maria* desket gwechall war barlenn e vamm.

Hag en gwirionez, ar chapel-mañ a zo dispar e-touez ar re all ; en tu-hont ma'h eo kempennet brao ha kizellet kaer, he-deus eun istor : galloud a reer lavared eh eo chapel ar burzudou.

Bremañ zo demdost da hweh-kant vloaz, Roue Frañs, renet gand eur Breizad a feiz, markiz ar Barac'h, euz Louaneg, a oa o tistrei dezuz Bro-Zaoz. Mad 'oa an avel, sioul ar mor, glaz an oabl ha seder an oll galonou en eur dostaad ouz ar vro, ar gerent hag ar vignoned karet. En eun taol e sav eur vougenn hag a 'n em led hag a deñva evel eur goumoulenn ; an heol 'zo kuzet, an oabl teñvallaet : red eo chom heb fiñval. Mez an avel a deuas da greñvaad, hag en desped d'ar sturier, al listri a oe kaset war reier ar Jentilez. Ar markiz, dirag ar maro ken tost, a gouezas war e zaoulin ha gantañ e oll verdeidi : « O ! Mari, emezañ, Mamm Doue, Rouanez Vreiz hag ar mor, 'pezet truez ouzim ; saveteet ahanom, hag evel testeni a anaoudegez vad, me a zavo deoh eur chapel ! »

A-boan ma oa achu ar bedenn, an avel a droas krenn, hag e-leh kas al listri war ar reier, e sikouras aneze da vond war-zu an aod ; er memez koulz, 'uz da reier Ploumanah, e oe gwelet eur barr heol hag a diskouezas d'ar sturier an hent da vond da borz Perroz, 'leh eh arrujont nebeud goude. Oll asamblez, eh ejont gand feiz beteg ar menez o-devoa gwelet warnañ ar skêrijenn vuzuduz o tarzañ ; kouezañ 'rejont d'an daoulin evid trugarekaad ar Werhez. Ar markiz a brenas eul lodenn douar ha gand e zanvez e savas ar chapel brometet, hag e roas dezi an ano a Itron Varia Sklêder.

Abaoe an deiz-se, n'eo ket dihanet Mari da skuill he bennoz war ar re a deu d'he fedi ha da houlenn diganti sklêrijenn, ken evid ar horv, ken evid an ene. An dud klañv o daoulagad a deu d'o gwalhi gand dour ar feunteun, ha kalz a dizro d'ar gêr pareet, pe, da vihannañ, gwellaet. Ar mammou kristen a blij deze dougen o bugale d'ar chapel evid deski deze bale ; a bep tu ar vro, ar belerined a deu a-leiz, hag oll o-devez o mennad, hag aliez well. Mez an Itron Varia Sklêrder 'zo madelezuz, dreist-oll en-keñver ar vartoloded ; ar re-mañ, ken niveruz er vro-ze, 'zo dalhmad en riskl o buhez : o listri 'zo ken dister, ar mor 'zo ken treitour ! Abalamour da ze, a-raog kuitaad, e teuont da houlenn digand ar Werhez he bennoz ; e-pad ar veaj, an tad, ar vamm, ar pried, ar vugale, a deu aliez da zaoulinañ dirag he skeudenn venniget, hag ar martolod e-unan, mar deu dezañ, eun devez, bezañ gwallgaset, en-devez soñj euz Itron Varia Sklêrder, hag on mamm, evel gwechall evid markiz ar Barac'h, a diwall anezañ diouz ar reier, a bella dioutañ ar barr-avel fall.

Beb gouel ar Werhez e vez kanet er chapel an overenn hag ar gousperou, mez gouel hanter Eost eo ar pardon braz. An deiz a-raog, da zerr-noz, gousperou, prosesion ha tantad ; abred diouz ar beure, overenn ar belerined o-deus beajet 'pad an noz, darn en gwetur, muioh war droad, kalz, zoken, war o zreid noaz. A rumm da rumm, ar chapel a vez leun-kouch beteg an overenn-bred, ha neuze, tud er porched, tud war ar vered, ha dezuz an oll galonou, eh a eur bedenn war-zu an neñvou. Goude ar gousperou, prosesion dispar, a vije kaerroh c'hoaz ma

vije nebeutoh a divroidi deut da weled ha nann da bedi ; bugale, tud yaouank, tud war an oad, a gan a-greiz kalon kantik *Bugel ar Werhez*, savet gand an aotrou Thoz, person koz Perroz.

Neb en-deus eur wech gwelet ar pardon-mañ n'hall biken hen ankouaad. ; neb en-deus, eur wech ivez, pedet en chapel Itron Varia ar Sklêrder, a blij dezañ distrei, rag eno e kavo dalhmad eur Vamm vad d'hen selaoui.

Kristenien, gouelnnom digand Itron Varai ar Sklêrder mired dim daoualgad on horv, mez kentoh c'hoaz, rei dim sklêrijenn d'anavezoud ar gwir hent on haso d'an neñvou.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia a Wir Mane

en parrouz Perret

Pemzegeved devez a viz Eost

Mari eo ar gwir menez dre m'he-deus ganet eur mab hag a zo Doue. Evid enori he braster, ar Vretoned o-deus kustumet sevel dezi chapelioù war ar menezioù ; brudetañ hini 'zo aneze eo chapel Itron Varia a War Mane, en parrouz Perret etre eskopti Gwened hag eskopti Sant-Brieg. Savet e oe, war a lavarar, bremañ zo c'hweh-kant vloaz, gand meneh abati Bon-Repos. Darempredet eo bet a-viskoaz hag en pep koulz euz ar bloaz. Ar zul kentañ a'r miz, ha da ouelioù ar Werhez, e vez lavaret enni an overenn ; ne vank gwech ebed pelerined, en deziouze, euz Gourin, euz Langonned, euz Klegereg.

Deiz ar pardon braz, ar 15 a viz Eost, e teuont a deg leo tro-war-dro. An deiz-se, ar menez, goloet a gistenien a vez 'vel santellaet gand o devosion. Darn aneze a vez diarhen hag en korv o roched ; darn all a bed war o daoulin noaz ; oll en em vodont gand pres en-dro da skeudenn ar Werhez, da bokad d'he zreid pe da gern he mantell.

Lod aneze a ra tri belerinaj er memez deiz : an overenn-veure a glevont en Kelven, an overenn-bred en Gwir Mane, hag ar gousperou en Rostren.

Parrouzianiz Perret n'o-deus ket rikour en o oll ezommou nemed Gwerhez o menez. Forz pesort darvoud a degouez, klañv, tud pe loened, dezi en em ouestlont hag e kasont prof hag overenn.

Peurvuiañ o fedennou a vez selaouet : evel-se madelezou ar Werhez a dalh beo ha birvidig he bugale.

Itron Varia a Wir Mane, diwar lein ho menez, diwallet ho pro Breiz-Izel ; pellaet diouti peb gwalenn ; miret dezi he feiz.

Itron Varia Rochefort (e Gwengamp)

N'eus ket pell amzer c'hoaz, en kichenn kêr Wengamp, en eul leh anvet Rochefort, dalhet bremañ gand tudjentil kristen ha madelezuz, e oa ivez eur chapelig hag eur pelerinaj d'ar Werhez dindan an ano a *Itron Varia Rochefort*. Gwerhez ar chapel a veze ganti dalhmad dillad ken kaer ma oe eun den, eur wech, hag a oe temptet d'o laerez. Mez pa oa o kemer ar vantell, ar Werhez a grogas 'n e viz hag hen dalhas evel-se ken ma teuas ar hloh, laket en brall dre vurzud, da zegas tud d'ar chapel. Al laer a oe tapet.

Hirie eo kouezet ar chapel ha pelerined Itron Varia Rochefort (*mankoud a ra diwez ar frazenn el leor orin*).

Pardon Itron Varia Ar Goz-Iliz

en parrouz Planiel

Pemzegved devez a viz Eost

C'hoaz zo eur plas dreist ar re all,
Ar Goz-Iliz, 'kichenn Kamarl.
Ar Goz-Iliz, en Planiel,
War vord an aod en Kamarel.

Evel-se e lavar ar werz koz, savet en enor da Itron Varia ar Goz-Iliz.

N'eo ket a-walh mond da oueliou ha pardonioù ar zent ; anaoud o doare, o buhez, a zo red ivez. Heñvel a-walh ouz ar pezh a gaver en levr *Buhez ar Zent*, ar gwerzioù savet en-dro da bardonioù koz Breiz-Izel a gaver enne ; war an dro, istor ha kelennadurez. On tadou o frene 'vel lod ar pardon, o hane hag a deske evel-se ar pep kaerrañ euz istor o Bro.

Ne vo ket gwelloc'h kentel, en nep stumm, istor ar Goz-Iliz, evid nan eo 'barz ar werz emañ amañ, war-lerh ar pennadoù kaerrañ anezi.

Sant Maodez, bet moarvad o weled Sant Tual er Goz-Yeoded, a bozas, en eur dremen en Planiel hag a chomas eno c'hweh miz da brezeg ar feiz.

Sant Maodez, deut da Blaniel
Chom e-pad c'hweh miz er hastell
Sklêrijenni 'ra an aotrou'
Badezi 'ra oll war-dro.

Moned 'reont nao eun devez.
An aotrou hag ar priñs Maodez,
An itron ha pevar bugel,
Gand diou vatez, da Gamarel.

En briz-heol euz deliou ar hoad
War vord an aod e zo⁸⁴ êr vad
War an dinenn⁸⁵ hlaz azezet,
Prezegenn Maodez da gleved.

Eil mab an aotrou, den 'n e benn
Tapoud eur rozennig spern-gwenn ;
Moned 'ra 'vid he displantañ,
Hag er mor kerkent da ramplañ⁸⁶.

Ar mor o tanzen dichalañ
'Gas an aotrou yaouank gantañ.
Ar maro sko en o halon,
An tad 'zota⁸⁷ gand ar spouron.

⁸⁴ e zo : tregerieg : ez eus

⁸⁵ dinenn : ?

⁸⁶ ramplañ : ?

⁸⁷ zota : ? Marteze ""a deu da veza sod"

War-lerh e vab en dour redet
Siwaz dezañ, neuial n'oar ket ;
Distroadet eo gand ar mare,
O-daou en riskl braz o buhe'.

Gand an itron n'e' ket desket
Pedennou ar gatoliked ;
En em lakaad 'ra da bedi
'N doueou faoz d'o farei.

Mez sant Maodez a bed ar Werhez Vari. Selaouet eo ; eur wagenn a doug an tad hag ar mab war ar zeh. Gand al levnez o-devoa e prometjont sevel eur chapel d'an Hini 'devoa o zalvet.

'Vid testeni ar burzudo',
'Tleer sevel eur chapel vrao,
Eur chapel goant pe eun iliz
Da darempredi gand Breiziz.

Sant Maodez a gan er chapel-ze an overenn gentañ hag a ya goude da Bleraneg da gerhad eur beleg da lakaad en he servij.

Ar burzudou c'hoarvezet en Kamarel o-deus gwriziennet don devoision ar Werhez 'barz kalonou ar gristenien. Setu kaerrañ hini a degouezas :

Gand pemp den a gêr Pontre'
Et en traoñ gand eur vag neve'.

O teremn der al Ledano⁸⁸,
E laavrent o fedenno',
Daoulinet o-femp asamblez
Da ouestlañ o bag d'ar Werhez.

Goude eh ejont war-raog ganti,
Evid pesketa brizili.
Nevez-grog e oa al lano,
Pa weljont bep tu gwagennou.

N'helled ket na roeñvial na levial
'Mesk ar gwagennou o ruillal ;
Daou vartolod batorlet⁸⁹ krenn
Liou ar maro en o herhenn.

Gand anken vraz en o halon, an tri all a bed an Itron Varia Gamarel, ha setu kerkent :
Daou flamm tan 'diskenas d'o had,
Unan 'yeas 'bep tu d'ar vag.

⁸⁸ Ledano : ar bae en Treo etre Plounez ha Plourio.

⁸⁹ batorlet : batorellet.

Ar Werhez, o tiskouez ar goulou deze, ar pemp martolod a zegouez en Kamarel, ouz ar vered,, hag a ra teir dro d'heh iliz. An daou houlou a ya e-barz ; int a chom ouz toull an nor da dugarekaad o Mamm vad ken ma teu, da veure, ar beleg da lavared e overenn.

Perag e toug ar chapel an ano a Goz-Iliz ? Ar werz a respont war ze, penaoz e oa gwechall teir barrouz en Planiel : Kamarel, Sant-Anton, ha Penn-al-Lann : chapel ar Werhez eo “koz iliz“ Kamarel.

Ar pardon a vez d'ar 15 a viz Eost, hag a zigor da hanternoz, dre overenn ar belerined a bleustr ar pardon muioh en noz 'vid war an deiz.

Pardon ar Goz-Iliz en-deus miret e liou kristen ; ha dre ze, glizenn an neñv a zalh da gouezañ puill el leh benniget-se. Tud klañv, tud nammet, a deu da houlenn ar yhed ; martoloded ha soudarded.

Deut da houlenn digand ho Mamm
Distrei d'ar gêr, yah ha dinamm.

Pa dizroont, e teu gante donezonou d'ar Werhez.
En penn trok euz he madelez.

Goude, e chomont da vevañ en harz ar chapel, da hortoz mond en he hichenn d'ar baradoz.

Da ganañ dezi kantik
En brezoneg, langaj o bro.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Vulad

en parrouz Bulad-Pestvien

Eil sul a viz Gwengolo

Mare an XII^{ved} kantved, er bloaveziou diwezañ, e oa o chom en Pestien, en eur hastell-kreñv savet en pleg ar zaonenn, eun dijentil pinvidig hag e wreg, tud vadelezuz ha kristenien vad.

Eun dra a vanke deze koulskoude gand o madou hag o enoriou, eur hrouadur d'o dastum war o lerh. Kaer pedi o-devoa, ne deue bugel ebed da frealzi o hozni, rag dija e oant deut war an oad. 'N em ouestlañ 'rejont d'ar Werhez, ha prometi sevel dezi eur chapel, ma teuje deze kaoud eur bugel. Hebdale, kleier ar vadeziant a gasas ar vrud e oa bet selaouet pedenn an aotrounez, ha prest goude, eur chapel goant diazezet e leh emañ bremañ Iliz Itron Varia Vulad, a roas da houd d'an oll da biou e oa dleour gwad Pestien mar n'aje ket c'hoaz da hesk.

An ano roet da Werhez ar chapel a oe Itron Varia-Bugelad, deut hirie da vezañ Bulad. An dud, pa deujont d'anavezoud perag e oa bet savet, ne oad ket evid harz aneze da zond d'he darempredi. Ar chapel a deuas en berr amzer da vezañ re vihan, hag en fin ar XIV^{ved} kantved, e oe red sevel eun all brasoh⁹⁰. Kant vloaz goude, e rankjod adarre he ledannaad, kement ha ken bihan ma 'n em gavas erfin, 'benn ar hantved war-lerh, eun iliz vraz da vezañ 'leh ne oa nemed eur chapelig ; greet he-devoa he hresk da heul devosion ar gristenien en-keñver ar Werhez.

Souezuz eo na pegen birvidig e oa an devosion-ze.

C'hoaz e reer kont, en Bulad, euz an daou vañsoner-ze, daou vreur, a houlenas chom da vevañ en-kichenn an Itron Varia Vulad, goude bezañ labouret eviti ; ar gambr ma oant o chom enni, stag ouz ar chapel, a zo anvet c'hoaz : kambr an ermited. Soñj 'zo ivez euz ar beherez vraz, Mari Briand, genidig euz Penvenan, deut er bloaz 1694, d'he fedi da zevel diwarni eur hleñved hag a ree gwall reuz e-touez an dud.

Ar pezh a oa penn-kaoz da gement-all a fiziañs eo ar burzudou c'hoarvezet el leh santel, hag o-devoa kaset ken pell brud ar pelerinaj ma oe eun eskob euz Kemper hag a lakaas war ano an Itron Varia Vulad unan euz aoteriou e iliz-veur.

Pardon Bulad a deuas eta da gad, adaleg ar XVII^{ved} kantved, lufur ha pinvidigez ar pelerinajou braz : eur prosesion kaer, eur werhez arhant, bet benniget gand kalz a lid, eur foar vraz, kleier ha n'o-devoa ket o far nemed ha re Gwengamp e vije ; feunteuniou kempennet gand mên menerez, hini ar Werhez anvet *feunteun al lêz*, feunteun *ar hog*, feunteuniou ar *Seiz Sant*, ha war-hed-taol, tro-dro d'ar bourk, ar pemp "kroaz ar salud", 'leh ma stoue ar belerined da zaludi o Mamm, pa welent beg tour he iliz o steredenni er goabrenn.

Kaerrañ oa, koulskoude, en-dro d'ar pelerinaj, e oa skoliou savet da rei deskamant d'ar vugale ; dalhet e oant gand ar beleg e karg euz an iliz.

An Dispah, ar walenn euzuz-se⁹¹ kaset gand an ivern, a reas dismantr braz e-touez kemend a vadou. Kleier, dillad overenn, taolennou, listri sakr, kement mad a oa en iliz a oa laeret nemed ar werhez arhant, a oe gallet he huzad en eun toull en douar. Dizrei a reas d'he iliz pa deuas ivez war e giz ar beleg kaloneg en-devoa he hleñket, an aotrou Touboulig, kure Pestien. Ar 15 a viz Eost 1801, e oa kaer bezañ en overenn-bred en iliz Bulad, ar beleg-mañ, kovesour ar feiz oh overennañ, dirag skeudenn vurzuduz an Itron Varian dizro gantañ d'ar gêr, goude bezañ bet deg vloaz dianket.

⁹⁰ sevel eun all brasoh : **notenn gand an oberour** : Sant Erwan a deuas da bedi er chapel-ze, en eur ober gweladenn d'e vignoned, aotrounez Pestien.

⁹¹ An Dispah, ar walenn euzuz-se : notenn gand Embann an Hirwaz : a-du e oa Moal gand ar jentiled hag ar veleien a vahome ar bobl.

Pardon an Itron Varia Vulad a vez d'an eil sul a viz Gwengolo. An noz a-raog e vez prosesion ; goude ar belerined a chom 'hed an noz en iliz da govesad, ha da ganañ kantikou ken an overenn gentañ.

Eur wech greet o fardon gante, hervez giz ar gristenien, e tizroont d'ar gêr, ar himiad-mañ war o muzelloù :

Gwerhez Bulad, Itron Varia,
Harzet peb droug d'on glahari.
Roit dim bennoz, roit dim souten,
Miret 'n on zouez ar feiz kristen.

Pardon ha pelerinaj an Aotrou Sant Matilin Monkontour

Goueliou ar Pantekost

Sant Matilin a oa ganet e Larchant, eur gêr vihan euz ar Brougogn, tost da Sens, war-dro an trede kantved goude donedigez On Zalver. E dad a oa e ano Marin hag e vamm Euphemia. Tud a noblañs e oant ha pinvidig, mez troet a-grenn gand ar fals-doueou.

Matilin a oe gounezet abred d'ar feiz kristen gand eur misioner anvet Polykarp ; eur wech badezet e hounezaz ivez e gerent.

‘Dal ma oe en oad, e oe roet dezañ gand Polykarp an urziou sakr. Ar beleg yaouank a stagas da brezeg ar feiz d’e genvroiz. Ken brudet e teuas da vezañ dre e zantelez hag e viraklou, ma oe galvet da Rom gand an impalaer Maximin, evid pareañ e verh troet he spered. Dorn an diaoul a oa ‘barz ar hleñved-se ; setu perag, pa ‘n em gavas ar zant war al lestr o vond da Rom, e lakaas an enebour eur barr avel da hweza ken e krede d’ar vartoloded e oant kollet. Mez ar zant a hourhemennas d’an avel tevel ha kerkent ar mor a zioullaas. Pa oe degouezet e Rom, e pareas merh an impalaer ; chom a reas er gêr zantel da weled an ilizou ha da bedi war veziou an Ebestel hag ar verzerien. Eno e varvas, a-benn tri bloaz, hag e oe sebeliet gand kalz a enor, dre urz an impalaer. Mez e gorv, goude bezañ douaret, a zavas war bar e vez ; ar burzud-se a degasas da zoñj d’an ofiserien a oa bet o kerhad anezañ e oa deut gante nemed goude prometet dezañ e vije dizroet e gorv da Larchand, mar deuje da vervel e-pad e dro. An impalaer a hourhemennas neuze kas ar zant d’e vro.

Eno e oe miret e relegou e-pad kant a vloaveziou, enoret gand e-leiz a belerined na skuizent ket o tond da houlenñ skoazell ar zant, o vezañ ne skuize ket, diouz e du, oh ober burzudou evite. Pedet e oa, dreist-oll, evid an dud troet o spered, ‘vid ar vartoloded hag an dud a vor.

Hirie, sant Matilin a zo ankouaet en e vro ; gand Breiziz eo degouezet an enor – ne ouier ket e pesort koulz – da vired e ano hag e zevosion. Kistinig er Morbihan, ha Monkontour, en eskopti Sant-Brieg, eo kaerrañ pelerinajou en-deus en Breiz.

En Monkontour, e bardon a vez greet d’ar zadorn ha da zul ar Pantekost. Ar zadorn eo deiz ar belerined, Gwenedourien peurvuiañ.

Eur brezegenn vrezonég a vez greet d’ar zadorn ha d’an noz e vez prosesion ar relegouer kaer ‘zo ennañ eun askorn euz tal ar zant. Eun tantad a vez elumet war grehenn ar marhallah, hag e-pad ma vez o flammañ ‘uz da gêr, ar veleien hag ar bobl a gan an *Te Deum*.

Devosion Tregeriz en-keñver sant Matilin a zo deut da goazañ, eur pennad ‘zo ; n’eus ket hanter-kant vloaz c’hoaz, e bardon a oa ken brudet en o zouez hag hini santez Anna Wened.

Ouspenn, evid an dud foll, sant Matilin ‘zo pedet ivez evid al loened, dreist-oll an ejenned, hag evid ma vo eost druz hag ed-du kaer.

Enoret eo en Kemper, en Pondaven, en Plemeur, en Beignon, en Laniskad. En eskoptiou Roazon ha Naoned ‘zo ano anezañ kazi en pep parrouz.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Glerin

en parrouz Sant-Kleve.

Sul war-lerh an Asañsion

En parrouz Sant-Kleve, ar Werhez ha sant Kado o-deus eur chapel vrudet dre ar vro. Savet er XVI^{ved} kantved gand an aotrou du Bour Blanc, perhenn maner Klerin, laket en gwerz gand ar Revolution, prenet hag adprenet, e oa roet erfin da fabrik ar barrouz gand an diwezañ perhenn.

Daou bardon ar bloaz a vez greet enni : ar pardon bihan, da Lun-Fask, n'eo ket gwall darempredet ; kalz muioc'h eo ar pardon all a vez greet sul war-lerh an Asañsion.

An deiz-se, n'eo ket dibaot gweled en Klerin pelerined beteg euz Kerne.

Bezañ zo eur hleñved, *arwez Klerin*, hag a vez pareet amañ. Dond a reer ivez 'vid ar gouliou hag ar goriou ; ne dremen devez, koulz lavared, na vez gwelet pelerined en-dro d'ar chapel, o pedi hag o kemer dour euz hini pe hini euz ar pemp feunteun a zo en he hichenn hag a ra o hiboud hag o han en-dro dezi 'pad ar bloaz : feunteun ar Werhez, feunteun sant Kado, feunteun sant Eler, hini sant Blêz hag hini sant Anton.

Itron Varia Glerin, pedet evidom.

Itron Varia ar Vur, en Montroulez

Sul an Drinded

An Itron Varia ar Vur, gand he devosion gwechall ken birvidig, gand heh iliz ken brudet, a zo eur skwer euz ar pezh a reer a gaer a hall ar relijion kroui, hag euz an dismantr a deu da heul fals kredenn ha buhez digristen.

Iliz Itron Varia ar Vur a oe savet en Montroulez, en XIII^{ved} kantved, gand an duk Yann II hag eskibien Treger, Leon, Roazon, Naoned ha Dol. Eur beleg a oe laket d'overennañ enni, ha diazezet oe enni *Breuriez an Drinded*, bet krouet kant vloaz a-raog, gand beskanted Leon.

Ne oa ket kaerroh iliz er vro, na kaerroh tour, nemed hini ar Hreisker a vije. Grasou niveruz a strinke en harz aoteriou an iliz venniget, ken e oa goloet ar mogeriou gand kant ha kant testeni a anaoudegez vad.

Montroulez a oa douget meurbed da enori an Itron Varia ar Vur ; an ofisou a veze greet en he iliz kaerrañ ma vije gallet ha kuzulierien gêr a 'n em vode en he forched d'ober o divizou.

Allaz, an Dispah a deuas gand e vorzoliou dizakr. An iliz, torret ha fraillet kement mad a oa enni, a oe laket war ano an doueez "Raison" ; gwerzet e oe, adwerzet, hag erfin, dispennet mên ha mên. An tour hepken a chomas 'n e zav, eun druez e weled 'uz d'ar poull 'leh ma oa bet an iliz. Mez pa n'evoa ken harp diganti, e teuas da vrallañ, hag an 28 a viz Meurz 1806, da eun eur goude kreisteiz, e kouezas gand eun droug spontuz, o flastrañ dindanni an tier diwardro. Eur hereour hag e verh a oe lazet. Eur bugelig, e-unan er gêr, a 'n em glenkas dindan an daol, o kleved en e gichenn an tarz kurun-ze ; kavet e oe eno beo ha yah-mad. Anvet e oe "bugel ar mirakl" ; beleg e teuas da vezañ ha person en Taole.

Skeudenn ar Werhez a oa bet dastumet en he hambr gand eur gemenerez yaouank. Er bloaz 1834, an aotrou Keramanac'h, person Montroulez, a reas sevel eur chapelig d'he degemer 'barz en bered Sant-Vaze. Eno en em gav bremañ.

Montroulez a zalh stard bepred an devosion en he heñver. Er bloaz 1895 e oe greet goueliou braz da zegas soñj euz ar c'hwehved kantved abaoe ma oa bet savet heh iliz.

Ar pardon a vez greet da zul an Drinded hag en deiz-se, ar chapel a vez bepred leun-kouch ; ar skeudenn a vez digoret hag e vez gwelet en he hreiz tri Person an Drinded santel, kizellet enni.

Itron Varia ar Vur, pedet evidom.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Kernitron

en parrouz Lanneur

Pemzegved devez a viz Eost

Breiz-Izel he-deus bet bremañ an enor hag al levenez da lakaad eiz gwech war benn ar Werhez ar gurunenn aour a Rouanez : en Gwened, en Rumengol, er Follgoad, en Kemper, en Gwengamp, en Sant-Brieg⁹², en Rostren ; ha, d'an diwezañ, en Lanneur.

Pelerinaj Kernitron Lanneur a zo euz ar hosañ a zo en Breiz en enor da Vamm Doue. He chapel a oe savet gand meneh kaset di gand sant Samson, eskob Dol, war-dro kreiz ar VI^{ved} kantved.

An Normaned he distrujas, tri-hant vloaz goude ; adsavet e oe gand meneh a Urz sant Benead, war-dro kreiz an daouzegved kantved, hag ar belerined a ya hirie da Gernitron he gwel c'hoaz en he spes oll, nemed an daou benn bet adhreet bremañ 'zo 500 vloaz.

Abalamour d'ar burzudou greet ganti en-keñver Tregeriz, burzudou ha n'haller ket niveri, an aotrou Duparc, eskob Kemper, a deuas ar 15 a viz Eost 1909, da ginnig da Itron Varia Kernitron ar gurunenn a Rouanez.

Parrouzianiz Lanneur o-devoa aozet pep tra a-benn an deiz-se : *o halonou* : e-pad an tri devez a-raog ar gouel, pedennou a oe greet en iliz ; *o hêr hag o zier*, en eur stigmañ dre-oll drapoiou, glazur, gouliou ha garlantez ; ha *park ar gurunidigez*, eur park a zaou zevez-arad, e-leh ma tlee bezañ lavaret an overenn ha dastumet ar gristenien.

D'ar zadorn da noz e oe kanet ar gousperou, ha kaset skeudenn ar Werhez euz he chapel d'an iliz-parrouz.

An aotrou Duparc a brezegas.

« Selaouet, emezañ, ar Werhez o houlenn diganeoh, a-raog degemer ho kurunenn : Ha c'hoant ho-peus e ven ho Rouanez ?

Ar c'hoant-se ho-peus, heb mar, anez ne vefeh ket amañ.

Mez selaouet c'hoaz ho Rouanez : « Ma'z on Gwerhez, ez on ivez Mamm ; ha ne fell ket din chom el leh n'emañ ket ma Mab.

Dre ze, Tregeriz, ma fell deoh e chomfe ar Werhez en ho touez d'ho pennigañ, e ranket eta bezañ fidel da Jezuz, he Mab hag ho Salver.

Gret al le-ze amañ dirag he skeudenn, ha warhoaz, dreist-oll, pa vezo laket ho kurunenn war he fenn. »

An deiz war-lerh eo an aotrou Dubourg, a gomzas d'ar bobl, en-kerz an overenn-bred kanet gand an aotrou Pichon, arheskob Kabasa. O sevel en e zav, e wele dirakañ, - kaerrad taolenn ! – 7 eskob ha tremen 300 beleg, 17 prosesion hag 20.000 a dud, en o fenn kannaded ha senedourien ar vro.

Komz a reas oute gand e oll galon.

« En lehiou ha chapelioù a zo, ar Werhez eo tenerroh he halon, hag en em blij o skuill puilloh he grasou : amañ emaom en unan euz al lehiou-ze benniget dreist an oll. »

Prestig goude bezañ savet eun iliz da zant Melar, ho tadou a zavas eun all da Vari. Emañ-hi aze dirag ho taoulagad.

Mein he leurenn a zo uzet gand botou ar gristenien euz ar hantvejou tremenet, a zeue, aliez euz a bell-braz, da rannañ o joa evel o anken gand an itron Varia, ha d'en em erbedi outi., war gorr o roched hag o daoulin noaz.

⁹² Sant-Brieg : n'ema ket Sant-Brieg e Breiz-Izel.

Ar gristenien-ze a gare, dreist-oll, devosion an tri lun, ha Gwerhez Kernitron a roe deze pe ar pare, pe o mennad.

En he chapel gwechall, flaiou niveruz a rente testeni euz galloud ha madelez Mari ; deut int da vezañ relegou, douget bremañ gand tud kamm, o hemeras en esper e rentfent deze ivez ar herzed.

Aze ar vamm hlaharet a deue da bedi evid he bugelig dinerz : ha Mari a greñvae e izili d'an êlig.

Den nemed Doue n'hallfe lavared pegement e oe karet amañ Itron Varia Kernitron : den kennebeud, nemed Doue, n'oufe lavared pegement a hrasou a gouezas dre he daouarn war gristenien an amzer dremenet.

Ha bremañ, goude ma vezo bet laket eur gurunenn dezi war he fenn, *petra 'raio evidom ?*

Da vrasoh merk a enor a-berz he bugale, e respont brasoh merk a garantez a-berz ar vamm. Komprenet dre ze *petra 'vezo en ho keñver Itron Varia Kernitron, goude ar gouel-mañ. »*

An aotrou Duparc, en ano an Iliz hag en ano kristenien Vreiz-Izel ha Bro-Dreger, a bozas neuze ar hururennoù aour war bennou ar Mab hag ar Vamm, ha moueziou ar bobl a zaludas o Roue hag o Rouanez gand strakadennoù daouarn.

Goude ar gousperou e oe kaset ar skeudenn venniget war he zron d'he chapel, en keid ma kaned dezi ar himiad-mañ :

*Ha pa vo deut ar mare
Da vond da gaerroh bro,
C'hwi on hurunno neuze
En Baradoz d'ho tro.*

Pardon Itron Varia Kernitron a zigor beb bloaz d'ar 14 a viz Eost, d'abardaez, dre ar gousperou, ar prosesion hag an tantad.

Abaoe lid ar gurunidigez, ar gristenien a deu muih-mui da bedi ha d'enori an Hini a doug evite bremañ, war an douar evel en neñv, kurunenn ar galloud hag ar vadelez.

Itron Varia Kernitron, pedet evidom !

Pardon ha pelerinaj **Sant Yann ar Biz**

23 ha 24 a viz Even

Parrouz Sant Yann, savet abaoe ar Revolusion, a zo bet kresket, koulz lavared, dre vertu ar biz santel⁹³ e teuer di da enori. Da gentañ ne oa diouti nemed eun nebeudig tier hag eur chapelig gouestlet da zant Meriadeg, eskob Gwened. Biz sant Yann o vezañ bet degaset d'ar chapel-ze, euz an Normandi, e oe divizet sevel eun iliz evid degemer anezañ hag ar relegou kaer el leh ma oa bet laketañ gand an duk Yann V. An iliz a oe achuet e er bloaz 1513. An dukez Anna a deuas da bedi enni hag a oe pareet diouz an droug daoulagad 'n eur stokañ oute biz ar zant.

N'eus ket a bardoniou en Treger kaeroh evid hini sant Yann ; darempredet eo gand milierou a belerined a dered kalz aneze, adaleg ar gousperou kentañ, da weled ar prosesion hag an tantad : an tantad-se a vez c'hwezet, lein an tour, gand eun êrouant o tiskenn a-hed eur gordenn.

En sant-Yann eo divennet an dañsou da zeiz ar pardon, dre zoujañs evid ar zant, bet dibennet war houlenn eun dañserez. Eur wech, eun ostiz a gredas terri al lezenn, ha lakaad ebatou en e di. An nozvez war-lerh, e oe pulluhet, gand an tangwall, kement mad en-devoa.

*Aotrou Sant Yann Vadezour,
pedet evidom.*

⁹³ dre vertu ar biz santel : E Plougastell –Daoulaz ez eus eur groaz a zo heh ano “Kroaz ar biz“ ; Ema e biz ar vourh. Ha ne vefe ket heñvel evid ar “biz“ mañ ? Souezuz-kenañ e vefe erruet biz sant Yann beteg eno.

Pardon ha pelerinaj Itron Varia Perroz Hamon

en parrouz Pleraneg

Miz C'hwevrer

Tud an Arvor, martoloded kalz aneze, a blij deze kaoud, demdost d'ar mor, chapeliou gouestllet d'ar Werhez evid ma santfent vad o parañ warne, en-kreiz o beajou riskluz, daoulagad o Mamm vadelezuz.

En Pleraneg zo unan euz ar chapeliou-ze 'baoe pell 'zo, da zarempredi gand ar vartoloded hag o herent, chapel Itron Varia Perroz-Hamon.

Abaoe ne reer ken en Pempoull padon an Islanded, eo da Berroz-Hamon e teu, ar muiañ, a verdeidi da gas o frov hag o fedennou. Eno en em dastumont, diou wech ar bloaz, diarhen hag en korv o roched, da Veurz Fask, hag an deiz ma vez klozet ar retred Pask, laket abalamour deze da viz c'hwevrer. Euz Pempoull, Plounez, Ploueg, Keriti, e vez tud ; en deiz-se, e Pleraneg. 'Benn koulz ar gousperou, ar prosesion a ya euz ar bourk da Berroz, gand e groaziou hag e vannieliou kaerrañ ; an enor-ze, mar eo dleet d'ar Werhez, a zo ivez 'vid ar vartoloded a deu en deiz-se da 'n em ouestlañ dezi ha da houlen he skoazell, p'o-devo kuitaet o zud, ha pa n'o-devo ken, en-kreiz riskl ar mor braz, rikour ebed nemeti.

Goude ar gousperou, ar prosesion, gand ar Werhez douget war diou skoaz ar vartoloded, a bign, a-dreuz al lanneier, beteg ar grehenn uhellañ euz a leh ma weler, du-hont er pellder, ar mor hag an oabl o tond da 'n em bokad. Eno 'vez azezet ar Werhez war eun tron, ha neuze, ar bobl, bodet war-dro, a zav 'trezeg dezi he mouez klemmuz hag a asped anezi, en he hantikou, da ziwall ar vartoloded kêz ken dister dirag ar mor braz, da vired an tad d'e vugale, ar pried d'e bried, ar mab d'e vamm.

An Itron Varia a vez tenerraet gand pedennou ken birvidig ; diouz he halon e strink eur bennoz war he bugale, ha war ar mor gourdrouzuz e rankont fizioud ennañ o buhez ha buhez o zud.

Ma zo hini pe hini euz ar beskaerien hag eo laket e varo dezañ du-ze, en-kreiz mor teñval an Island, hi a roio dezañ gras eur maro mad, ha pa'z ar ruo ar helou trist er gêr, pa deuio ar vamm hag ar vugale emzivad da ouelañ en harz he zreid, hi, gand eun dorn flour, a zeho o daerou hag a lako c'hoaz frealzidigez hag esperañs en o halonou rannet.

Pa vezer dizro d'ar chapel, eur beleg a bign er gador, hag a zispleg dirag ar belerined, gand komzou frêz ha birvidig, ar pezh a zant pep hini en don e galon. Neuze, daerou puill a red, bep ma tistag ar prezeger dirag an daoulagad an daolenn, trist a-wechou, hag aliez buruduz, euz ar pezh a dremen etre ar mor treitour, ar pesketaer paour, hag ar Werhez, e Vamm hallouduz.

Achu ar brezegenn, an dud hag o-devoa ranket, al lodenn vraz aneze, chom er vered, a deu da lavared c'hoaz eur himiad diwezañ d'o Mamm.

Daoust pegen pell e vefont gwentet diouti ha diouz ar gêr, en o halonou e chomo beo da viken ar fiziñs hag ar garantez en-keñver an Hini a evesa o bagou war vor ar bed-mañ, hag ar stur en he dorn, a ren aneze da borz ar Baradoz.

Itron Varia Perroz-Hamon, pedet evid ho martoloded.